

Herve Gouedard

*Karnedoù un
ergerzhour difiñv*

EMBANNADURIOÙ AL LIAMM
2020

Embannet gant skoazell Rannvro Breizh
Ezel eo Embannadurioù Al Liamm eus Kuzul ar Brezhoneg

Skeudenn ar golo : © Judicaël de la Ferrière

ISBN : 978-2-7368-0145-8

EAN : 9782736801458

© 2020 Herve Gouedard & Embannadurioù Al Liamm

Tachenn Volta 2 - 1 straed Ampère - 22300 LANNUON
sekretourva@alliamm.bzh
www.alliamm.bzh

TAOLENN

Rakger	7
Ar foll hervez an dud hag ar fur hervez Doue	9
Abati Boporzh	13
Achapadenn un danvez-skrivagner	16
An anzav	19
An dremm	22
Ar C'hab Frehel	25
Ar baourentez e Kemper en XVIII^{vet} kantved	28
Ar baleantour	31
Beg ar Rozeler	35
An aberzhad	38
Pep hini d'e dro	41
Daou vignon, pe: tonket e oa	44
Un danvez-den	48
Lili hag ar geizh	51
Dilojañ, pe: eus an eil porzh-mor d'egile	55
Dirak ar stal-besked	59
Muderezh	62
Derc'hel da vont....	65
Embrezeg Kati, servijourez e Ostaleri ar Porzh, e Loktudi ...	68
Enez-Vriad	71
Ergerzherien difiñv	74
Evel kustum, Madam Liz?	77
Galeourien e Groñwel	80
Gwin	83
Pontoù Louis Harel-de-la-Noë, e Aodoù-an-Hanternoz	86

Meurzh-Mae 1972: Harz-labour ar Joint Français	
e Sant-Brieg	89
Hent-houarn ha furnez	92
Montparnasse blues	96
Hir e vo ar goañv	99
Hor barzh paour	102
Hud ar goadeg	105
Ikar ar Faoued	108
Inizi Sant-Ke e miz Kerzu	111
Jules Grand-Jouan an Naonedad	114
Karr-boutin Pempoull	117
Pinvidik on, koulz ha nikun	120
Simon Sidorot (1825-1903), un digorer hent war dachenn an arkeologiezh	123
Kenavo Niko	126
Requiem evit un tad-kozh	129
Kintin	133
Kreiz-kêr, emit-hu?	136
Levrioù	139
Livourien	142
Loened an draoñienn	145
Louis Guilloux, Sant-Briegad, skrivagner ha stourmer	149
Louis-Marie Faudacq, maltouter ha livour (1840-1916)	153
Labour ouzh ar steudad	157
Marcel Dirou, al livour kuzh	160
1706 e porzh al Lege: Marie Balavenne hag ar Seurezed Gwenn	163
Louis Massignon ha pardon ar Seizh Sant er C'houerc'had ..	167
Mathurin Méheut, livour Lambal (1882-1958)	170
Brud va zad, pe: penaos e teuis da vezañ reder war varc'h-houarn	174
Morueta	177
Gwezenn ar morvrini	180
Ostaleri ar c'hroashent	183
Ar Rouedad Shelburn e Plouha	186
Pontrev	189
Galvedigezh	192
Horolaj Rostrenn	195

Tasmantoù Mai Gozh	198
Teir silabenn	201
Mai Gozh, e skeud Tour Saozon, e porzh al Lege	204
Waterloo	207
Miz Here 1826: Turner, al livour saoz, en Naoned	210
Bered	213
Ur gavadenn arkeologel e Karaez	217
Yves Corlay, un arzour eus an XVIII^{vet} kantved e Bro-Dreger hag e Bro-Oueloù	220

Rakger

Ar pennadoù-skrid a gavor el levr-mañ a zo bet embannet etre 2018 ha 2020 er gelaouenn sizhuniek Ya ! An hini en deus savet anezho n'eo ket bet ar brezhoneg e yezh kentañ, ha n'eo ket bet er skol kennebeut da zeskiñ yezh ar vro. Evel ar braz eus an dud e Breizh bremañ en deus ranket lakaat bec'h da zeskiñ ha da studiañ hor yezh evit adperc'hennañ anezhi. Bezit eta damantus en e geñver, lennerien, ha na zisoñjit ket ez eo al levr-mañ dreist pep tra labour un den a youl-vat mennet da vevañ ha da grouiñ e brezhoneg, en desped d'ar c'houmoul du a blav war hor yezh.

Herve Gouedard

Trugarekaat a ran :

Alan Martel evit e gentelioù, gwechall, e Ti ar Vretoned, e Pariz.

Yann-Fañch Jacq evit e evezhiadennoù talvoudus hag e basianted.

Brieg ar Menn evit e alioù poellek.

Va mignoned eus Kreizenn Abherve, e Sant-Brieg.

Tifenn ha Maxim evit o skoazell teknikel.

Ar foll hervez an dud hag ar fur hervez Doue

Anavezout mat ur gêr – n’eus forzh pehini e vefe – n’eo ket hepken gouzout diouzh hec’h istor pe chom da c’henaouegiñ dirak he savadurioù heverkañ. N’eo ket kennebeut bezañ gouest d’en em ziluziañ e milendall ar straedoù hag ar plasennoù hep skoazell un heñcher bennak. An tiez, ar c’hroashentoù, ar plasennoù, ar pannelloù, n’eus anezho e gwirionez nemet kinkladurioù kemm-digemm un arvest nevesaet bemdez : hini buhez Yann Gêriad en e liesseurted. E gwirionez, ne c’heller lavaret ec’h anavezer mat ur gêr nemet pa vezer troad-ouzh-troad gant ar boblañs. Daremprediñ bemdez paour ha pinvidik, kozh ha yaouank, lart ha treut, bihan ha bras, kamm ha tort, fur ha foll, eno emañ ar gwir zalc’h. Ha peogwir emañ ar gaoz just a-walc’h gant ar re foll, se a zegas koun din eus ar pezh a skrive Ernest Renan diwar o fenn en e gaer a levr, *Eñvorennoù bugaleaj ha yaouankiz*, bet savet gantañ da guzh-heol e vuhez. El levr-se e tezrevell Renan doare ar vuhez e Landreger, e gêr c’henidik, e-tro ar bloavezhioù 1820-1830, ha sed a skriv a-zivout ar re a oa berrboellet o fenn : « *Kalz tud foll a veze ordin e straedoù Landreger [...] Ar folled dizrouk-se, o tiskouez kement stumm a zo eus an diskiantegezh, a oa*

unan eus an elfennoù naturel a yae d'ober buhez pemdeziek ar gêr. An dud a lavare "hor follé", evel ma lavarere "nostra campagna" e Venezia. Bez' e oa anezho e seizh korn ar gêr, saludiñ a raent an dud, ha dont a rae ganto a bep seurt tezennoù kras a zegemeremp gant ur mousc'hoarzh. O c'haret a raed, ha rentañ a raent zoken servijoù d'an dud. »

Ma ! Techet a-walc'h e vefen da grediñ, goude evezhiañ pizh, n'eus ket bet kalz a cheñchamant abaoe ar bloavezhioù 1830, rak kalz diskianted a gaver bremañ c'hoazh e straedoù Sant-Brieg, peurgetket, pe, da nebeutañ, tud hag a ra traoù a vefer douget da varn evel follentezioù. Nemet, ret mat eo anzav, n'int ket brudet mat bremañ, evito da vezañ dindan vezekadur, peurluviañ, ha skañvaet o follentez gant ar gamizolenn gimiek. Ya, a bep seurt istrogelled a gaver e kêr, hag Armelle a zo unan anezho. Anavezet eo gant an holl evit bout brizhfoll. Ur vaouezig tev eo, doare ur varvasenn anezhi un tamm bihan, ha diaes reiñ un oad dezhi. Er-maez e vez atav, glav-heol, ha neb a glaskfe anezhi a zo sur d'he c'havout en he c'hoarez war ur skaoñ, dindan bolzad delioù ur wezenn faou distro, e liorz-kêr al lez-varn, damdost d'ar c'hreiz-kêr. Kas a ra hec'h amzer o lenn, hec'h-unan-penn, ha diouzh he gwelet, gant un taol-lagad diwar-c'horre, e vefer techet da gemer anezhi evit ur vaouez ordinal.

Nemet, hag aze e trenk ar soubenn, e lenn a vouezh uhel, ha, mar goulennit ganti perak, e responto deoc'h dre chuchumuchu, goude krizañ he zal ha kaset war he zro selloù disfizijs-meurbet, e lenn « evit an aeled. Rak, va den mat, aeled a zo dre holl, amañ, nemet ne weler ket anezho. Kavout a reont hir o amzer avat, ha setu perak e

lennan a vouezh uhel, dezho da gaout un tamm diduenn bennak ». Aet e oan em c'hoazez en he c'hichen an deiz-se, ha sed ar pezh em boa klevet diganti : ganet e oa bet e Sant-Brieg un tri-ugent vloaz bennak a zo, ha, goude bezañ darempredet lise ar gêr ha tapet ar vachelouriezh, e oa aet war ar studi e Skol-veur ar vezegiezh, e Roazhon. War he deus lavaret din, he dije graet berzh betek an trede bloavezh. « Goude ez on bet kaset d'ar Goulag, evit abegoù politikel, anat deoc'h. Eno, er folldi, e oa a bep seurt tud o youc'hal evel pennoù diskianted. Me, ne oan ket foll pa oan bet kaset di... Abegoù politikel hepken, hogen darbet e voe din egariñ ha pennfolliñ evel un diskiantez... Hogen ne glemman ket : a-drugarez da'm chomadenn gentañ er Goulag eo em eus graet anaoudegezh gant an aeled, hag abaoe e lennan evito... » An dud a anavez anezhi abaoe pell o deus kadarnaet e oa bet war ar studi mezeg, hag e oa bet kaset da di an diskianted, e Dinan, goude ur barrad follentez kentañ. 23 bloaz e oa d'ar c'houlz-se, ha biskoazh abaoe n'he deus gallet adstagañ gant ur vuhez reizh.

O pellaat diouti an deiz-se e teuas soñj din en-dro eus Paul Léautaud (1872-1956), ar skrivagner gall, brudet e anv abalamour m'en deus dalc'het, e vuhez-pad, un deizlevr lennegel ha n'emañ ket c'hwezh ar preñved gantañ. Henezh a oa un orin a zen, pitilh gant ar c'hizhier, ha ran gant al lennegezh. Daoust ma embanne bezañ dengarour, en deus skrivet, tu bennak, en e zeizlevr, al linennoù-mañ : « *A-holl-viskoazh ez on bet douget da garout an istrogelled, an dud iskis, an orined ar seurt na weler ket alies. An dud-se a zo evidon blaz ha saour ar vuhez ; Yann ar Peul avat, an hini a ya da-beul,*

ne 'm eus nemet doñjer outañ. Netra ne blij din-me evel froudennoù ha follentez an oristaled. P'en em gavan gant unan anezho, e korn ur straed, e klaskan ober anaoudegezh gantañ, mont e darempred gantañ. Ar re a ra goap outo e ran-me fae warno... »

Ha daoust hag-eñ ne lavared ket gwechall e brezhoneg :
« Ar foll hervez an dud a zo fur hervez Doue ».

Abati Boporz

Kentañ tra a wel ar baleer, diwar an hent a gas da Bempoull, a zo, e-touesk un toullad gwez faou ha kistin, lun kelc'hiek ar rozenn vras, a-us d'ar porched rivinet. Parañ a ra he dantelez vaen war an neñv goullo avat, ha gwelet a reer drezi ar c'houmoul o tremen hag ar c'havaned-tour o tarnijal : ne glever mui, abaoe pell zo, mouezh ar venec'h o salmadenniñ el lestr maen, rak n'eus mui a leaned e abati Boporz abaoe 1790, hag ar c'han nemetañ a spurmanter c'hoazh en iliz abadel, aet he bolzoù uhel da boultrenn, a zo sarac'h c'hwerv an avel o c'hwezhañ en dismantrou yenn penn-da-benn gant an nozvezhioù goañv.

Ma ranker reiñ kred d'ar pezh a zo skrivet el levrioù istor, abati Boporz, sanket e-touesk ar raoskl hag ar gwez, harp er mor, e Keriti, damdost da Bempoull, a voe diazezet e-kreiz an XIII^{vet} kantved. Savet e oa bet an abati kentañ war un enezenn, tostik d'an aod. Hogen re fall gwarezet e oa al lec'h, evit doare, hag Alan a Oueloù, dug Penteür a gavas gwelloc'h lakaat sevel un abati nepell alese, war an douar-bras. Chom a reas an abati en e sav e-pad c'hwec'h kantved, ha taolioù mat ha fall a zegouezhas gantañ a-hed an istor : a bep seurt darvoudoù

en deus gwelet ha padout a ra c'hoazh, kement ha ken bihan m'en em c'houlenner petra a rafe dezhañ daskrenañ c'hoazh. Pa darzhas an Dispac'h, e 1789, e oa c'hoazh un dek manac'h bennak o vevañ e Boporzh. Pa voent aet kuit, e voe gwerzhet an abati, evel Mad Broadel, d'ur paramantour a Bempoull. Neuze e krogas berzh-diverzh ar savadurioù : talvezout a rejont da gentañ da vengleuz. Goude e voe enno, tro-ha-tro, un atant, ur falañster, ur skol, ur salpestrerezh hag ur sistrezezh. E 1835 e voe lakaet an abati war roll ar savadurioù gwarezet, dre atiz ar skrivagner Prosper Mérimée, a oa, d'ar c'houlz-se, enseller meur ar savadurioù istorel.

Lojeiz ar venec'h ne chom mui nemet darnoù anezhañ. Hed-ha-hed e vogerioù dall e red un iliavenn gozh, hag e brenestroù teñval, digor-frank war kevrin ar c'hantvedoù, a sell ouzh ur palud sparlet gant ur chaoser geotek. Ar venec'h, gwechall, o devoa kanouc'hellet ha chaosieret aketus an douaroù geuniek-se, deuet da vezañ, bremañ, rouantelezh an elestr gouez hag ar broen aod. Ur baradozig evit an houadigoù, a ra o ebatoù er bodoù raoskl hejet ha dihejet gant an avel. Ken eürus all eo al laboused en domani-se : paotañ a reont, ur souezh. O c'hlevet a reer o kanañ en ur zarnijal a skourr da skourr. Alies, ur flapadeg a-us deoc'h a laka ac'hanoc'h da sevel ho penn : ur bagad evned o tremen an hini eo. Deñved a gaver ivez, ha saout a ouenn gozh, en o gourvez er brizh-heol fiñv-difiñv dindan ar gwez-avaloù, o taskiriat geot hag hunvreoù dispis.

Pa c'hoarvez ganin en em gavout e Boporzh, n'on ket evit mirout a soñjal en un den hag a oa bet mevel en

abati e-pad un dek vloaz bennak, en XVIII^{vet} kantved. An den-se, bet gwiader e Tredrez war e gozhni, goude bezañ redet ar c'hwitell e meur a zoare, a oa Yann Gonan e anv. Desket en devoa lenn ha skrivañ pa oa dindan ar venec'h, ha deuet e oa da vezañ gwrac'h gant ar varzhoniezh. Savet en deus istor e vuhez e stumm un hir a varzhoneg, ennañ ur 7000 gwerzenn bennak. Un testeni eo an oberenn-se, ha seul dedennusoc'h ma oa dibaot a dud vunut o skrivañ d'ar c'houlz-se : bez' e oa an deskadurezh gwir-dreist an noblañsoù, ar gloer hag ar vourc'hizien.

Ne dalvez ket da nemeur a dra gouzout hag-eñ eo bet gounezet baradoz an neñv gant Yann Gonan ha gant ar venec'h a vevas amañ gwechall. Piv bennak avat en deus gwelet ar serr-noz o kouezhañ war an abati ha tañvaet peoc'h an abardaez war raoskleg gwagennus ar palud, hennezh a oar o devoa al leaned savet ha kenklet, evito o-unan, ur baradoz war an douar. Hag hemañ, moarvat, evel ma tlefe an holl gouzout, a dalvez brav egile... Ne gav ket deoc'h ?

Achapadenn un danvez-skrivagner

Tapout kentel a c'heller atav oc'h ober anaoudegezh gant bloavezhioù kentañ un arzour, n'eus forzh petore danvez e pleustro warnañ diwezhatoc'h, ur wech deuet d'an oad gour, rak merzout a reer alies-mat pegen don e vez merket spered un den gant aergelc'h e vugaleaj.

An hini a ginnigan deoc'h teurel bremañ ur sell war e vloavezhioù kentañ eo an Naonedad Jules Verne. Ganet e voe en Naoned d'an 8 a viz C'hwevrer 1828 en un tiegezh tud a-beadra : e dad a oa advoue dre e vicher, hag e vamm a deue eus un tiegezh paramantourien ha merdeidi naonedat, frank an traoù ganto. Peuzgoude o eured ez eas kerent Jules Verne d'ober o annez en un ti bras, en ul lec'h anvet Chatenay, e bannlev an Naoned, war ribl dehoù al Liger. En ti bras-se eo e tremenas ar bugel bloavezhioù kentañ e vuhez. Sed a skrivas diwezhatoc'h Jules Verne a-zivout ar pezh a wele diwar prenestr e gambr : « *Diwar va c'hambrig e welen ar stêr vras o redek a-leun war-bed div pe deir lev etre pradeier ledan-ledan hag a veze beuzet ingal, er goañv, pa veze kresk-dour bras. [...]* Geriaoueg ar verdeadurezh ne oa ket dianav din ; gouzout a raen diouzh an embregadennoù, diwar lenn romantoù mor Fenimore

Cooper [...] Du-mañ, em c'hambrig, va selloù stag ouzh lagadell un teleskop bihan, e sellen ouzh monedoneoù ar bagoù dre-lien war al Liger, hag e lavaren ouzhin va-unan ouzh o gwelet : “emañ o treiñ bourzh, o largañ ar fok”, pe “emañ bremañ o vordañ ar gouelioù korn, emañ o paouez cheñch gouelioù war an aros pe war ar staon” [...]. »

Un drovezh, hag eñ bihan-bihan c'hoazh, e dad a gasas anezhañ da vourzh ur vag vras war gaeoù an Naoned, ha Jules a c'hellas ebatal e begement war ar vatimant. Selaouomp ar paotrig : « *Setu me war ar pont a-raok ! Tapout a ran krog en un driñs ha lakaat a ran anezhi da riklañ er pole. Digor eo pannelloù ar strad, ha me ha stouiñ a-us d'an islonk teñval-se ! C'hwezhoù pounner a sav d'ar fenn : c'hwezhañ put an ter-du, mesket gant frond c'hwek ar spisoù, dousoc'h eget ar mel. Distouiñ a ran ha mont pelloc'h war ar pont. Digor eo an dunetez. Mont a ran tre. Amañ ivez ez eus frondoù a bep seurt, hag e klevan galv kevrinus ar mor bras ! Er c'hambrou-lestr strizh e trask ar speurennoù koad. Na me a garje kousket enno, war ar fledoù ! »*

N'eo ket souezh eta e ve sorc'hennet Jules d'ar beajoù d'ar broioù pell ! Ne vez mui e soñj nemet gant broioù trelatus ar sav-heol ha gant inizi ar Mor Habask ! Un deiz – emaomp neuze e 1839, hag ar paotrig a zo o paouez tapout e unnek vloaz – en em sil er-maez eus an ti a-raok strink an deiz, hag ez a davet ar porzh. Eno ez eus ur c'haer a deirgweren, un hirdreizher anezhañ, a zo dindan mont d'an Indez. Jules n'eo nemet unnek vloaz, mes d'ar mare-se e vez tutet moused yaouank ken aes ha tra, hag ar paotrig hag ambarkiñ un nebeud devezhiennoù goude, e-kuzh, anat deoc'h, hag hep gouzout na d'e dad

na d'e vamm. N'eo ket an dro gentañ dezhañ bezañ e bourzh ur vag, hogen ar wech-mañ emañ o vont da dreuziñ ar morioù ha da verdeiñ da vat betek ar broioù pell ! En noz a-raok e oa chomet penn hag empenn an hini bihan enaouet war o brasañ gouloù, ha gwall skuizh eo. Dre ma 'z a da draoñ ar stêr evelato, war-gaout ar mor, e kav dezhañ e tigor dirazañ ur vuhez nevez. Soñjal a ra en e vamm, evel-just, hogen argas a ra buan ar soñj hegazus-se diwar e spered. Bo ! Petra a dalv' glac'hariñ ha kaout keuz ? Arabat malañ soñjoù ! Deomp larkoc'h, en avantur-Doue !

Mont larkoc'h, ya, brav eo lavaret, hep mar ebet ! Hogen pell emañ Yann diouzh e gazeg : e Pembo ez eus un den o c'hortoz anezhañ war ar ribl : e dad an hini eo. Kaset e vo Jules vihan d'ar gêr en-dro, trist e benn, mezhek, ha kouezhet e glipenn, goude bezañ klevet komzoù garv ! Bloaz war-lerc'h avat ez aio da welet ar mor, e bourzh ul lestr-dre-dan. Ha pell e ranko gortoz kent treuziñ-didreuziñ ar morioù ! Hogen tro zo da grediñ ez eo e bugaleaj an hini a savo diwezhatoc'h *Ar beajou estlammus* eo e ranker mont da glask evit kavout andon e awen !

An anzav

Warc'hoazh e lavaro dezhi. Warc'hoazh vintin. Daleet en deus. Re. Kalz re. Poent, ha tremen poent eo anzav ar wirionez. Ar wech-mañ, ne zistroio ket war e ziviz. Warc'hoazh... Sed ar soñjezonoù a sav e-barzh e benn dre ma pella diouzh al lenn-borzh. Anavezout mat a ra an hent, abaoe keid-all : tri miz... A-zehoù, an dour a ziruilh er ganol dreist an hiris, en ur bouilh eon, gant un tousmac'h bouzarus. Izel eo ar mor. Gwell a-se ! Gallout a raio kerzhet war an traezh, kentoc'h eget bale war an hent, hag ur wech aet hebiou d'an tour-tan ne vo ket ret dezhañ en em silañ dre ar reier evit en em gavout war an draezhenn frankañ. Goude e tapo hent ar valtouterien, betek ar beg. Un eurvezh evit mont. Kemend-all evit dont en-dro. Pa zegouezho er porzh, distro eus e valeadenn, e vo boulc'het mat ar beurevezh. Gallout a raio neuze mont d'ober un tamm tro betek ar chanterioù. Ne blij ket dezhañ chom da straniñ en-dro d'al lenn-borzh, gant an dud arouarek. Ezhomm en deus da welet tud o labourat. Klasket en doa, er penn-kentañ, e deroù miz Gwengolo, pa ne ouie ket re vat penaos implijout e amzer, ya, klasket en doa bale en-dro d'al lenn-borzh. Hogen se a zisplijas dezhañ buan. Doñjeret e oa bet gant an dud all, hag aet e oa larkoc'h, da welet, damdost d'ar skluz, labourerien ar

chanterioù bihan war-dro ar bagoù-pesketa. Tamm-ha-tamm avat e oa hardishaet hag e oa aet pelloc'h : betek an tour-tan, da gentañ, ha, goude, betek penn all an draezhenn. Ha setu penaos en deus kemeret ar stumm da vont betek ar beg. A van da van. Vat a ra dezhañ en em gavout eno, e-tal ar bae divent, goude bezañ baleet e-pad un eur. Un doare da ledanaat e askre, da frankaat an traoù en e benn.

Kerzhout a ra bepred. N'eus tra gaeroc'h dezhañ eget ar bae pa vez izel ar mor, evel bremañ : ne vez harz ebet d'al lagad neuze. Traezh, traezh dre holl, keit ha ma tap ar selloù, gwech o lufrañ pa vez gleb, ha tre bras anezhi, gwech dilufr dindan an amzer luget. Ur blaennad kaer a draezh. Hañval gantañ emañ en ur gouelec'h, ha koun en devez neuze bep tro e levrioù Théodore Monot. Amañ ne glever mui trouz an otoioù. Pell en norzh avat, ar mor a groz, hag e tamweler, e rizenn an dremmwel, etre an dour hag an oabl malkennus, ur vevennad eon gwenn ha fiñv-difiñv. Yen eo, abalamour d'an avel viz. Kerzu. Emaomp e miz Kerzu. Termal a ra an heol izel en oabl, evel lure gantañ o sevel... Ret e vo anzav ar wirionez dezhi a-raok an Nedeleg. Nann ! N'eo ket a-raok an Nedeleg eo, met an abretañ ar gwellañ 'ni eo... Warc'hoazh, warc'hoazh vintin...

N'en deus kavet war hent ar valtouterien nemet ur vaouez, kafunet en he mantell, o vale hep prez na mall, ur c'hi bras ouzh he heul. Unnek eur hanter e vo p'en em gavo en-dro er porzh. Debriñ a raio ur *sandwich* amerikan, en e goarez war ur skaoñ, e-harz tosenn Roc'h-an-Nec'h, evel kustum. Ac'hano ez eo kaer ar gwel war al

lenn-borzh, hag ar bagoù a zo evel c’hoarielloù, heñvel ouzh gobarioù bihan. Goude un tasad kafe du, ha tomm, e ostaleri *ar Skreved*, e vo poent adkemer an oto, evit bezañ, da ziv eur, dirak al levraoueg, e kreiz-kêr Sant-Brieg. Eno eo e tremeno an nemorant eus an endervezh, o follennata hag o vraslenn a bep seurt kelaouennoù, ar seurt kelaouennoù-se ne ouie ket, betek tri miz zo, e oa anezho.

Da bemp hanter e vo poent dezhañ pennadiñ hent an distro, ma fell dezhañ bezañ er gêr, e Kintin, da c’hwec’h eur ha kard, evel kustum, evel diagent, pa labour e c’hoazh. Ha warc’hoazh vintin ec’h anzavo ar wirionez d’e wreg : penaos e oa bet ezhfretet tri miz a zo bremañ, da-heul ur steuñv ekonomikel didruez. “Steuñv adframmañ” eo a vez graet eus an dra-se, a-hervez. Chañs ebet n’o devoa lezet dezhañ, an aotrouien-se... Ha penaos e ra an asvan, bep beure, da vont d’e labour, gant e oto, e *attache-case*...

Ya, warc’hoazh e lavaro dezhi !... Pe ar sizhun a zeu, kentoc’h, marteze...

An dremm

P'en deus unan bennak graet vat pe blijadur deoc'h, an disterañ tra a rit eo e drugarekaat. Sed a reas Jakez ar Fur d'e amezeg, d'an deiz-se a viz Du ivez : edo, evel bemdez, o c'hortoz ar c'harr-boutin e-tal ar pont-tro, diskabell ha distrafuilh dindan ar glav-pil-polos, pa chomas oto e amezeg a-sav dirazañ. An nor a voe damzigoret, hag an den madelezhus a ginnigas da Jakez e sammañ en e oto evit kas anezhañ betek kreiz-kêr. Termal a reas Jakez un disterañ, rak bez' e oa anezhañ ar seurt den-se a ra pep tra, a bell zo, dre voazamant : kustum e oa da vont e kêr gant karr-boutin 2e37, ha mont gant an oto, na petra 'ta, a vije direizhañ d'ar reolenn. Asantiñ a reas, koulskoude, goude pouezañ ha dibouezañ, trec'het gant simpladurezh e natur korfel, abalamour ma oa krog an dour d'en em silañ dindan gouzougenn e roched, hogen nec'het e voe un tammig pa lezas e amezeg anezhañ e-tal an iliz-veur. « Ma vijen deuet gant ar bus e vijen diskennet, evel boaz, e traoñ bali Clemenceau, » a c'hrozmolaz Jakez etre e zent, en ur astenn e gammedoù war-gaout plasenn an ti-post, dre straed Roc'han, ur straed ne dremene morse drezi.

Edo o tremen dirak *An Dugez a Roc'han*, koshañ saloñs-te Sant-Brieg, pa welas anezhi. Chom a reas digor

e c'henoù gantañ, hag ar gwel eus he dremm a daolas anezhañ, trumm, en alvaon hag er sabatur. Biskoazh kaeroc'h dremm maouez n'en doa gwelet Jakez betek neuze ! Un dremm flour, seder hag habask, ur bervig dous en daoulagad, ha, war he muzelloù ur mousc'hoarzh ma oa un dudi ! Evit ur gwel e voe anat da Jakez diouzhtu e ranke, kousto pe gousto, ober anaoudegezh gant ar vaouez dianav ha dremmet flour. Ha setu dre be daoldegouezh souezhus e voe bountet d'ober un dra n'en doa graet gwech ebet en e vuhez, un dra na grede ket en dije graet anezhañ ur wech bennak : mont a reas tre er saloñs-te, strobet gant e gorf, koazezañ a reas ouzh un daol vihan, ha goulenn un tasad kafe gant un tamm kouign goude teurel a-gleiz hag a-zehoù selloù diaezet. Ar pratikoù er saloñs-te a oa maouezed kozh an darn vuiañ anezho, ha Jakez ne oa ket tre en e vleud, boazet ma oa muioc'h diouzh aergelc'h trouzus ha gourel ostalerioù ar porzh. Ouzhpenn-se, ober an dra-se a oa mont a-enep-bev d'e holl voazamantoù, rak d'an eur-se en dije dleet bezañ en ORB (*Office des Retraités Briochins*) evit e dro c'hartoù pemdeziek gant ar retredidi all.

Ober anaoudegezh ganti a voe aesoc'h eget n'en doa kredet Jakez. Ar vaouez a oa tavedek, met he muderezh a blijas dezhañ kenañ. A-holl-viskoazh e oa bet douget d'an dud hag a oar tevel, ha netra ne zisplije dezhañ muioc'h eget ar c'homzoù goull hag ar fistilherezh didalvez. Gant ar flaperezh e vez mouget kement elfenn a gevrin a zo en unan, kea. « He c'hened, a soñje Jakez, n'eo netra e-skoaz he furnez ! » Bemdez bremañ, sa-troioù teir eur, ez ae etrezek *An Dugez a Roc'han*, e koazeze ouzh an daol vihan damdost d'ar prenestr, hag e tremene e-ser ar vaouez ur

pennadig amzer dudius. Anavezout a rae he dremm dre eñvor : he daoulagad pers o luc'hañ skañv etre he malgud hir ha kromm ; he dent gwenn o skediñ e skrin he diweuz hoalus ; an toullig bihan en elgez ; kroc'hen he divoc'h, flour evel ar seiz. Sellout ouzh an dremm-se a oa evel en em goll en ul lenn vras, pe en em silañ en ur frailh eus an amzer. Petra o dije lavaret, petra o dije soñjet e gamaladed eus an ORB m'o dije gwelet anezhañ ? Hogen Jakez a oa nec'het ganto evel gant e votez kentañ, e gwirionez, rak miz Du, ar bloavezh-se, a voe kaeraet ha sklêrijennet holl gant ar vaouez dremmet brav.

Padout a reas betek deroù miz Kerzu : d'an daou avat e tremenas Jakez hebiou d'*An Dugez a Roc'han*, hag e chomas mantret : ar banell-skritellañ vras, e-tal ar saloñste, e oa bet peget outi ur skritell nevez, hag e-lec'h an dremm ken kaer o vrudañ ur merk soavon e vo tavet amañ war e anv, e welas Jakez un Tad-Nedeleg e jodoù kuilh, e varv seiz hag e vousec'hoarzh bleup oc'h embann : *Nedeleg e ti Leclerc ne vo ket ker !*

Biskoazh abaoe n'en deus asantet Jakez sevel e-barzh un oto, ha, ma klaskit anezhañ, en kavout a refet, bemdez, diskabell ha distrafuilh, dre amzer c'hlav pe dre amzer vrav, e-tal ar pont-tro, o c'hortoz karr-boutin 2e37 da vont d'ober e dro c'hartoù pemdeziek gant mignoned an ORB...

Ar C'hab Frehel

Ar merdead a fell dezhañ mont eus Sant-Maloù da Bempoull a rank treiñ penn war-eeun d'ar c'hornôg, ha goude lezet a-vabourzh Dinarzh, Sant-Kast ha Beg-an-Enez, e tremeno, lark er mor, a-vaez d'ur beg-douar uhel-uhel, dezhañ tornaodoù lefan ha maen-krag o sevel eeun-pik a-us d'ar mor. En traoñ, an tarzhoù dirollet o tisac'hañ war ar c'herreg a-blav. En oabl, laboused-mor gant o nij-diniñ trouzus, dihabask hag hedro. E barr an tornaod, un tour-tan gwriennet-start en un douar distuz, e-kreiz ul lanneg bras-divent. Ar beg-douar-se e vez graet ar C'hab Frehel anezhañ. Hervez doare ez adkaver en anv-se ar penngef *fr*; an hini a ya d'ober anvioù evel *Kammfroust*, *Froudveur*, *Koadfroud*. Talvezout a ra kement hag « un takad mor ma vez kas bras gant an dour », ha kavet e vez ar wrizienn-c'her-se er yezhoù keltiek all ivez, evel, da skouer, e kembraeg : *ffrwd*, pe e kerneveureg : *fros*.

N'ouzon ket hag-eñ ez eo dedennet gant an etimologiezh an douristed a deu betek ar C'hab. Ar pezh a zo diarvar avat eo e teu tud a-strolladoù stank-ha-stank da welet al lec'hienn warezet-se. Brav-tre eo ar c'hab, n'eus ket da nac'h, ha ne c'haller nemet chom sabatu et gant ar gwel dispar en em zispak dirak an daoulagad : diwar lein

ar c'hab e tap ar selloù eus tornaodoù ar C'hotentin, pell er reter, tre betek Pempoull hag Enez-Vriad, er c'hornôg, ha pa vez digoc'henn-kaer an amzer e tamweler zoken, e-kreiz ar mor, en norzh, aodoù Jerzenez. N'eo ket souezh e chomfe an dud a-bann da sellet ouzh ar gwel meur dudius-se.

Fustet e vez ar c'hab ordin gant an aveloù, hag ar beg-douar bras-se – 400 hektar ar gorread anezhañ – ne gresk warnañ nemet lannoù. Rouantelezh ar brug, al lann hag ar balan an hini eo. Kreskiñ a ra ivez war an douaroù lefanek-se ar broenn-mor, ar bodoù askol hag ar salikorn. Ne vern doare an amzer, brav e vez al lanneier atav, gant al lann sked-disket ha kleierigoù glas-ruz ar brug. Betek keit ha ma tap ar selloù, n'eus harz ebet d'al lagad, warbouez an tour-tan. Savet e voe etre 1947 ha 1950, rak an hini a oa a-raok a oa bet diskaret a-benn-font gant an Alamaned, e 1944, pa yeas an traoù war drenkaat evito. Hogen a-bell zo ez eus bet un tour-tan eno : an hini kentañ a voe lakaet sevel e 1701 dindan ren Loeiz XIV, gant Jean-Simon Garnageau, a oa d'ar c'houlz-se pennijinour, e karg eus an difennoù-kêr e Sant-Maloù. War a lavarere, an tan e-barzh an tour-tan kentañ-se a veze bouetaet gant eoul pesked, hag ar gouloù ennañ ne gase ket da wall bell war ar mor. Disheñvel an traoù bremañ avat. An tour-tan a-vremañ a zo pintet uhel war un tornaod, 70 metr a uhelder dezhañ, ha gant e dregont metr e valir e c'houlloù 100 metr a-us da live an dour. Gouest eo e letern da skubañ, gant e vann sklêrijenn, betek 80 km a bep tu. A-bell-dro e spurmanter anezhañ neuze, hag un arvest diankounac'hus eo gwelet, a-fed-noz, ar mor teñval o treluc'hañ trumm gant bann-

sklêrijenn ar c'hab kent adkouezhañ ken trumm all en deñvalijenn.

Anv a zo avat da lakaat sevel un dachenn diduelloù er mengleuzioù kozh damdost d'an tour-tan. Gant se e kreskfe c'hoazh niver ar weladennerien. Noazus e vefe ar raktres-se d'an endro ha d'ar gwarezva laboused a zo ivez er c'hab, hag ur gevredigezh a zo bet savet gant tud ar vro evit stourm a-enep ar raktres-se : ne fell ket d'an dud, ha gant gwir abeg, e vefe mazaouet al lec'hienn gant aveadurioù touristel.

Ra chomo ar C'hab Frehel domani ar gouelini gris, ar garamellenned, ar morvrini-kuchenn hag an ereved beg hir, o deus eno ur gaer a dachenn neizhañ !

Ar baourentez e Kemper en XVIII^{vet} kantved

E 1767 e voe digoret e Kemper un « dastumlec’h evit ar geizh », badezet e galleg *Dépôt de mendicité*. Emguzuliet o devoa pennoù-bras ar rouantelezh diwar-benn kudenn ar baourentez, hag an dastumlec’hioù-se a oa bet diazezet, da-heul un edit roueel, e kement kêr vras a oa er rouantelezh, da reiñ bod d’ar glaskerien-vara, d’an dud hep ti nag aoz, d’ar valeanted, d’ar gisti, d’an emzivaded, d’ar gozhidi ha d’ar glañvourien, mesk-ha-mesk. An tiez-se a oa anezho e gwirionez war ar memes tro ospis ha toullbac’h, klañvdi ha ti-kastiz.

D’ar c’houlz-se e oa ar c’hêrioù ur repu evit ar geizh a-ziwar ar maez. Pa deue ar gernez er vro, da skouer goude eostoù difonn ha fall, e terede ar re baour etrezek kêr, gant ar spi kaout eno gwelloc’h difenn ha suroc’h gwarez a-enep an dienez. Evit pennoù kêr avat e oa ur gudenn hag a oa diaes da zirouestlañ : penaos dont a-benn eus kemend-all a zienez hag a boanioù ? Petra ober gant an nammidi, ar gozhidi, ar vugale dilezet, ar re a veve diwar bara an aluzen ? Ar garantez kristen a vire na vijent stlapet er-maez a gêr. Da belec’h ez agent, n’eus forzh penaos ? E 1770 e oa bet gwastet an eost gant ar gwall amzer, hag e

1774 e oa bet treut an trevad abalamour d'ar glav dour-bil. Ken gwazh all – ma n'eo ket gwashoc'h c'hoazh – e voe etre 1783 ha 1786 dre holl e Kernev. Ha setu da-heul pobl vunut an devezhourien kouezhet er verrentez ! A-gantadoù neuze e weled ar beorien, « ar re n'o deus nag erv nag ant », o kuitaat maezioù Kernev hag oc'h en em repuiñ e Kemper. Sed a skrive e 1786 an aotrou Goazre, isdileuriad ar melestradur, bet karget d'ober enklask war ar maez e eskopti Kemper :

« Euzhus eo an dienez, hag ar beorien a-ziwar ar maez n'o devez mui na labour na bara. N'eus ket a labour evito rak ar gouerien a zo gwell ganto chom hep implijout devezhourien. A-fet bara, ken ker eo erru an ed ma ne c'hall ket un devezhour, gant ar pemp gwenneg a gas gantañ d'ar gêr, magañ gwreg ha bugale. Gant se ne vez dre holl, war an hentoù hag er bourc'hioù, nemet tud oc'h astenn an dorn, ha gant pep kammed a reer ne weler nement dienez ar bobl gant he dremm doanius. »

An dileuridi, e Kemper, n'ouzont ket ken eus pe goad ober loaioù, hag evit plediñ gant ar pep mallusañ e kemeront an disentez da zigeriñ chanterioù foran e kêr, kement ha reiñ labour d'ar beorien : adsavet e vez mogerioù an eskopti, kempennet e vez poullou-kannañ ha poullou-dourañ, dreset e vez ar straedoù. Koustañ a ra ker avat, hag e miz C'hwevrer 1786 ez eo tri-c'hant lur bep sizhun eo a vez roet gant an aotrou Le Gendre, maer ar gêr, d'an 250 den bet o labourat war ar chanterioù foran-se.

Ar re a vez kaset d'an *Dépôt de mendicité* a vev eno en

un doare reuzeudik. Sed a skriv an aotrou Fresnais en un danevell dre ar munud bet savet gantañ e miz C’hwevrer 1770, da lavaret eo tri bloaz goude ma voe bet digoret an dastumlec’h :

*« N’eus ket trawalc’h a zilhad evit an dud, ar glaskerien-
vara a zo gwisket gant truילוù hag ar yec’hedoniezh ne
vez ket heuliet he lezennoù. Ar maouezed hag ar wazed a
rank bevañ bern-war-vern, ar re a zo klañv ne vezont ket
dispartiet diouzh ar re all, hag a-wechoù e nac’h implijidi
an Dépôt ober war-dro ar glañvourien. Bez’ ez eus 110
maouez (merc’hed bihan en o zouesk), ha 46 gwaz (ha
paotred vihan ivez), berniet mell-divell. Poent-bras e vefe
digeriñ un dastumlec’h brasoc’h evit reiñ bod d’an holl... »*

Peorien Kemper en XVIII^{vet} kantved ne oa ket ebat o doare, na ne oa !

Ar baleantour

Pa lenner aketus ar gazetenn bemdeziek e kaver alies-mat peadra da souezhiñ. N'eus ket keit-se c'hoazh em boa lennet kement-mañ e bannoù an *Télégramme* : Kuzul-kêr Gwengamp, prederiet gant yec'hed Gwengampiz yaouank, ha c'hoantek da welet ribitailhoù ar skolioù o tivorzañ un tammig muioc'h o izili, en deus kemeret e ziarbennoù ouzh ar re a zo techet da chom re bell amzer o lugudenniñ er gêr, azezet, hep finval : roet e vo da gement skoliad a zo ur voestig kevreet ouzh ur greizenn, dre ar genrouedad. Hag ar voestig-se a zalc'ho soñj eus obererezh korf ar skolidi. An ditouroù dastumet evel-se a yelo da voueta un diaz roadennoù, hag a servijo da c'houzout gwelloc'h penaos broudañ ar vugale da gerzhet ha da redek. Gwir eo e c'haller bezañ nec'het gant stad an traoù war an dachenn-se : bez' ez eus, dre holl, muioc'h-mui a vugale re dev, hag an dreistpouez hag an teuc'hded, gouezet mat eo, a gas a bep seurt kleñvedoù d'o heul.

Evidon-me, ne welan tro-dro din na marvasenn na teureg, tud sinkl avat, ne lavaran ket. Se a zo abalamour ma tremen dirak va zi al lodenn-se eus ar GR34 a ya da-heul kaeoù porzh al Lege, hag ar porzh a zo ul lec'h loc'hañ prizet-meurbet evit an troioù-bale hir pe hiroc'h :

ac'hann da Beg ar Rozeler ez eus un eurvezh bale, dre an tour-tan, an traezhennoù hag an tornaodoù. Kaer eo ar gwel eno, ur marzh, hag alehont, gant daou zevezhiad bale e c'haller en em gavout e Pempoull. Neb en deus divskouarn, ra glevo, ha neb en deus divhar ha treid, ra gerzho ! Kement-mañ evit lavaret deoc'h ez eo dreist-holl baleerien arroutet mat eo a welan o tremen dirak va zi, tud hag a zo peurvuiañ izili eus Kevredigezh C'hall ar Baleadennoù War-droad (*Fédération Française de la Randonnée Pédestre*). O anavezout a reer diouzhtu diouzh o dilhad, o bizhier-bale, o sac'h-kein, hag o c'herzhed mibin ha laouen.

Va amezeg Aogust n'en deus ket ezhomm da vezañ ezel ur gevredigezh bennak evit en em reiñ da blijadurezhioù eeun an troioù-bale. En em zic'hizañ gant dilhad *Decathlon* ne ra ket kennebeut : dalbez e vez war an hentoù, e-unan-penn, hep den d'ober kavandenn dezhañ. Kerzhet a ra, hag e ra, Sul-gouel-bemdez ! Ha glav-heol, eus an eil sklêrijenn d'eben e vez peurvuiañ o kerzhet. Me a soñj din en deus tremenet al lodenn frankañ eus e vuhez evel-se, hag en em c'houlenn a ran a-wechoù ha graet en deus un dra all abaoe mare e yaouankiz, estreget bale. War a lavar en deus bet labouret, gwechall. A c'hall bezañ a-walc'h. Da'm soñj avat eo bet a-holl-viskoazh etre ar c'hrog hag an diskrog, evel ar seurt tud-se na badont e neblec'h, ha ma vije bet o vevañ kant vloaz zo e vije bet foeter-bro, chiminaou. Ober e benn e-unan, sed a blij dezhañ dreist pep tra, ha bezañ dinask-kaer hag en e frankiz war an hentoù. An arvor avat ne vourr ket kement-se gantañ, ha d'ar peurliesañ, pa gemer penn an hent, ez eo evit mont da c'haoliata hentoù an traoñiennoù eo : den n'anavez

gwelloc'h egetañ kildroennoù ar Gouedig ha kement korn ha diskorn a zo e traoñienn ar Goued. An deiz all, klevit 'ta, e savas c'hoant gantañ, trumm, hep rag na perag, da vont betek Kintin evel-se, dre an hentoù. Seizh eurvezh bale, dre stankell ar Pont-Du ha Kleger ar Goued, un tregont kilometr bennak ribin-diribin bet lonket gantañ ken aes ha tra. Deuet eo en-dro gant karr-boutin pemp eur, an hini a gas ar skolidi d'ar gêr, ha graet en deus zoken ur gouskadenn c'hwek ennañ, diseblant-kaer ouzh safar ar grennarded. E gwirionez n'eo ket bale eo a ra, skarañ, skampañ avat ne lavaren ket. Daoust da gement-se e oar kemer e amzer ivez, ha dre ma kerzh a-hed ar gwenodennoù e vez an disterañ tra un dudi evitañ, hag e vez bourrus-kenañ ar c'herzhed. Souezh ebet ma vez ordin seder e spered ha laouen e galon. Ne blij ket dezhañ tamm ebet an dud a ya war rodoù. Koulskoude pa vez faezh o vale – ar pezh ne c'hoarvez nemet ral a wech – e teurvez sevel en ur bus bennak a gaso anezhañ betek toull-dor e di.

Barzh eo ivez, un tammig bihan, pe prederour ma fell deoc'h, ha gouest da gomz deoc'h, birvilh ennañ, ha gant kizidigezh ha soutilded, evel an deiz all, eus e fromadenn o welet « delioù diwezhañ an diskaramzer o tarnijal skañv er brouskoad » en-dro dezhañ. Pa deu en-dro d'ar gêr e vez leun chakodoù e chupenn gant traoùigoù a bep seurt bet dastumet gantañ ac'hann hag alehont : ur gailhenn he stumm iskis, ur vilienn luf evel ur sklasenn, un delienn sec'h ritennet skañv, ur c'heotenn, ur vriñsenn banal, pe ur c'hwil marv, dezhañ tastornelloù hir a-us d'ur grogenn amliv... Pinvidigezh ar paour !

Ra vezo gouest ribitaihoù Gwengamp da dañva
plijadurezhioù eeun ar c'herzhed, kentoc'h eget chom da
lugudenniñ er gêr dirak o skrammoù !

Beg ar Rozeler

Beg ar Rozeler, e Plerin, a ra an asvan da vezañ mennet da vorailhañ bae Sant-Brieg ha da dizhout Erge-ar-Mor, du-hont er biz, en tu-all d'an dour. Ur brizhyoul geologel n'eo ken avat hag an dolzenn uhel-se, gwisket he zorioù gant brouskoad, raden, brug ha lann a-us d'ar reier garv, dezhi un hilder a zaou gilometr, a zo bet torret he lañs, pell zo ha da viken, gant an tonnoù kintus. Evel m'emañ bremañ, koulskoude, ez eo ar beg-se ul lec'h kaer-meurbet, re-bar d'ur c'henn sanket er mor. Kinnig a ra ur gwel meur war ur bae hag a zo unan eus ar re vrasañ en Europa a-bezh. Deuit da'm heul, ma fell deoc'h. Lezomp a-dreñv deomp an difennoù bet savet gant tud an neolitik, tremenomp dirak gedlec'h kozh ar valtouterien, ha kerzhomp larkoc'h betek ar forn bet lakaet sevel e-kreiz an XVIII^{vet} kantved. Ar forn-se e veze goret enni ar bolidi a vanned war al listri saoz a vorrede er biojoù hag o devoa bet an divezhoni da dostaat re d'an aodoù.

Abaoe un toullad devezhioù ez eo luget an amzer hag e c'hwezh an avel viz, un avel serzh, lemm, ha didruez. Skubañ a ra un aod louet divent hag a ya war ledanaat en norzh, o stummañ ur meni tri-c'horn. Bevennet eo,

en tu-se, gant lezenn wenn an taolioù-mor kounnaret a glever o kroزال. War an traezh gleb, ar redvorennoù lizidant, enno lufroù metalek, en em astenn hag a dremen didrouz hebiou d'ar parkadoù meskl teñval kent en em goll war-gaout an donvor. Flastret eo ar bae dindan bec'h ar c'houmoul, hag an oabl a daol war ar bed ur c'houlaouenn dister a enaou adskedoù gwan war an traezh. Yen eo, met kafunet mat oc'h en ho tilhad goañv. Ar gwel en em zispak bremañ a bep tu deoc'h, diwar lein ar beg, a zo unan eus ar re estlammusañ a ve tu da gaout : dirazoc'h, en tu all d'ar bae, setu, war un tregont kilometr bennak, aodoù Penteür, eus beg Erge-ar-Mor, er biz, betek lec'hidegoù louet ha blot Ifiniég ha menez Beller. Hennezh a astenn gwarez e skeud war Vonkontour, ar gêr gozh morzet etre he ramparzhioù rivinet. A-dreñv deoc'h, tourioù kêr Sant-Brieg e sav er beure morlivet o zrolinenn vistr hag amzere. Er gwalarn avat setu aodoù Bro-Oueloù, serzh, garv, drailhet : beg Porzhig, da gentañ, tarchadennoù sklaer an tiez e Sant-Ke hag e Staol da c'houde, ha, larkoc'h, beg Minar, e Plouha, lec'h m'emañ an tornaodoù uhelañ a zo e Breizh a-bezh. Etre an heuliad begoù-douar-se ez eus traezhennoù, oufoù, plegoù-mor hag a ra dudi an hañvourien.

N'eus e penn ar beg nemet un ti digavandenn, bet savet war sichenn vetoñs ur bunker eus an Eil Brezel Bed. Gronnet eo an ti en ul liorz h vras a valir uhel a-us d'ar mor. Tremen a ra hent ar valtouterien hebiou d'al liorz h, ha perc'henn an ti, brokus an tamm anezhañ evit doare, en deus bet ar mennozh mat da begañ ur bomm pe ur c'hrenn-lavar ouzh ur banell brenn. Bep sizhun e cheñch ar bomm-se, dezhañ talvoudegezh ur reolenn-stur, o reiñ

evel-se boued-spered dic'hortoz d'ar valeerien. C'hoant a-walc'h am befe da vont da welet peseurt perlezenn a furnez a zo bet dibabet gantañ ar wech-mañ, hogen emeon gant Iffig Hegarat, ar pesketaer. Lañchennet mat eo Iffig ha chaok a vez gantañ ordin forzh pegement. Hiziv emañ ar gaoz gantañ war ar Saozon. « Ha lavaret em eus dit, c'hoazh, Herve, ez eo gant ar Saozon eo e vez kaset deomp, amañ, e bae Sant-Brieg, an avel viz ? Sklaer an traoù : fellout a ra dezho skubañ evel-se, a-ziwar gorre an douar, gouenn ar Vretoned, tra-ken... »

Ur paotr mat eo Iffig, nemet ez eo troet da vont re bell ganti aliesoc'h eget d'e dro.

An aberzhad

E feur va meno, gouzout diouzh an istor n'eo ket hepken anavezout dre eñvor un aridennad deiziadoù pe bezañ gouest da zibunañ dreist-penn-biz anvioù ar pennoù-tiern, ha kentoc'h eget teurel pled war trouz an emgannoù bras, war strak ar c'hanolioù ha war safar ar rouantelezhioù o tisac'hañ, e kavan-me plijusoc'h ha kenteliusoc'h studiañ kement a yae d'ober buhez pemdeziek an dud a-wechall : al labour, ar boazioù, ar c'hustumoù hag ar stuzioù, an dilhad, ar modoù darempred etre an dud, ar boued.

Magadurezh ar Vretoned a zo bet studiet pizh gant istorourien ar pemdez, ha gouezet mat eo petra o deus debret an dud e-pad pell amzer. Un dra a rank bezañ sklaer da gentañ : kantvedoù-pad o deus bevet an dud e klozarmerzh, ha klask a raent da gentañ penn emvastañ. Diazezet e oa o magadurezh war an edeier : ar gwinizh, an ed-du, ar segal, ar c'herc'h, ar mell. An edeier-se a veze bervet, debret gant laezh, krazet, pe baraekaet. Peurvuiañ ez aent d'ober yod avat, rak fardañ yod a oa marc'hadmatoc'h ha buanoc'h graet eget baraekaet ar gwinizh. Al legumaj – karotez, pour, ognon, irvin, panez – a yae d'ober soubenn, ha debret e veze ar

soubenn-se gant bara ha gant tammoù kig-sall. Debret e veze ivez forzh legumineged : a bep seurt favennoù ha pizennoù. Ar c'haol a oa ivez un elfenn a bouez-bras e magadurezh an dud. Ar pesked ne veze debret anezho nemet gant tud an arvor, hag anavezet mat eo, hiziv c'hoazh, ar ger *kaoteriad*, zoken gant ar c'hallegerien. Ret e oa ivez heuliañ pizh erbedadennoù an Iliz, hag ober vijil d'ar Gwener, da lavaret eo chom hep debrñ kig pe boued druz... Amann a veze debret forzh pegement, abalamour ma ne veze ket a dailhoù war an holen e Breizh : gant se e oa aesoc'h sallañ amann kentoc'h eget fardañ fourmaj-laezh, hag ar boued sezon a yae d'ober un tamm mat eus an dinell war ar pemdez. Berrentez boued a veze ingal avat, hag ar gernezh vras diwezhañ en hor bro a c'hoarvezas er bloavezhioù 1847-1848. A-du-rall, pa lenner marilhoù an arme e weler, diwar temz-yeç'hed an danvez-soudarded eus Kreiz-Breizh, e oa merket maezioù hor bro gant an "disvezhur", pe ar bihan-boued, mard eo gwelloc'h ar ger-se ganeoc'h. Kent klozañ gant ar brassell prim-se e ranker menegiñ an avaloù-douar, a voe gounezet stank, dreist-holl goude an Impalaerezh kentañ, da lavaret eo adal 1815, hag a yeas e kevez ouzh an edeier er geusturenn bemdeziek.

Atant bihan va zud-kozh a oa, en ur mod, pimpatrom an ekonomiezh emvastel am eus graet anv anezhi uheloc'h : bez' e oa saout o taskiriat foenn ha betarabez er c'hraou bras, loened-pluñv o pigosat er porzh-yar, konikled o kousket en o lochoù, ur pemoc'h er c'hraou e penn bihan an ti, o labaskenniñ, soroc'h gantañ, hag eürus en e fank. Avaloù a oa ivez, d'ober sistr hag hini kreñv. Ar pep retañ en un tiegezh a zoare. Ur paotrig

a-ziwar ar maez, kalonek ha disaouzan, a oa ac'hanon, ha gouest e oan da sellout diardoù-kaer ouzh Mamm-gozh pa veze-hi o tibennañ hag o tispluñvañ ur penn-yar. Ken distrafuilh all e chomen pa rae Tad-kozh war-dro ur c'honikl : badaouiñ anezhañ, e ziwadañ hag e ziskroc'henañ, trumm, gant ur jestr prim. Koulskoude, pa deue tro ar pemoc'h e vezen gounezet gant un asez truez ouzh ar paourkaezh loen. Rak, pa veze ereet e bavioù outañ ha pa wele-eñ ar boser o tostaat, gantañ en e zorn ur gontell lemm evel un aotenn, ar pemoc'h a zifrete par ma c'helle da zifenn e vuhez, hag a youc'he a-bouez-penn gant an aon. Biskoazh euzhusoc'h trouz ne 'm eus klevet em buhez ! Gwashoc'h e veze c'hoazh pa sanke ar gontell e kig druz ar gouzoug ha pa flistre ar gwad tomm, a-dennadoù, ouzh talm ar galon. Neuze e save va blev a-bik war va fenn, hag e ranken distreiñ va selloù diouzh an aberzhad kaezh.

An aberzh evelato ne veze ket graet en aner : biskoazh tra saourusoc'h ne 'm eus debret eget un tamm kig-sall war ur jelkenn bara fresk, gant ur werennad sistr ! Glaourenniñ a ran c'hoazh, hanter-kant vloaz war-lerc'h ken nemet o soñjal !

Pep hini d’e dro

Betek ar 15 a viz Even 2015 en devoa renet Pêr ar Bihan, eus Porzhig, ur vuhez eeun ha plijus a-walc’h : d’an oad a hanter-kant vloaz e oa chomet dizimez ha divugel, hogen ar stad a baotr yaouank-kozh ne oa ket re a vec’h dezhañ. Gant e labour e Kuzul-meur an departamant e teue e voued gantañ madik a-walc’h, ha lakaet en doa sevel un ti evitañ e-unan, war ar maez, etre Porzhig ha Binig. War ar maez, ya, hogen tostik-tost d’ar mor ivez, rak Pêr a oa pitilh gant ar pesketa, hag ur vag vihan en doa, e porzh Binig, just a-walc’h. Gwech e pesketae ar brizhilli, ha gwech eo kevella eo a rae, diouzh mareoù ar bloaz. D’ar 15 a viz Even 2015, ur sadornvezh anezhi, e oa aet er-maez, abred diouzh ar mintin. Ar mor a oa bet flour, n’eus ket flouroc’h, ha, ma n’en doa ket graet ur besketadenn vurzhudus, fonnus e oa bet an taol-pesketa evelato. O tostaat ouzh ar porzh e soñje Pêr gant plijadur en dibenn-sizhun a oa war-nes digeriñ dirazañ : pedet en doa mignoned da zebriñ, ha chegenn a rajent, sur ha n’eo ket marteze, gant an daou legestr bras hag ar c’hranked en doa kavet p’en doa savet e gevell. Erruet er porzh, en em lakaas e tres da gaeañ. Hogen a-greiz ma oa o teurel ar penn-fard ouzh ar c’hae e oa rampet e droad, ha Pêr, digempouezet trumm, en devoa horellet

hag a oa kouezhet en dour, etre e vag hag ar c'hae. En ur gouezhañ, e benn a stokas taer ouzh ar maen, ha Pêr a simplas.

Ne zisemplas da vat nemet teir sizhun goude, en ospital Sant-Brieg, lec'h ma oa chomet keit-se etre ar bev hag ar marv. Ar vezeien a oa bet hep engalv o diagnostig : torr digor ar glopenn hag argrad empenn. Droukheuliadoù a vije, hep mar ebet. Tro a oa da grediñ evelato e c'hellje adstagañ gant e labour ac'hann da zaou pe dri miz. Bleniañ e oto avat ne c'hellje ket ober ken. Na mont war vor e-unan-penn kennebeut all. Pêr a blegas d'e stad, eürus da vezañ tec'het diouzh ar marv a vije bet e lod, sur a-walc'h, ma vije c'hoarvezet ar gwallzarvoud d'un eur ma ne vez den ebet war-dro ar porzh.

A-benn tri miz e c'hellas adstagañ gant e labour er C'huzul-meur. Dre chañs evitañ ez eus, etre Porzhig ha kreiz-kêr Sant-Brieg, ul linenn busoù, ha bep mintin, da eizh eur, en em gave Pêr e-tal iliz Porzhig, asambles gant tud all – labourerien eveltañ ha krennarded ar skolioù – o c'hortoz bus al linenn B3. Mont a rae gwelloc'h gantañ, ne oa ket da nac'h. Gwelloc'h ? Ya. Hogen un draig a oa memestra, en lakae nec'het. Pa gomprenas avat petra a c'hoarveze, n'eo ket nec'het an hini eo e voe, na trikamardet hepken, spontet avat ne lavaran ket. Klevit kentoc'h : bep tro m'en em gave e-barzh ur strollad – pe ur strolladig tud hepken – en deveze ur seblant, ha gouest e oa da ziougan, hep ket a var, pehini eus e geneiled a vije an hini kentañ o vervel. Souezhet ha nec'het e voe gant an donezon nevez-se, bet deuet dezhañ da-heul e wallzarvoud, hag en em c'houlenn a reas, meur a wech,

hag-eñ ne oa ket distrañset e spered da vat. Gall' a reas avat gwiriekat meur a wech en doa ar galloud hud-se da vat hag e rankje bevañ gantañ hiviziken. Evel-just ne gredas ket digeriñ e galon da zen. Piv en dije kredet anezhañ ? Ouzhpenn-se, an donezon-se a vazaoue e vuhez dezhañ : bleaat a rae Pêr, a zeiz da zeiz hag anat e oa, evit an holl, ez ae an traoù evitañ a zroug da wazh. Pêr a chome muioc'h-mui en e gorn, hag e vignoned a lakae e vlinded hag e dristidigezh war gont e wallzarvoud.

Un deiz, mennet da aveliñ e benn, ez eas betek beg an Arc'houest, gant ar c'harr-boutin, hag alese betek Enez-Vriad. Ha setu lamet ar bec'h diwar e galon : nag er bus nag er vag n'en devoe seblant ebet. Disammet e voe Pêr e-pad ur reuziad. O, ur reuziadig hepken ! Rak ur soñj euzhus a deuas dezhañ : ma n'en doa mui seblant ebet evit ar re all, daoust ha ne oa ket abalamour ma oa eñ, Pêr ar Bihan, a oa tonket dezhañ mervel a-raok e geneiled a veaj ? Pêr ar Bihan e tremenas ur skrijadenn sklas war e dal. Ur wech errruet er gêr, e kempennas an ti, e skubas, e tigevnidas, e renkas e baperioù, ha d'an taol hanternoz, ez en em stagas ouzh ar groug...

Daou vignon, pe: tonket e oa

Ur mell ki-bleiz eo Nino. Brasañ ha skrijusañ hini bet gwelet ganin biskoazh, hep mar ebet ha, mard omp bremañ mignoned vat, bez' e rankan anzav amañ em boa bet ur c'horfad spont pa 'm boa graet anaoudegezh gantañ, ur c'hwec'h miz bennak a zo bremañ. Edon o kerzhout en draoñienn, evel bep beure, skañv ha mibin va bale, ha dibreder va spered, pa spurmantis, trumm, ur pezh ki-bleiz o tifoupañ eus pleg an hent ur c'hant metr bennak dirazon, hag o redek en arbenn din d'ar pevarlamm en ur harzhal. Spontet e oan hag e sonnas va gwad em c'hreiz. Ar c'hi-bleiz a dostae prim-ha-prim, ha roud ebet eus e vestr, e neblec'h. Amzer am boe da lavaret ouzhin va-unan : « Emañ o vont da lammat a-razailh warnon ha da zispenn ac'hanon kig ha kroc'hen ». Ha den ebet war-dro da c'houlenn sikour ! Ken pounner e oa va zreid ken ne c'hellen ket fiñval. Da belec'h mont, ivez, va Doue ? Redek a rafe ar c'hi primoc'h egedon, n'eus forzh penaos. Va c'halon a dalme feuls. Asantiñ a raen da'm marv pa glevis ur vouezh kreñv o hopal : « Nino, a-c'hourvez, a-c'hourvez, Nino ! Diouzhtu ! ». Digeriñ a ris va daoulagad hag e welis, daou vetr dirazon, ar c'hi o chom trumm a-sav, o vont, sentus, en e c'hourvez, hag o chom evel-se, berranalet, eonennus e

c'heol, hogen diflach e gorf a-bezh evel ur garreg e-kreiz ar mor...

Abaoe an deiz-se em eus bet tro d'ober tamm-ha-tamm anaoudegezh gant Nino, hag hiziv c'hoazh ez eo pevarlammet ar c'hi davedon, laouen, en ur fichal e lost p'en deus gwelet ac'hanon, prest da lipat karantek va daouarn gant e deod rust. Klač'h eo, siwazh : poan en deus, muioc'h-mui, o stlejañ e benn-adreñv, hag a-benn daou pe dri bloaz e vo seizet. Peluz ar penn-adreñv a zo un namm a-ouenn evit ar chas-bleiz, evel m'en deus displeget din e vestr an deiz all.

E vestr, Alan, am eus graet anaoudegezh gantañ an deiz-se ivez, hag alies abaoe ez eomp, hon-zri, da ober ur bale en draoñienn. Kontet en deus din n'eus ket pell zo, dre be daol-degouezh souezhus e oa en em gavet Nino en e vuhez :

— Edon d'ar c'houlz-se, seizh vloaz zo a-benn bremañ, o treuziñ ur mare diaes. Ar vuhez, gouzout a rit kenkoulz ha me, a denn a-wechoù d'ur veaj dre ar gouelec'h. Pep tra a gaven divlaz, disaour, an anken am gwaske, ar velkoni am c'hrigne noz-ha-deiz, ar boan-spered na'm leze mui e peoc'h. Ne gaven mui frealz ebet nemet er baleadennoù hir a raen va-unan-penn dre ar c'hoadeier pe er c'hêrioù bihan plijus a gaver tro-dro da Sant-Brieg : anavezout a rit kenkoulz ha me Monkontour, Kintin, Kastellaodren, ha gouzout a ran e plij deoc'h-c'hwi ivez c'hwilostat er straedoù riblet a diez kozh-kozh. Ur wech – ar goañv an hini e oa – ma oan chomet pell o ruzañ va botoù e Kintin, e spurmantis trumm e-kreiz an hent – edon em oto, war hent an distro, 'tu bennak kostez Peniti-Koedrac'h – ur

c’hi bihan war gab e revr, gleb-touilh ha difiñv dindan ar glav-bilh. Stardañ mort a ris hag an oto a chomas a-sav damdost d’ar c’hi. Ur c’hi-bleiz yaouank e oa. Trellet e oa bet gant bann-sklêrijenn ar gouleier war-grec’h, hogen ne ziskoueze ket bezañ spontet. Hañval ganin edo o c’hortoz. Ya, soñjet em eus : emañ ouzh va gortoz. Ha me neuze ha digeriñ an nor dehoù, hep en em soñjal pelloc’h, evel pa vijen bet o sentiñ ouzh ur youl don, ur meni “mouezh diabarzh” ma fell deoc’h. Diouzhtu, ar c’hi bihan a lammas e-barzh an oto, a strilhas an dour diwar e groc’hen, hag en em damolodas war an azezenn, en ur leuskel chilpadennoù eürus, e-giz pa vije bet merket ar plas-se dezhañ a-holl-viskoazh. Ha santout a ris-me un dra bennak o teuziñ en don-donañ ac’hanon : evit ar wech kentañ abaoe pell e santis e c’hellen chom, diwar neuze, en habaskted, evel dre vurzhud. Abaoe an deiz-se, Nino n’eo ket aet diwar va zro, na pa ve un eurvezh hepken !

— Kompren a ran, emeve. Anaoudegezh vat en deus en ho keñver abalamour m’hoc’h eus saveteet e vuhez dezhañ : panevet hoc’h eus dastumet anezhañ an deiz-se en hoc’h oto, e vije chomet da vervel e-unan-penn gant ar riv hag an naon, pe e vije bet flastret gant unan bennak...

— N’eo ket e-giz-se eo e welan an traoù, a respontas Alan. Tonket e oa deomp en em gavout war an hent-se. Mont a rin pelloc’h zoken : gwelet a ran er gejadenn dic’hortoz-se dorn ar ragevezh-meur, na mui, na maez. Hag e gwirionez...

— E gwirionez ? a c’houlennis, dre ma chome ar frazenn e-skourr.

— Ma ! Evit komz heñvel ouzh ar wirionez, n’ouzon ket pehini eus an daou en deus savetaet e vuhez d’egile, eme Alan, en ur flourañ karantezus pan e gi.

Tevel a ris rak pep ger a vije bet diezhomm : ne 'm boa ket soñj da vezañ gwelet alies ken bras karantez etre daou voud bev...

Un danvez-den

Deuet eo a-benn, erfin, da bediñ anezhi da evañ ur banne Koka gantañ. Abaoe mizioù n'en deveze mui ken soñj nemet hennezh : tremen ur pennadig amzer ganti, pell diouzh ar skolidi all. Abaoe mizioù e lavare outañ e-unan « Ret eo din kaout an hardizhegezh da bediñ anezhi ». E-pad ar c'hentelioù e selle outi, ha ne wele mui nemet kizennoù aour he blev ouzh he c'hilpenn moan, div daol dirazañ. Sorc'hennet e oa gant he dremm, gant he c'horf mistr, gant he divronn yaouank. Hañval gantañ ne oa ket hi diseblant outañ. Mousc'hoarzhin a rae-hi pa veze troet da farsellat. Ne oa ket bet, gwech ebet, a ziviz hir etrezo o-daou. Traoù diwar-c'horre, kentoc'h, divizoù boutin porzh ar skol. Koulskoude, na pe bras c'hoant en doa da gomz outi, da selaou anezhi, da bokat dezhi, da stardañ anezhi en e zivrec'h, da flourañ he c'hroc'hen, ha d'ober ganti kement a c'heller ober gant ur plac'h. Mezh en doa gantañ e-unan o soñjal e oa o vont da dapout e c'hwezek vloaz ha n'en doa ket c'hoazh poket da blac'h ebet. Ha dec'h, klevit 'ta, dec'h e oa bet trec'h war e lentidigezh. E-lec'h kimiadiñ diouti evel kustum dirak ar skolaj, en doa graet tri c'hammed daveti, ur paourkaezh mousc'hoarzh dihederzh war e lipenn, ha pedet anezhi da evañ ur banne e *Ostaleri Gwesklin*, brasañ tavar Sant-

Brieg. Ar c'hentañ souezhet e voe pa asantas-hi, e-giz pa ne vije bet netra natureloc'h.

Ha bremañ, ar c'hwitadenn, an drouziwezh. Bezañ gortozet keid-all, bezañ hunvreet, bezañ krenet keid-all, evit ken dister tra... Setu tri c'hardeur m'emaint o-daou er *Gwesklin*, hag an diaezamant etrezo ne ra nemet kreskiñ. Un daol vihan e-tal ar prenestr. Er-maez, heol miz Meurzh a c'hoari koach-koukoug gant ar c'houmoul etre ar c'haouadoù glav yen. Kordigellat a ra-eñ plouzenn e Goka-kola ha divouedañ e empenn, o klask un dra bennak speredek da lavaret. Bep tro avat e sko hebiou. Abaoe m'emaint en ostaleri, a-boan m'o deus eskemmet un nebeud gerioù. « Un dra bennak a zo da lavaret, en anv Doue... » Klevet a ra ar gomz-se o voudinellat en e zivskouarn. Biskoazh n'eo bet-hi ken tost, ha biskoazh ken pell. An danvez-den a zo skoulmet e gorzailhenn. Santout a ra ar gwad o sevel d'e zivjod hag o talmiñ ouzh e zaouividig. An tav mantrus a bouez warno a vez lakaet sklasusoc'h c'hoazh gant cholori an ostaleri : heklev an divizoù, taolioù-c'hoarzh, storlok an tasennoù hag ar gwerennoù. « Penaos e ra ar re all, pa 'z int ken eürus ? » Dinec'het en em gav, en un taol, pa glev anezhi o lavaret : « Ma. Ha marteze e vefe poent mont bremañ, ne gav ket dit ? » Asantiñ a ra, buan, re vuan. « Bezañ va-unan-penn. Lonkañ va mezhadenn 'tu bennak, pell diouti... pell diouzh he selloù, pell diouzh an daoulagad-se, a raio goap ouzhin warc'hoazh er skolaj... »

Er-maez e tegemero gant anaoudegezh-vat flac'had an avel sklas ouzh e jodoù tomm-berv. Amgredik an tamm anezhañ e klevo anezhi o lavaret : « N'eo ket

gwall ziwezhat. 'Teus ket c'hoant da vont d'ar sine ? ». An danvez-den e lammo feuls e galon en e greiz, evel ur c'hondaonad digastizet a-daol-trumm, ha dic'hortoz-kaer, dirak ar bagad fuzuilhañ. Diwezhatoc'h, er sine, e gwarez an damskeud, goude stourmoù diabarzh marzhus ha kiladennoù aonik e teuio a-benn da lakaat e zorn delt war hec'h hini, ken mouest all. Pell goude e tostaio e benn ouzh hec'h hini ha, diampart, e klasko he muzelloù. Ne vo ket marvailhusañ pokadenn an istor, met hini ebet eus an daou bichon ne c'hello keñveriañ gant tra ebet anavezet ganto.

Ne oar ket c'hoazh an danvez-den e vreo-hi e galon hag e freuzo e eürusted un nebeud mizioù goude. Ha penaos e ouife en devo bevet, etre ostaleri *Gwesklin* ha sine *Le club 6*, diwezhañ eurvezhioù e vugaleaj ?

Lili hag ar geizh

Emaomp e deun traoñienn gildroennek ar Gouedig, nepell diouzh kreiz-kêr Sant-Brieg. Glas ha gwezennek eo an takad, un dudi ! Sioul eo ivez, ha ken didrouz ken e vez diaes krediñ e kaver war-hed div gammed ac’halen redired an otoioù er straedoù, mesk ha keflusk an engroez, trouz ha safar al luziasennoù kirri war ar boulouardoù bras. War vord an hent, en ardraoñ, un toull-ti, ur paourig a hini. Emañ e krec’h ur bradenn war zinaou a-us d’ar stêr. Un annez plijus e oa, moarvat, pa oa bet savet, ur c’hant vloaz bennak a zo. Biskoazh den ebet ne ’m eus gwelet o chom ennañ avat hag an ti a zo erru disto ha dirapar. Digor-frank war ar goullo emañ an nor hag an daou brenestr, hag an talbenn a zo dislivet ha laourek. Dirak, al leur a zo aloubet gant bodennoù bras a zrez hag a spern hag ar wenodenn a gas d’an treuzoù a dro, kerkent ha ma ra glav, d’ur gaotigell briellek ha spegus. E miz Gwengolo e oa bet ur strolladig punked oc’h ober o annez eno, mennet, war a lavarent, da skouatiñ an ti ha da dremen ennañ ar mizioù du. N’int ket chomet gwall bell avat, ha n’o deus ket padet ouzh glebor ha skoufladoù yenijenn kentañ miz Du. Skampet int kuit, o lezel war o lerc’h ur bern atredoù, a laka arvest an ti digavandenn-se da vezañ glac’harusoc’h c’hoazh. Gwelet em eus anezho

en-dro e kreiz-kêr, en o c'hoazez dirak ar *Super U*, gant o chas, o c'houlenn an aluzenn. N'ouzon ket e pelec'h emaint o chom bremañ. Kavet o deus ul lojeiz all, evit doare.

Kalz tud paour-razh evelto a zo e kêr, ha n'eo ket souezhus pa ouezer ez eo Sant-Brieg paourañ kêr ar vro. Sed amañ un nebeud sifroù, bet dastumet ganin an deiz all e-barzh an *Télégramme* : feur dilabour : 19 dre gant, da lavaret eo div wech uheloc'h eget ar geidenn evit Bro-C'hall. 30 dre gant eus ar boblañs dindan bevenn ar baourentez... Ar pep nec'husañ avat eo stadañ ned a ket an traoù war wellaat e Sant-Brieg. Neb en defe anavezet ar gêr daou-ugent vloaz a zo – pa veze c'hoazh labour evit an holl en uzinoù tro-war-dro – hag a zistrofe bremañ, goude bet o chom e lec'h all e-pad ar c'heit-se, a vefe souezhet, dipitet ha spontet gant an arvest a ginnig ar gêr : stalioù serr, savadurioù prevez pe foran dilezet hag o kouezhañ en o foull (chapel Sant-Gwilherm, da skouer, pe ar savadur a oa ar *Monoprix* ennañ ergentaou), tavandeien aet e gouezoni oc'h astenn an dorn amañ-ahont, bagadoù tud bec'hiet gant an dienez o kantren e kêr gant o chas, hag o spontañ ar mammoù-kozh...

Grit anezho peorien, reuzeudien, ezhommeien, huboted, korkerien, jaloded, pilhennerien, evel ma vo ar gwellañ ganeoc'h, an anv ne cheñch ket kalz a dra, e gwirionez, hag an aozadurioù karitezel, ar servijoù sokial o devez amañ labour n'eus forzh pegement. Lili a zo bet fromet he c'halon gant ar gwel eus kemend-all a zienez hag a boanioù. Anavezout a ra an holl geizh a weler er straedoù, hag anavezet eo-hi dre bevar c'horn ar gêr. 75

bloaz eo-hi. Dindan he fennad blev gwenn, un dremm o skediñ gant al levenez, ha daoulagad lemm a sell pizh hag eeun ouzh an unan. Lavarout a ra alies e plij dezhi bezañ aet da gozh. « Bremañ ez eo dieub va c’halon, ha diere a-grenn ! Gall’ a ran ober ar pezh a blij din... » Hag ar pezh a blij dezhi, just a-walc’h, eo sikour ar re all. Diazezet he deus ur gevredigezh, hervez lezenn 1901, bet badezet ganti *Holl a-gevret*. Feurmet he deus ur sal vihan e kreiz-kêr ha terket enni ur pezh plijus ma c’hall pep hini mont en e goazez, evañ ur banne kafe, kaout kavandenn ha diskuizhañ un tamm bihan kent talañ en-dro ouzh ifern pemdeziek ar re n’o deus na ti nag aoz pe ar re o devez bec’h o skoulmañ ganti.

Lili e vez kefridi warni etre daou benn an deiz, a c’hellit va c’hrediñ : selaou, evel-just, hogen ivez skoazellañ, kuzuliañ, kennerzhañ ar re a zo aet re izel o c’halon, ambroug an hini a rank mont da *Pôle Emploi*, heñchañ e milendall ar burevioù ur vaouez digalonekaet na gred mui mont da adneveziñ he RSA. Bemnoz e vez, gant un den a youl-vat bennak, o c’hedal ar pred ma vo serret ar stal bio, lakaet er-maez an diwerzhadennoù ha stlapet d’ar blotoù ar produioù diamzeriet. Rener ar stal a anavez mat anezhi, ha kemeret en deus ar pleg da lakaat a-gostez, eviti, ur c’harchedad produioù hag a zo mat c’hoazh da zebriñ.

Barradoù-digalonekaat he deus, moarvat, evel an holl ac’hanomp, hogen dinded a-walc’h he deus ivez d’o c’huzhat ha d’o mirout eviti hec’h-unan, hep o diskouez da zen ebet. Ur souezh eo, e gwirionez, gwelet e chom laouen ha drant en desped d’ar reuzeudigezh a wel

bemdez-Doue en-dro dezhi. Ha pa c'houlenner ganti hag-eñ n'eo ket re skuizhus bezañ evel-se atav e-kreiz ar firbouch hag an difrae, e respont : « Geo, skuizhus eo, anat deoc'h ! Hogen amzer a-walc'h am bo da ziskuizhañ pa vo bet lipet va loa ganin ! ».

Dilojañ, pe: eus an eil porzh-mor d'egile

Kabiten ha Charly. Charly ha Kabiten. An daou geneil n'haller ket dispartiañ. Ne vez morse gwelet an eil hep na vefe egile gantañ, ha ral an dro ma veneger amañ, e porzh al Lege, anv ar mestr anez menegiñ diouzhtu hini e gi feal.

Charly ? Ur bastard a seizh vloaz, touzet raz, pavioù berr, o fichal e lost ordin, e fri gantañ en nec'h pe a-rez an douar, o ruffañ gant dudi an holl frondoù marzhus a glever en-dro d'al lenn-borzh, betek el lousañ kornioù.

Kabiten ? Un denig treut e-tro hanter-kant vloaz, ur sigaretenn amboulet fall dalbezh e korn e vuzell, ur c'hozh kasketenn vartolod e mezher glas tev e-krap e skouarn kleiz, ha dilhad navet en-dro d'e gorf. An holl a ra Kabiten anezhañ abalamour m'emañ o chom e-bourzh e vag, *Trouz ar mor*, amaret e-tal ostaleri *An Oriaved*, ha me n'anavezan anv all ebet dezhañ. Martolod e oa gwechall, ha bet enrollet e-bourzh ar brasañ listri-karg. Graet en deus evel-se, nouspet gwech, tro ar voull-douar, hep gwelet kalz a dra avat, abalamour ma laboure war-dro ar c'hefluskerioù. Chomet eo kamm da-heul ur

gwallzarvoud c'hoarvezet gantañ e Rotterdam, ugent vloaz a zo, ha klañvik eo e spered ivez, hervez an dud, diwar ar c'hloaz-se en e benn. Bevañ a ra abaoe diwar un tammig pañsion, arouarek an tamm anezhañ, ha kas a ra e amzer o lostenniñ en-dro d'al lenn-borzh gant Charly, o vutuniñ, o sikour henn-mañ-henn war-dro bag-mañ-bag. En em vezviñ a ra ivez, ur wech ar miz hepken avat, pa gouezh e bañsion en e chakod. Pa vez diharak an amzer e chom en e goazez e ostaleri *An Oriaved*, hag e lenn ar gevier a vez embannet e-barzh ar c'helaouennoù, hep teurel re a gred warno, ar pezh a zo ur merk a furnez.

Ar vag emañ o chom enni gant Charly n'eo nag ur vatimant vras nag ur penton kennebeut, ha n'eo na vil na difeson. N'eus ket kalz a ichoù enni avat ha Kabiten a rank chom en e goazez atav pe en e zaoubleg. N'eo ket chalet kelo 'vit se avat, ha n'eus nemet un dra hag a zisplij dezhañ : pa vez barradoù gast-amzer er goañv, ha pa vez an avel-viz o skubañ kaeoù al Lege, Kabiten ha Charly ne c'hellont ket kousket takenn abalamour da safar an driñsoù metalek ouzh ar gwernioù ha da yudadennoù an avel. A-hend-all, biskoazh ne 'm eus klevet Kabiten o klemm, ha Charly, ouzh ar gwel anezhañ, a zo ur c'hi eürus.

Aes deoc'h kompren, neuze, perak e voen souezhet pa lavaras Kabiten din an deiz all e oa o vont da zilojañ. Ya. Emañ o vont da guitaat porzh al Lege evit mont d'ober e annez e Pempoull.

— Deuet eo al Lege da vezañ ur porzh evit ar vour-c'hizien, Herve. Diouzh ar c'hiz eo. *The place to be*, ha me 'oar-me ! Kaoc'h-ki-du ! Ne weler mui amañ nemet krak-aotrouien ha brizh-itronezed. Hag erru ker-ruz an

amariñ amañ ouzhpenn. E Pempoull e vo gwelloc’h va jeu, ha tostoc’h e vin eus Pontrev, va bro c’henidik.

— Ne refomp mui a-gevret, ni hon-zri, ar verdeadenn eus al Lege da Bontrev neuze ?

— Nann, Herve, siwazh, echu eo. Graet eo va soñj ganin.

Nag a bet gwech, koulskoude, hon eus graet an hent dre vor, Kabiten, Charly, ha me, eus al Lege da Bontrev ! N’anavezan, e gwirionez, merdeadenn ebet a-gement hag a vefe plijusoc’h : ret eo kuitaat porzh al Lege d’ar gourlanv ha skeiñ rag-eeun d’ar gwalarn. Pemp pe c’hwec’h bourzh d’an nebeutañ a zo d’ober a-barzh tizhout ar mor don, ha goude n’eus mui nemet un dra d’ober : hedañ aodoù roc’hellek ar Goueloù a-vabourzh. An arvest-se a zo un dibab evit ar merdeer avat, ha taolennoù kaer-meurbet a zibun dirak hon daoulagad endra ma ’z eer hebiou da inizi Sant-Ke, ma tremener a-vaez da begoù-douar Plouha, uhel-spontus a-us d’ar mor. Goude un dek eurvezh bennak setu bremañ bazenn beskedus Ploueg-ar-Mor, ha bremazon e rankfomp korntroiñ enezeg Vriad dre bladenn ar C’hign Bras ha treuziñ pladur ar Maen-Marc’h evit treiñ penn war-eeun da ganol-vor ar Ferlas. Eno e vo ret gortoz adarre ar gourlanv, a-hend-all e rankjer lakaat keflusker ar vag d’an tizh ruz, ha c’hoazh ne vijer ket evit trec’hiñ war ar c’has, a zo kreñv-spontus er rannvriad-se. Ha setu ni e genoù an Trev, ar stêr a zisparti Bro-Oueloù eus Bro-Dreger. Gwidilañ a ra ar stêr dre un draoñienn don he zorioù gwezennek. A-benn nebeut e welfomp, o valirañ uhel a-us d’ar glazadur ha d’ar gwez, kastell kozh ar Roc’h Ugu, ha ne vo ket pell ken Pontrev a-benn neuze...

An holl draoù kaer-se a sav war va eñvor bremañ pa dremenan e-tal *An Oriaved*, ma ne welan mui *Trouz ar mor* amaret en he lec'h boas. Kenavo Kabiten, kenavo Charly, ha chañs vat deoc'h ho-taou e Pempoull !

Dirak ar stal-besked

Pesked ha boued-aod, blodeged-mor ha krestenneged diouzh an druilh ! Chifretez ha grillhed-traezh, rigadelled ha kraoñ-mor, bigorned ha brennig ! Gant an Nedeleg e tic'h lann ar beskerezh *Flomer* war ar straed vale : bep bloaz, adal ar bemzek a viz Kerzu, e laka ar marc'hadour pesked ur stal er-maez, dindan ur gledourenn, evit ur mare. « Mare argarzhus an Nedeleg, na petra 'ta ! » a c'hrozmol Anjela en ur dremen hebiou d'ar stal-besked nemeti a zo c'hoazh e kreiz-kêr Sant-Brieg. « Pa soñjan e pado evel-se betek deiz kentañ ar bloaz ! Me, n'eus forzh penaos... »

Kendalc'homp eviti ar frazenn bet lezet ganti e-skourr endra ma chom da c'henaouegiñ dirak an istr digor, flibous ha gludek en o c'hrogenn nakret, kichen-ha-kichen gant ar c'hregin sant-Jakez : « Me, n'eus forzh penaos, n'eo ket hiziv eo e prenin pesked amañ ». Anjela a zo, e gwirionez, evel ur bern tud : mare an Nedeleg ne blij ket dezhi tamm ebet. Adal dibenn miz Du e vez bernioù eñvorennoù oc'h en em silañ, treitour, en he spered, hag erru e-kreiz miz Kerzu e wel, spontet an tamm anezhi, prantadoù a-bezh eus he zammig buhez o tifoupañ, traoù e karje bezañ ankounac'haet anezho pell-pell zo. Hogen

Anjela – siwazh dezhi – n’eo ket evit ankounac’haat, hag ar froudad eñvorennoù n’eus ket tu da lakaat harz dezhi. Evit komz heñvel ouzh ar wirionez, n’eus ket par d’ar pesked ha d’ar c’hrestenneged da freskaat taolennoù he buhez a-wechall. Ar c’hranked, da skouer, gant o meudoù kreñv e penn o favioù diaraok, al ligistri, en o c’hrogenn glas-du, evel an hini emañ paotr Flomer o paouez lakaat dirazi, war ur gwelead goumon fresk a-us d’ar skorn. An tad-kozh, gwechall, a lakae kevell da besketa anezho e-tal Loktudi, a-vaez da Lanngozh, etre Karreg-Saoz ha Maen-Bret, ha dont a rae gantañ d’ar gêr, e-tro unnek eur, div voutegad leun-barr gant kranked. A-wechoù e veze ul legestr bennak gantañ en e vouteg, hogen kuzhet mat dindan e sire, ur sire en devoa pleget aketus war e besketadenn, hervez giz ar vro, abalamour da selloù drouk’hoantus ar besketarrien all. Pebezh plijadur neuze, da greisteiz, ouzh taol ! Fistilh gant ar gendirvi hag ar c’henitervezed, ha talabao eürus en-dro d’an daol vras !

Klevet a ra bremañ c’hoazh ar grogenn o strakal, ha glaourenniñ a ra, ken nemet o soñjal e blaz ar c’hig gwenn dindan ar glorenn goural. N’eo ket bet e Loktudi abaoe obidoù an tad-kozh, ugent vloaz zo. Ne oar ket petra eo deuet ar vag da vezañ. *Avel Walarn*. Evel-se eo e oa bet badezet. Gouzout a ra hepken ne oa ket bet aes gwerzhañ anezhi, abalamour ma oa bet kavet re gozh gant ar re a oa bet war-nes-taol da brenañ anezhi. He c’hoar henañ eo he doa graet war-dro pep tra, n’eus forzh penaos. Hag hi, Anjela, he doa bet he lod a-ziwar-lerc’h an tad-kozh, ur yalc’had vat zoken : ti ar C’hoadigoù, gant al liorzha bras, a oa bet gwerzhet mat ! Bern avat n’eo ket mammenn, hag Anjela he devoa fripet he zrantell gant dispignoù

direizh. Biskoazh ne oa bet plac'h da voustrañ war he yalc'h. A-benn dek vloaz goude marv an tad-kozh ne chome mui ur gweneg ganti war he c'hont, ha bremañ, abaoe ma oa bet ezfredet, edo war an douar noazh...

Emañ bepred en he sav e korn ar straed. Pegeit zo emañ eno, o sellout ouzh ar beskerezh ? Tro-dro dezhi, an dud a ya hag a zeu, o pleustriñ gant o difraeoù a-benn an Nedeleg. Yen eo, un avel but a spinac'h kroc'hen he dremm hag en em sil, treitour, dre zindan gouzougenn he mantell. « Poent eo mont, » a lavar outi hec'h-unan, en un huanadenn hir. Evit mont betek ar *Super U*, straed Sant-Gwilherm, n'eus nemet un daou c'hant metr bennak. Eno, e rann ar boued-mir, e preno, evit he c'hoan, ur voestad sardined-eoul. An hini varc'hadmatañ...

Muderezh

Iffig a zo barzh hep gouzout dezhañ. Alies, en noz, pa ne zeu ket ar c'housked dezhañ, e chom gourvezet war e wele, e-kichen e wreg, digor bras e zaoulagad gantañ en deñvalijenn, hag e tibun, dre e soñj, anvioù ar stêrioù ez eo pitilh ganto abaoe ur viken, ha marteze a-walc'h, a-viskoazh : « ar Goued, al Leñv, an Trev... An Trev, al Leñv, ar Goued.. Al Leñv, ar Goued, an Trev ». Estreget dibunañ an anvioù eo a ra : furchal a ra en e vemor ha heuliañ, dre e spered, red an teir stêr a ya d'ober harzoù e Vro-Oueloù c'henidik. N'en deus ket a ziverr-amzer bourrusoc'h, en e nozvezhioù an hun, eget hedañ, dre e soñj, ar Goued diegus, eus e vammenn, war Grec'henn Kerchouan, betek e c'henoù, e porzh al Lege, lec'h ma tinaou e Mor Breizh. Plijout a ra dezhañ ivez ober un ehan e Kintin, ha sellet ouzh an dour o lipat traoñ ar c'hastell. Pa vez aet skuizh gant ar Goued, ez a da vale war vord al Leñv, kaerañ gwazh-red ar c'hontre, o rambreal a-dreuz pradoù ar vro goude bezañ treuzet Kastellaodren diwar-herr, en ul lamm-dour eonennus. Ne ra ket fae kennebeut war kildroennoù an Trev, a red da gentañ gant e benn e-unan, stultennus, kent furaat ha sioulaat e-harzh mogerioù kozh eus ar gêr a Wengamp, ha ledanaat e-tal Lezardrev.

E wreg n'he deus perzh ebet en e verlobiaj kuzh. Ouzh he c'hlevet ez eo he gwaz un den tavedek, tra muioc'h : « Iffig en deus kollet e deod 'tu bennak pell zo. Ne deu ket teir gomz dioutañ bemdez, hag a-wechoù e tremen ur sizhun hep teurvezout teurel ur ger er-maez... » Penaos e ouife-hi e chom he gwaz war dav, peurliesañ, abalamour m'en deus kavet, tu bennak war ribl e stêrioù, e skeud ur bodig haleg o trempañ e skourroù en dour sklaer ha fresk, eienenn ar sederoni ?

Va ambrouget en deus, ur wech, n'eus ket gwall bell zo, war zigarez kuzhutadenn, betek unan eus e gornioù pesketa muiañ-karet. Lezet e oa bet ar c'harr-tan ganeomp, abred diouzh ar beure, war vord an hent, e maezioù Plenaod, ur pemzek kilometr bennak diouzh Sant-Brieg. Dirazomp, pedadenn vut ur wenodenn o sankañ en ur saonennig etre daou gleuziad strouezh, en ur gammigellat. Tre en-traoù, ur foenneg dizarempred goloet a flach. Goude lampet dreist ur c'hleuz, setu ni, a-daol-trumm, e damskeud ur meni frankizenn guzh ha leun a sioulded, ur baradozig skoachet dindan un dolzennad delioù. Izeloc'hik, ar stêr e virbilhe he dour seder ha bev, ha war an tu dehoù, ur gildroenn a yae war ledanaat, o stummañ ul lenn vihan. A-dreuz ar brankoù uhelañ, an heol a sile e sklêrijenn war gorre lufrennaouus al lennig-se, ha nadozioù-aer o favioù tanav hag o eskell damvoull a rikle goustad ha didrouz war an dour sked-disket. « Edo ar vilin gozh en tu all d'ar stêr » eme Iffig, goude staliet e gador-bleg ha renket e walenn-besketa. Ha gwir eo e verzis, war ar ribl all, ur c'han hag arvogerioù iliavek holl. « Pell zo avat, a gendalc'has Iffig, ne glever mui tak-tak ar vilin na trouz an dour o tiruilh war ar rod :

devet e oa bet ar vilin da vare an Dispac'h, abalamour ma oa deuet da vezañ, a-hervez, un neizhiad Chouanted. Ne voe ket adsavet, hag an hent a gase di, unan gwall ziaes, war a lavarer, a zo bet stanket da viken pa voe adlodennet an douaroù, ahont, a lavaras din c'hoazh, en ur ziskouez lez ar stêr. » Biskoazh ne 'm boa klevet va mignon Iffig o tibunañ ur brezegenn ken hir.

Ret eo din anzav avat e chomas mut betek an abardaez. Ur c'haer a zevezh hon eus tremenet eno avat. Mann ebet da ober nemet heuliañ dre hor selloù ar flojennoù war c'horre an dour, selaou hiboud ar stêr ha sarac'h an avelig eürus en delioù, evañ gwech an amzer ur gouzougad sistr fresk ha debriñ a galon laouen da greisteiz kilhevardon ha bara du.

Intent a ran bremañ perak e chom mut er gêr : ar momedoù eürusted a zo evel ar brasañ frapadoù poan : n'eus ger ebet evito !

Derc'hel da vont...

Ur porzh-mor e Bro-Oueloù. Krog eo tarzh an deiz da skleuriñ. Diskennet eo an den betek ar c'hal dre ar straedig serzh ha strizh riblet a diez kozh peuzuhel savet a-hed hag a-dreuz. Trouz ebet tro-war-dro, war-bouez heklek kilredenn wengolo war an traezh, du-hont, en tu all d'an tour-tan, kemmesket gant mouezhioù klemmus ar skreved. Evel bep mintin d'an eur-mañ. Emañ an traoù war o reizh. War an hent, unan bennak en deus hopet dezhañ : « Mat ar jeu, Tad-kozh ? ». An holl er vro a ra *Tad-kozh* anezhañ abalamour ma oa bet lesanvet evel-se gant e vab-kaer da-geñver ganedigezh e verc'h-vihan kentañ, un ugent vloaz bennak a zo. Respontet en deus, evel m'eo boazet d'ober gant an dornadig tud a ya c'hoazh e brezhoneg outañ : « Derc'hel da vont ».

Larget en deus ere ar penn a-raok, ha, gant un hanter dro dornikell en deus lakaet tro er c'heflusker, diboan-kaer. Ar *Baradoz* a zo aet war-raok. Evit mont betek pladenn an Horzh e ranker ober an dro da Enez-Harbour ha loveal kalzik etre ar c'herrigi da dapout ar mulgul. N'eus forzh. Anavezout a ra ar strizhoù hag an odeoù-mor kenkoulz hag ar besketaerien a vicher : setu ugent vloaz bremañ ma 'z a pell er-maez, bep mintin, da sevel

e gevell war bazennoù Kein-Greis. Hiziv ez eo brav an amzer. Sioul ha plaen ar mor. Un avelig skañv a c’hwezh eus ar gevred. Du-hont hepken, e-tal bazenn Kalvez, evel boaz, e weler an tonnoù o sevel hag o tiskenn, o c’hoari tro ar c’herreg, o koeñviñ hag o tarzhañ en un dispac’h spoum abalamour d’ar c’has kreñv-spontus a zo eno. Ar *Baradoz*, brañsigellet skañv gant an houlennoù, a faout ar mor. Diaraog lemm ar staon a rog an tonnoù hag ar roufenn wagennek savet war-lerc’h ar vag en em zispenn en un taol-kont. Ne glever nemet ar c’heflusker o tufañ a-daoliadoù raouliet, tarzha taer ar gwagennoù ouzh ar c’houc’h, ha galvadeg ar skrev hag ar gouelini gwenn o troidellat uhel en oabl glas sklaer. Tremenet gantañ Enez-Harbour, n’eus mui dirazañ bremañ nemet ar mor, ec’hon ha don, e ruilh-diruilh e houlennoù, tre betek tornaodoù uhel Erge-ar-Mor, er biz, en tu-all d’ar bae divent...

Ar c’hevell ne oa ket kalz a dra enno : pemp pe c’hwec’h krank bras, daou grankig munut hag ul legestr bihan en doa ranket teurel en dour abalamour ma ne oa ket deuet c’hoazh d’e vent reizh. Disheñvel eo bet an traoù ar wech-mañ avat, rak e-lec’h boueta ar c’hevell en-dro hag o adlakaat er mor en deus miret anezho gantañ. O gwelet a ra dirazañ er vag, traezhoù didalvoud a-benn bremañ, gant o flojennoù spoue hag o bannieloùigoù a-zivilh. Goude ur sell diwezhañ war an dremmwel, ar *Baradoz* en deus troet penn. Skeiñ a ra rag-eeun war-du ar porzh. Emañ Tad-kozh en e sav, sonn war e zivesker, ha peg mat er baol. Ouzh ar gwel outañ n’eo ket kozh. Paret eo e selloù, dindan erien c’hlas e gasketenn vartolod, war an aod a weler e drolinenn o spisaat tamm-ha-tamm. Dre deurel evezh a-walc’h e-pad bloavezhioù, Tad-Kozh a zo

deuet a-benn da anavezout holl vunudoùigoù an aod. Gouzout a ra pelec'h emañ an ti-mañ-ti, ha n'eo ket dav dezhañ kemer e verkoù war an douar : lavaret en deus d'e verc'h, meur a wech, dre fent, e vije gouest da zistreiñ d'ar porzh gant daoulagad mouchet.

E verc'h... Hi 'ni eo he deus silet dezhañ an deiz all e pleg e skouarn, a-greiz ma oant o lidañ e zeiz-ha-bloaz : « Setu paket ho pevar-ugent ganeoc'h, Tad. Ne vefe ket fur, hiviziken, derc'hel da vont da besketa bep mintin, hoc'h-unan-penn ». Tad-kozh n'en deus rannet grik, n'en deus ket klasket enebiñ, ha klozet en deus, gwellikañ m'en deus gallet, war e zesped. Aner e vije bet klask derc'hel penn d'e verc'h. E gwirionez, bez e oa o c'hortoz an drase abaoe pell a oa. Ma... Warc'hoazh e vezo tennet ar vag war ar sec'h. Buan a-walc'h en em gavo unan bennak da brenañ anezhi. Goar en do Tad-kozh da bourmen e galite en-dro d'ar porzh. Ha pa c'houlennno unan bennak « Penaos 'mañ kont, Tad-kozh ? » e responto, hep ober van : « Derc'hel da vont... »

Embrezeg Kati, servijourez e Ostaleri ar Porzh, e Loktudi

« Un eur ha kard ! Gwall hir am eus kavet ar beure-vezh, va Doue ! Aet eo kuit, a-benn an diwezh, paotred o zroiadoù digor-kalon, ha tommet mat dezho, lod anezho. Pa soñjan em eus ranket selaou o garzachoù kozh lamprezenned ! Ma ! Sioul e vo an traoù betek e-tro teir eur. Neuze en em gavo ar retredidi evit o banne kafe, goude o c'houisk-aez. Ar re-se a vez sioul an darn vrasañ anezho, peurluviañ. Nemet, evel-just, e rankan mont d'o servijout, ouzh taol, ha tre betek war al leurenn, er-maez, pa vez brav an amzer. Ha kalz skuizhusoc'h eo eget chom a-dreñv an daol-gont, amañ, etre ar blomenn bier hag ar perkulator... Evel ma lavare va mamm-gozh : kerzhet n'eo ket skuizhus. Piltrotat avat ne lavaran ket... A-wechoù em bez poan em divesker, ur boan ne c'hallan ket padout ganti, dreist-holl en noz, em gwele... Che ! Bec'h a vez alies, ha bec'h am eus bet, ar mintin-mañ c'hoazh, ha n'eo ket un tammig eo ! Da seizh eur, kerkent ha digor an ti, e oa en em gavet paotred koc'hu ar pesked asambles gant Mimil hag e frai Theo, an daou besketour. Ar re-se eo ar re washañ ! Neuze e vez blejadeg en ti 'giz pa vijent o werzhañ o brizhilli pe o garlized dindan ar c'hoc'hu, en tu all d'ar c'hal. Hag o vutuniñ dindan va fri, ha ne oa ket seizh

eur c'hoazh ! Berzet eo, koulskoude. Troellennoù moged o sevel, heugus, a-us d'ar c'hontouer. Ur sav-kalon ! Ha n'eo ket tizan eo am eus dinaouet dezho : bier da seizh eur diouzh ar mintin, va Doue, ma n'eo ket un druez eo ! Ha me, anat deoc'h, ne c'hellan ket klemm. N'eus ac'hanon nemet ur servijourez. Ha tezennoù kras ganto, evel-just, hag int ha c'hoarzhin a-strak ouzh o fentigelloù null ! Hag ober fas koad ne c'hellan ket, evel-just, na kas anezho da vale gant ur begad lemm pe ur ger sec'h bennak : dav din bezañ atav grasier ha diskouez ur fas laouen ouzh an holl, daoust ma vez mezhañ din a-wechoù reiñ skouarn dezho... Mezhekaet on bet evel-se, meur a wech, dirak an holl... Ya, bremañ e vo sioul an traoù. Da ziv eur evel bemdez e teuo Malo, lesanvet ar barzh paour. Eñ a raio ur banne asambles gant Markiz. An daou-se a vez graet Laurel hag Hardy anezho : ur sac'h-toaz eo Markiz, ha Malo a zo ken kastiz ma n'eus nemet ar relegoù anezhañ... Hennezh a vez ordin o tennañ flugez din. Atav traoù dibenn pe dibennoc'h. Pitilh eo ganin, en gouzout a ran. Petra an diaoul en doa dibunet din dec'h ? Ya, setu an tamm paper m'en doa skrivet e sorc'hennoù warnañ : *c'hwil zo kaeroc'h eget an heol, splannoc'h eget ar strolladoù-stered*. Ur paotr mat eo Malo, ha desket ouzhpenn, ha panevet e vez ordin mezh-divezv... Mechal perak e ev kement ar baotred, amañ... Ar baotred ? Estregeto a ya d'ar boeson avat... Mimi, da skouer. Lakaat a ra-hi e-barzh koulz hag ur paotr ! Ur gaer a vaouez koulskoude... Ma ! Me avat ne ev ket. Nag amañ en ostaleri, nag e nep lec'h all ebet. Morse un dakenn... Arabat da zen en em douellañ, n'eus forzh penaos : ma labouran amañ e-barzh *Ostaleri ar Porzh*, defot gwell 'ni eo. Ul labour da c'hortoz 'ni eo. Da c'hortoz ma vo leun-pik, leun-barr, leun-chouk va fodig-

espern. Gouzout a ran petra a rin neuze : ne chomin ket da zizeriañ en toull-kutez-mañ ! Ar Vigouterien ez on erru skuizh ganto ! Ya, leizh va lêr ganto ! Da Kemper eo ez in... Ur stal dilhad merc'hed eo a brenin eno. Dilhad cheuc'h evit itronezed pinvidik... Anavezet e vo va stal dre holl e Kemper ha tro-war-dro. Ha neuze e teuio da'm stal bourc'hizezed Kemper... Ha graet e vo *Madam Kathy* ac'hanon... Gouzout a ran penaos e vo renket ar rakstal. Un dra a bouez eo evit ur stal dilhad : e-keñver fichañ eo gwerzhañ, evel ma lavare Mamm-gozh... Ha ne deuio da'm stal nemet tud a-feson, anat deoc'h ! E straed Kereon an hini e vo... Tri bloaz amañ, e Loktudi, c'hoazh, pevar marteze, ha neuze, me en em sacho ac'halenn... Ac'hann di e rankan pasiantiñ avat... Ma, sell 'ta piv ! Setu Yann Gozh o treuziñ ar straed. Yann dibalamour, kentoc'h, ya ! N'on ket evit gouzañv anezhañ. Unan c'hoazh ha ne ra ket ur c'hrogad ! Ya, ne ra netra, met firbouchal a ra bepred ! Ur bank treid ostaleri ouzhpenn ! »

... Hag a vouezh uhel :

— Mat ar jeu Yann ? Ya, brav an amzer hiziv... Gant ma pado ! Petra 'vo lakaet dit, mignon ?

Enez-Vriad

An daolenn a ziskouez ur prenestr digor-bras war burzhud bev ur mintinvezh nevezamzer : ar gwez karget a vleuñv gwenn a stou a-us da geot blin ar pradeier. El liorzhoù, ar struj a zo stank, ha soubet eo al lien e livioù sklaer ha splann. Pelloc’h e weler tiez trolinennet skañv a-us d’ar reier noazh riblennet gant melezour ur mor laezh. An oabl n’eus ennañ nemet un dister a goumoulennig, evel dianket, hag a ra an asvan d’en em zigareziñ da vezañ aze. Un eoullivadur war lien an hini eo, bet livet e 1924 gant Marc Chagall. Anv an daolenn ? *Ur prenestr digor war Enez-Vriad.*

Pa seller ouzh ur gartenn e weler ez eo lec’hiet Enez-Vriad e gwalarn bae Sant-Brieg, war-dreuz genoù an Trev, da lavaret eo e norzh Bro-Oueloù. N’emañ ket gwall bell diouzh an douar-bras : daou gilometr hepken diouzh beg An Arc’houest. Emañ Briad e gwirionez e-kreiz ur chapeledad diniver a enezennoùigoù bras pe vrasoc’h. Ac’hubet eo bet an inizi-se a-holl-viskoazh : roudoù arkeologel o sevel da 60 000 vloaz kent HS a zo bet kavet el lec’h anvet *Goareva*, da skouer, hag ar venec’h deuet eus Breizh-Veur o deus diazezet penitioù war meur a enezenn e-tro ar V^{vet} kantved. Diwezhatoc’h ez eo bet

enezeg Briad ur meni morailh hag a zifenne aodoù Breizh. Pesketaerien, kouerien ha tud a vor a zo bet o vevañ e Briad, ur boblad tud vunut ha n'eo ket bet espernet gant a bep seurt reuzioù, evel, da skouer, kleñved-red spontus ar c'holera er bloavezhioù 1830.

Neb a zilestr bremañ war an enezenn, e Porzh-Kloz, en em gav diouzhtu e-kreiz ur gêr vihan, enni straedoù strizh riblet a vogerioù peuzuhel. Ar mogerioù hag an tiez greunvaen toet-izel a zo alies-mat goloet o mein gant plant-krap : an teod-bouc'h, an dragonezenn eus Madera, pe al lireu glas ha gwenn eus Bro-Spagn, ar roz-krap gant o strobadoù rozennoùigoù. Lodenn norzh an enezenn, fustet gant an avelioù, n'eus nemet dibaot a wez warni. El lodenn su avat, an onn, ar gwez babu, ar gwez-tilh hag an aloez eus Bro-Veksik a ra berzh. Ar struzh a zo bet pinvidikaet a-hed ar c'hantvedoù gant spesadoù trovanel degaset gant an dud a vor.

En he c'haerañ e vez Enez-Vriad en nevezamzer hag e penn kentañ an hañv ha n'eo ket souezh, gant ar c'haerdreist m'eo an enezenn, e vije bet kement a arzourien – livourien ha skrivagnerien dreist-holl – o sodiñ ganti. Ar re gentañ eus an aotrouien-se en em gavas war an enezenn e dibenn an XIX^{vet} kantved, ha dalc'het he deus an enezenn d'ober berzh e metier an arz hag al labour-spered tre betek bremañ : komz a reer a-walc'h, e-mesk tud all, eus Erik Orsenna, en deus un ti war an enezenn ha klevet em eus anv eus ur Philippe Sollers bennak, a deu a-wechoù da deurel bec'h e spered e Briad. Kement-mañ avat a c'hoarvezas diwar-goust an enezidi a-gozh : priz an tiez hag an tachennoù en deus kresket, ya c'hwezhet

zoken. Gant ar bloavezhioù n'o deus ket gellet an enezidi treuzkas an tiez d'o diskennidi, gant ar c'her-disañs ma oa deuet da vezañ pep tra war an enezenn. An darn vrasañ eus an tiez a zo bremañ eil annezioù ha ne weler dre holl etre miz Here ha miz Mae nemet tiez o stalafioù serret. Evit bevañ war an enezenn, evit doare, e ranker bezañ pinvidik.

Bet on war an enezenn n'eus ket pell zo, hag e riskl da zispenn ho plijadur hag hoc'h imor-vat gant va c'homzoù e rankan anzav kement-mañ : kavet em eus re vrav an enezenn : naet ha kempenn pep tra, ya, hep mar ebet, hogen re naet, re gempenn, evel pa vijen en em gavet dirak kinkladurioù ur film pe en ur mirdi dindan an amzer. Kreñvaet e voe ar brizh-diaezamant-se pa 'm eus gwelet an dud bodet evit o c'hafe mintin dirak an ostalerioù war ar blasenn vihan e-tal an iliz : kredet a-walc'h em bije edon pell diouzh Breizh, 'tu bennak kostez Sant-Jermen-ar-Pradeier. Piv bennak a anavez un tammig kêrbenn ar C'hallaoued a glevo ac'hanon brav-tre. Tennet em eus va zreid buan-tre, rak va flijadur a rae mouzhig ouzhin. Ya, gwelloc'h en em gavan war an douar-bras, e-touesk an dud vunut...

Ergerzherien difiñv

« Aze emañ an dalc’h, eme va mignon Fernand, un denig dister ouzh ar gwel anezhañ, hag a gosha goustad e porzh Al Lege, an dud ne ouzont mui chom sioul en o c’hoazez war ur skaon e korn ar straed ha sellout ouzh ar bed tro-dro dezho. A bep tu e sav mouezhioù ouzh ho kemenn groñs da fiñval, hep rag na perag. Defot redek ar morioù pellañ, krapañ betek kern ar menezioù uhelañ ha treuziñ ar gouelec’hioù tommañ, ez eur lakaet da c’henaoueg ha da zroch ar barrez. Reolenn boutin an ehanoù-labour ’ni eo, ma ne gredfe den diskrediñ warni, war var e vrud. Hogen n’eo ket me, kredit ac’hanon, a yafe da boblañ digenvez sakr Robinson war e enezenn didud pe da lakaat reuz e-touesk meuriadoù gouez diwezhañ “Amerika-an-Traoñ” e sigur studiañ anezho... »

Fernand n’eo ket bet kalz er skol. Ur spered lemm-kenañ ha leun a skiant-vat en deus avat, ha deuet zo soñj din an deiz all eus e gomzoù poellek, a-greiz ma oan o selaou un abadenn er skingomz. An den aterset a oa ur skiantour brudet. Ekologour eo, hag ur mailh a spered, arroutet-mat war e vicher, n’eus ket da nac’h. Arbennigour war gerniaoueg “Amerika-an-Traoñ” eo. Ar gerniaoueg, evel a ouzoc’h, a zo lodenn uhelañ ar goadeg, bleñch ar

gwez, ma kaver un ekoreizhiad hag a zo chomet digemm abaoe milvedoù. Gant strad ar morioù ez eo kerniaoueg koadeier bras Amerika-ar-Su tachad gouez diwezhañ ar voull-douar. Selaou a raen neuze 'ta, ha teurel pled ouzh komzoù ar skiantour. Ha me ha soñjal : « Hennezh a oar anezhi », betek ma klevis anezhañ o vroudañ an dud da dreuziñ an hanter eus ar voull-douar evit tremen un nozvezh war ar gerniaoueg. Hag an den hag ober “ekotouristerezh” eus an dra-se. Hervezañ e vefe un doare dreist da “gizidikaat” an dud. Mat. Ne c’houlennan ket gwelloc’h eget e grediñ, nemet bez’ e c’heller en em c’houlenn, memestra, hag-eñ ne savo ket gwashoc’h reuz, c’hoazh, diwar al louzoù kinniget gantañ da wellaat stad an traoù.

Abaoe m’eo bet ergerzhet, anavezet, renablet ha tikedennet e 1910 pennahel an norzh, anezhañ diwezhañ tarch gwenn ar voull-douar, ez eo echu da vat mare an dizoloadennoù bras, hag an douristed o deus kemeret lec’h an dizoloerien broioù, kement ha ken bihan m’eo bet saotret an endro e pep lec’h. Poent e vefe, marteze, dilezel an touristerezh yoc’hek ha kas war-raok an ergerzherezh difiñv. Sed, da nebeutañ, ar pezh a zifenn Fernand, ha mar dichen ganeoc’h kejañ gantañ pa vez oc’h ober e dammig tro war ar porzh e lavaro deoc’h, marteze, kement-mañ, rak e ziskan muiañ-karet ’ni eo : « Kaer am eus bevañ e porzh al Lege, ha gwelet bemdez-Doue a bep seurt bagoù diwar prenestr va zammig lojeiz, an traoù-se ne zihunont ket ennon an debron beajiñ, ha n’eo ket warc’hoazh eo e welot ac’hanon oc’h ambarkiñ da vont d’ober tro ar bed. Ganet on bet, pevar-ugent vloaz zo, e skeud ar c’hloc’hti kichen, ha ne ’m eus ket c’hoazh, abaoe keid-all, graet

tro va boud. Em askre e lavaran deoc'h : me am eus daoulagad ha divskouarn. Peadra da welet ha da glevet penaos ez a ar bed en-dro. Ha gouzout a rit petra a ran pa vezan skuizh gant an dud, pa gavan hir va amzer ? Ma. Ez an da lavaret deoc'h : mont a ran war-droad betek kreiz-kêr Sant-Brieg ha saludiñ va mignoned ar gwez. Graet em eus anaoudegezh ganto tamm-ha-tamm, gant pasianted hag hir amzer, a-hed ar bloavezhioù, hag o anavezout a ran, an holl gwitibunañ. Ha va c'hrediñ a c'hellit : galloud a-walc'h he deus an tammig pourmenadenn-se evit lakaat termen da'm glac'harioù boutin... Beajiñ ? Un tamm boued-leue, tra muioc'h... »

Ha ma vefe ar wirionez gant Fernand ? *Beati pauperes spiritu*, evel ma lavare an hini all, ha gwazh a se d'ar skiantourien vrudet...

Evel kustum, Madam Liz ?

— Kafe hep sukr gant ur werennad dour, evel kustum, Madam Liz ?

— Ya Elodi, evel kustum, mar plij.

Div eur goude merenn, e ostaleri an Ti-post, straed Sant Gouenoù, e Sant-Brieg. Ar goñversanted hag an implijidi, evet ganto o banne kafe, a zo aet d'o labour en-dro, ha gant taol div eur o seniñ e tour an iliz-veur, damdost alese, emañ deuet tro “ar re all”, en o zouesk an hini a ra an holl *Madam Liz* anezhi. Den ne gredfe mont outi dre *Liz* hepmuiken, rak ar vaouezig dek vloaz ha tri-ugent-se, dre hec'h emzalc'h diseblant, he doareoù yen hag he dalc'h reut, a oar lakaat kemm ha hed etrezi hag an dud, hag evit komz heñvel ouzh ar wirionez, bez' ez eus anezhi pimpatrom an “dereadegezh”. Kenkoulz, ma teu bemdez da evañ he banne kafe e ostaleri an Ti-post, abalamour da vrud vat an davarn-se an hini eo : an ostaleri nemeti e kreiz-kêr eo, ma c'hall ur vaouez dereat tremen ur pennadig amzer hec'h-unan-penn enni hep bezañ lakaet evit kelo da vaouez a vuhez fall, da vambocherez, ha, dreist-holl, hep bezañ direnket gant gwazed divergont o klask ober al lez d'an unan. Madam Liz ne blij ket an “divergontaj” dezhi.

Spi am eus, va lenner, hoc'h eus amzer, rak emaomp o vont da dremen, evel bemdez, teir eurvezh gant Madam Liz. An amzer ! Aze emañ an dalc'h evit Madam Liz. Diouzh ar beure e tremen buan, n'eus ket da nac'h, etre kempenn ar ranndi bihan straed Sant Gwilherm, prenañ diankajoù, fardañ boued. Etre un eur hag un eur hanter e c'heller c'hoazh sellet ouzh ar c'heleier en tele. Goude avat en em sil e spered Madam Liz ur brizhdiaezamant hag evit mad ebet ne c'hellfe chom hec'h-unan-penn en he zammig ranndi, daoust m'eo sasun ha kinklet brav, ret mat eo anzav. Klasket he deus, evel-just, hogen darbet eo bet dezhi sodiñ da vat, gant an eurvezhioù oc'h en em astenn, hag hi digavandenn er ranndi goullo... Un druez !

Bemdez eta, etre div eur ha pemp eur e vez hi e ostaleri an Ti-post. Bemdez an hevelep lid, an hevelep taol e-tal ar prenestr, bemdez an hevelep lennadenn : *Ouest-Frañs*. Klasket he devoa, er penn-kentañ, lenn an *Telegramm*, met ne oa ket bet plijet gant doare ar gelaouenn : re vreizhek eo, ha marteze ivez ez eus er gazetenn-se mennozhioù kleizidik. Ha kazetennerien an tu kleiz e teu dindan o fluenn pennadoù-skrid “dizereat”. Gouezet mat eo. Hiziv c'hoazh eta, evel dec'h, evel warc'hoazh – mar plij gant an Aotrou Doue – e tiblusko *Ouest-Frañs*, eus ar bajenn gentañ betek ar bajenn diwezhañ.

Ret eo lenn goustad, adlenn, ober ehanoù gwech ha gwech all ha gourc'hemenn un tasad kafe all da deir eur, hag un trede da beder eur, evit gallout mont betek pemp eur. Ne vefe ket “dereat” chom da davariniñ evel-se hep evañ. Pa vez aet skuizh gant he lennadenn aketus e taol ur sell dre ar prenestr. Er-maez e vez tud atav, o vont hag

o tont. Bourrañ a ra sellet ouzh an dud. He diverr-amzer bennañ eo. Heñvel a-walc’h ouzh ar sine, gwechall, pa oa-hi plaserez er *Royal*, brasañ sine ar c’hreiz-kêr, d’ar c’houlz benniget ma oa teir sal e Sant-Brieg. Plaserez ne oa ket ur vicher fall : heñchañ an dud betek o flas, kinnig diennskorn ha madigoù en ehan-c’hoari, digeriñ an dorioù hag enaouiñ ar gouloù pe veze echu ar vannadenn. Evel just, gant ur vicher evel honnezh ez eo skortik ar retred... « Ma, tud gwalleürusoc’h eget an unan a gaver atav, pa seller pizh, » a lavar Madam Liz outi hec’h-unan, en ur adkregiñ gant he lennadenn.

D’an taol pemp eur e savo, e paeo an tri zasad kafe – tri euro ha tri-ugent sent, « marc’hadmatoc’h eget ar sine » – hag ez aio kuit, salutet gant Elodi, a lavaro dezhi, evel bemdez : « Ken arc’hoazh, Madam Liz ». Hag e savo gant ar straed Sant Gouenoù, kran, tonius, digavandenn, hogen “dereat”.

Un deiz a vo ma ne deuio mui. Klač’h e vo, marteze, pe marv zoken. Ur pratik all a gemero he flas neuze, ouzh an daol vihan e-tal ar prenestr, unan hag a ouio, evel Madam Liz, derc’hel e renk e breuriezh an digenvez.

Galeourien e Groñwel

Brezel a voe, etre 1793 ha 1815, etre Bro-Saoz ha Bro-C'hall, hag ar brezel dibaouez-se a zegasas ur blokus padus war arvorioù Breizh : paket e oa Bro-C'hall evel e gwask un durkez. Evit distardañ biñs-tro ar Saozon, a ginnige mougañ ar vro, e kemeras Napoleon, e 1802, an disentez da lakaat toullañ ur ganol etre an Naoned ha Brest. Ar ganol-se e oa he falioù pennañ liammañ gwelloc'h diabarzh Breizh ouzh an arvor ha krouiñ un hent daremprediñ nevez etre an div gêr vras, porzhioù oberiant anezho, a oa en arvar da vezañ mouget gant lestraz brezel ar Saozon, a sparle hent an dezougen hag ar c'henwerzh dre vor. Kregiñ a reas al labourioù war-dro ar ganol e 1806, ha ne voent peurechuet nemet e 1842 : 36 vloaz a labourioù ramzel ha tenn-meurbet, dreist-holl er c'hornioù-bro o zorosennadur digompez.

Unan eus al lec'hioù ma voe al labour en he diaesañ e oa Groñwel : pintet eo uhel ar barrez-se, e penn reter ar Menezioù Du, hag eno emañ linenn disrann an doureier etre daou ziazad hidrografek : hini ar Blavezh, eus un tu, hag hini ar Stêr-Aon, en tu enep. Etre an diazadoù-se, kribenn un dosenn o sevel 207 metr a-us da live ar mor. Evit lakaat ar ganol da dremen e ranker toullañ, ha

toullañ don, ha digeriñ ur fozell hir ouzh tor ar menez. Pep tra a zo bet rakwelet, rakjedet ha raktreset gant ar ventoniourien hag an ijinerien : ar fozell-se en em astenno war 3,2 km. Ledander : ur c’hant metr bennak. Donder : 23 metr. War ar paper ez eo brav-tre, n’eus ket da nac’h. War an dachenn avat, se zo ur c’hoari all, ha gwall rust e voe an abadenn ! D’ar c’houlz-se n’eus ket a veikanikoù toullañ ha diatrediñ, ha ret e vo d’al labourerien kiañ outi, mont dezhi a-dro-jouez-kaer gant ar bigell hag ar bal, ha dougen a-grog-brec’h boutedagoù mein ha douar.

Ar pennadurezhioù publik e karg eus al labourioù ne gemeront ket nemeur a nec’hamant a-zivout an dud labour, rak gouzout a reont ez eus prizonidi o vichodiñ er galeoù e Brest hag e enez ar Gerveur. Lakaet e vo ar c’haleourien-se da labourat war ar chanter, ha mat pell zo, ha sed aze tud labour marc’had-mat-kenañ ! Ar re gentañ anezho a erru e Groñwel e miz Meurzh 1823. Piv eo ar c’haleourien-se ? Tremenet int, holl gwitibunañ, dirak al lez-vrezel, ha kondaonet int bet gant an arme d’ur c’hastiz labour-ret evit prantadoù hir pe hiroc’h : etre tri bloaz ha nav bloaz. Lod a zo dizertourien hag o deus tec’het a-zirak an enebour, lod all o deus nac’het mont d’an arme pa oa bet galvet o bloavezhiad dindan an armoù abalamour ma oant Bonapartourien douet, reoù all o deus en em reudet enep an urzhioù pe o deus c’hwezhet trubuilh p’edont en arme, ha kondaonet int bet en abeg d’o disujidigezh. Dont a reont eus an holl rannvroioù milourel hag eus seizh korn Bro-C’hall, hogen n’eus Breizhad ebet en o mesk, da virout moarvat n’en em glevfent gant tud ar vro evit tec’hout diouzh ar vac’h.

Bez' e vo galeourien e Groñwel betek fin al labourioù, e 1832. Kemmañ a raio o niver etre tri c'hant ha c'hwezh kant hag hanter-kant, ha war ar prantad a-bezh ez eo tost da bevar mil den hag a dremenno evel-se ur prantad hir pe hiroc'h e kamp Groñwel. Rak ur c'hamp a zo bet savet evito, keit-ha-keit diouzh pep penn ar ganol da zont. Mont a reer di dre un hent skosellek ha fankek, ha lojet e vez ar c'haleourien e kozh barakennoù fall ha diskloz a-walc'h, goloet gant soul. Er mizioù du, pa deu ar glaveier bras, e vez war bep tra ul liv a gañv hag a dristidigezh, hag e rank ar brizonidi kabouilhat pri ha fank. An aozioù buhez dre vras, hag an aozioù labour a zo start-meurbet, hag a-fed boued ha yec'hedouriezh, ned eo ket kalz gwelloc'h. Kalz galeourien a gavo o Ankoù evel-se e Groñwel, dre gleñvedoù a bep seurt.

Ma tichañs deoc'h tremen dre C'hroñwel, it d'ober un tamm tro betek an *tranchée* (evel-se eo e vez graet, du-hont, eus al lodenn-se eus ar ganol), ha, ma fell deoc'h gouzout hiroc'h diwar-benn kement emañ o paouez displegañ, bez' e c'hellit lenn levr Jean Kergrist, titlet *Les bagnards du canal de Nantes à Brest*.

Gwin

Emaomp e Porzhig, ur gaer a barrez vras en arvor bae Sant-Brieg, etre Plerin ha Binig, ha durc'haet he zornaodoù uhel d'an avel viz, a zo, evel a ouzoc'h, un avel griz. Nepell diouzh ar bourk e oa bet lakaet un dachenn dindan wini, pemp bloaz zo, gant izili ur gevredigezh hag a zo he fal anzavet brudañ gwinoù Breizh. Ur c'hant kefgwin bennak a zo bet plantet ganto, hag ar gevredigezh a zo e sell da vendemiñ ac'hann da vloaz : troc'het e vo ar c'hropadoù rezin, gwasket e vefont, hag ar chug a vo lakaet e go en ur varrikenn. Ur bloavezh c'hoazh hag e vo mat ar gwin roz eus Porzhig da evañ : neb a fell dezhañ evañ gwin diwar e winienn a rank kaout ampartiz hag habaskted !

Ar gwin eus Porzhig ne vo ket anezhañ ur seim bras, anat deoc'h, ha blaz ar bikenadenn a vo warnañ, 'm eus aon. Koulskoude, an ARVB (*Kevredigezh Brudañ Gwinoù Breizh*) a zo he brasañ dellid adskoulmañ evel-se gant un hengoun kozh-kozh : er prantad krennamzerel e veze gounezet gwini e Penn-ar-Bed hag en arvor Mor Breizh, betek e-harz mogerioù Sant-Maloù, war a lavar. En IX^{vet} kantved e kaved gwiniennoù e traoñienn ar stêr Renk hag e Dol, ha gouzout a reer, diwar an dielloù kozh,

e oa gwini en ^{XI}^{vet} kantved, tro-dro da Roazhon. N'eo ket tachadoù bras eo a veze lakaet dindan wini, evel-just, kentoc'h un nebeud keñveroù-douar amañ-ahont, peadra, peurvuiañ, da vastañ da ezhommoù an Iliz : ret e oa kaout gwin oferenniñ. Ha gwinoù fin ne oant ket kennebeut, ur “gwelion ruz” avat ne lavaran ket. Daoust da gement-se ez ae hon tadoù-kozh kreñv war ar gwin. Gouzout a reer da skouer e oa e Henbont, e 1632, 32 davarn, ha 27 anezho ne werzhent nemet gwin.

Er ^{XVI}^{vet} kantved, goude goañvezhioù rust-meurbet hag a reas gaou ouzh ar gwiniennoù, e voe kemeret pleg diwar an Normandi, ha plantet e voe forzh gwez-avaloù, e Breizh-Uhel da gentañ : Breizh a deuas evel-se, a van da van, da vezañ ur vro-sistr diwar-goust ar gwin. Diwar neuze ne voe mui kavet gwiniennoù nemet e su ar vro, eus Redon ha gourenez Rewiz betek bro an Naoned. Eno e voe plantet e 1635, evit ar wech kentañ, ar gouennad gwini a aozer ar muskadig diwarnañ. Ar gouennad gwini-se a reas berzh, ha berzh bras zoken, pa 'z eo deuet ar muskadig betek ennomp : ur milion hektolitr gwin a vez produet bep bloaz e departamant al Liger-Atlantel, muskadig an tri-c'hard anezho.

Betek ar bloavezhioù 1980 e teue ingal – ur wech ar miz – ur gwinlestr betek porzh al Lege, gantañ en e veolioù gwinoù eus seizh korn Kumuniezh Europa, a veze diskarget e kavioù-gwin ar porzh. Gortoz a raen gant mall distro ar gwinlestr-se – ar *Slougui* eo a veze graet anezhañ – rak stal-ispisiri va zad a bourveze an akipaj gant frouezh, legumaj ha boued-laezh fresk, ha, pa ne veze ket a skol ez aen gant va zad da gas ar varc'hadourezh da vourzh ar vag. Gall' a raen neuze ebatal kement ha ma

karen er bourzh, eus an aros d'ar staon, eus ar bontell betek sal ar c'hefluskerioù, e deun al lestr. Boutailhet e veze ar gwin e Sant-Brieg, gant an embregerezh *Gevel-Rio*, a zaspazhe anezhañ goude en ostalerioù e seizh korn ar vro, o redek an departamant eus ur penn d'egile gant kamionoù bihan ruz a oa aes-tre da anavezout abalamour ma oa livet warno ur manac'h bougennek ha drant, ur c'hropad rezin en un dorn hag ur voutailhad gwin ruz gantañ en dorn all. War unan anezho e oa bet skrivet, e latin, mar plij *Bonum vinum laetificat cor hominis* (ar gwin mat a laouena kalon an den).

N'eus mui abaoe pell zo a gavigoù-gwin el Lege : ar Vretoned, war a seblant, o deus dilezet ar gwin fall evit mont war voesonoù all. Hogen gant tommadur ar blanedenn e c'hellfe bezañ e welfemp adarre, ac'hann d'un toullad bloavezhioù, gwiniennoù en arvor Mor Breizh, evel gwechall-gozh. Gant ma ne vo ket gouezwin eo a vo produet e rin gant plijadur un tañva anezhañ !

Pontoù Louis Harel-de-la-Noë, e Aodoù-an-Hanternoz

Pa valeer dre an hentoù, e departamant Aodoù-an-Arvor, e weler amañ-ahont, e pleg ur wenodenn, ur pont e bileroù moan hag e stummoù mistr o fourchiñ, hardizh ha skañv, dreist ur saonennad brouskoad ha raden dizarempred. Ken dizarempred all eo ar pont : pell zo ne vez mui marc'h-du ebet o sachañ war e lerc'h dre ar roudennoù dir, en ur safar bouzarus, e aridennad bagonioù bihan ha stroñs-distroñs. Ar pontoù-se a zo un aspadenn eus ur rouedad hent-houarn hag a oa anvet *Tren bihan Aodoù-an-Hanternoz*, hag ar rouedad-se, bet digoret e deroù tre an XX^{vet} kantved, e voe serret al linenn diwezhañ anezhañ e 1957. Aes eo ar pontoù-se da anaout abalamour ma 'z int stummet holl diouzh an hevelep patrom. Un toullad mat anezho a gaver c'hoazh en traoñiennoù damdost da Sant-Brieg, hag er gêr-se end-eeun ez eus zoken boulouardoù hir e-skourr bet savet evit an hent-houarn a-us da waregoù-bolz, dezho an hevelep stumm hag an hevelep neuz hag ar pontoù : redek a reont war gribenn uhelañ traoñiennoù ar Goued hag ar Gouedig, ha, pa anavezer istor Sant-Brieg e komprener mat pegen pouezus e oa bet ar boulouardoù hag ar pontoù-se en argerzh diennañ ur gêr hag a oa bet,

kantvedoù-pad, enklozet etre toroù serzh pe sershoc'h teir zraoñienn don : hini Douvenant, hini ar Goued, hag hini ar Gouedig.

War zibenn an XIX^{vet} kantved eo e voe divizet lakaat sevel rouedad hent-houarn an *tren bihan*. An departamant, d'ar c'houlz-se, e oa diazezet e ekonomiezh war al labour-douar hag ar pesketaerezh, hogen krog mat e oa an touristañ da greskiñ, hag e Sant-Brieg e oa ar greanterezh war ziorren. Al linenn hent-houarn eus Brest da Bariz avat a dremene dre an Argoad, o lezel a-gostez takadoù bras hag a chome enklozet c'hoazh. Setu perak e voe kemeret an disentez da lakaat sevel ur rouedad hag a zarbarje kêrioù bihan ha bourkoù e oa diaes c'hoazh mont betek enno d'ar c'houlz-se. Labourioù bras a oa da vezañ kaset da benn avat, dreist-holl en abeg da dorosennadur digompez an departamant : troc'het e vez ar pladennoù gant traoñiennoù don ha ledan a-walc'h, gant aberioù ha stêrioù a ranked mont dreisto, ha gant takadoù ribin-diribin ha torosennek. Dre holl e ranker sevel pontoù, treuzelloù, savennoù. Un den dreist-holl a zo chomet roud e zorn war al labourioù-se : Louis Harel de la Noë an hini eo. Ganet e oa bet e Sant-Brieg e 1852 en un tiegezh a vourc'hizien desket-kaer, ha goude e studi er Skol Liesijinerezh hag e Skol ar Pontoù hag an Hentoù, (unan eus e geneiled a oa Fulgence Bienvenue) e oa bet o labourat e Rodez, e Kemper, er Mans hag e Brest. E 1901 e voe anvet da bennijinour an departamant, e Sant-Brieg, ha d'ar c'houlz-se eo e voe e karg eus al labourioù war-dro an tren bihan.

Harel de la Noë, mard eo chomet bev-mat ar c'houn

anezhañ e korn-bro Sant-Brieg, abalamour d'e spered nevezus an hini eo : an ijinourien, d'ar c'houlz-se, o deveze diegi oc'h implijout ar betoñs houarnet, abalamour ma kave dezho e oa an danvez peuznevez-se re buzuilh, hag aon o devoa na deuje ar pontoù savet gant betoñs houarnet da vruzuniñ buan. Harel avat a welas an diaes ma oa e labour evel un dae, ha ne c'hinas ket da ober gant an teknikoù nevez. E bontoù, graet gant betoñs, houarn ha brikennoù, a oa modern-tre d'ar c'houlz-se, hag anzav a ranker ez int, bremañ c'hoazh (d'an nebeutañ ar re a zo chomet en o sav), brav da welet, gant un n'ouzon dare petra a skañv hag a vistr en o stumm. Keuzius eo na vije ket bet miret al linennoù bihan-se hag e vije bet pilet ur c'halz eus ar pontoù bet savet gant Harel : bremañ e c'hellfer hep mar ebet tennañ splet eus ur rouedad hag a oa ennañ 452 km, ha kas war-raok doareoù treuzdougen dazeilat¹ !

1 Dazeilat: *alternatif*.

Meurzh-Mae 1972: Harz-labour ar Joint Français e Sant-Brieg

Anavezet mat eo al luc'hskeudenn. Gall' a reer skrivañ zoken, hep mont re bell ganti, ez eo unan eus ar re anavezetañ a-douesk an holl boltridi kelaouiñ bet tennet e Breizh en hanter-kant vloaz tremenet : gwelet e vez warni un den yaouank, distreset e zremm gant ar fulor hag an dic'hoanag, o pakañ peg e porpant ur CRS tokarnet na weler nemet ar c'hein anezhañ. Huchal a ra an den yaouank, ha ne ouezer ket petra a lavar. Ar pezh ne lavar ket al luc'hskeudenn ivez eo e oa bet an daou zen-se mignoned en o bugaleaj, hag int bremañ, pep hini anezho en ur c'hamp enep. Tennet e oa bet ar poltred-se da geñver ur vanifestadeg aozet e 1972 evit harpañ dilabouridi un embregerezh eus Sant-Brieg, ar *Joint Français* hec'h anv, o devoa diskroget da labourat evit goulenn ur c'hresk gopr. Kregiñ a reas an harz-labour e miz Meurzh 1972, hag anv an embregerezh en em skuilhas ken buan hag an tan e Breizh a-bezh, hag e kement korn a oa e Bro-C'hall zoken. Evit kompren perak en em strinkas an anv dre holl ar vro ha perak e voe skoet kement ar speredoù gant an harz-labour-se, a badas tri miz, etre miz Meurzh ha miz Mae 1972, hag a deuas da vezañ arouzek eus ar stourmoù sokial e Breizh, e ranker adlakaat an emsav sokial-se en e amzer.

Diazezet e oa bet an uzin-se e Sant-Brieg e 1962, a-drugarez da skoaziadennoù aveiñ dreistordinal a-berzh kêr, rannvro ha Stad. Ur skourr e oa eus un uzin vrasoc'h, hini Bezons, e rannvro Pariz, hag un isembregerezh eus ar CGE (*Kompagnunezh Vras an Tredan*). N'eo ket dre zegouezh eo e oa bet dibabet lec'hienn Sant-Brieg gant pennoù-bras ar CGE : ne veze anv d'ar c'houlz-se gant ar pennadurezhioù foran nemet eus an digreizennañ greantel, ha gouzout a rae ar CGE e c'hellje kontañ e Breizh war labourerien stank o tont a-ziwar ar maez, da lavaret eo tud boazet da labourat start, nebeut a sindikadidi en o zouesk, tud sentus, evit ul labour na c'houlenne perzhegezh micherel ebet. E berr gomzoù : tud e vije bet aes o c'horvoiñ, re eürus ma vijent bet o kaout labour, ha goude ma vije bet evit ur gopr dister. Ar gevranneien, gouzout a rit, a zo hir o ivinoù ! Ha gwir eo e veze paeet labourerien Sant-Brieg – ouzhpenn 1000 a oa anezho e 1972 – betek 30 dre-gant nebeutoc'h eget re Bariz : ur gwir saviad trevadennel !

Va amezeg Pêr a oa o ren e ugent vloaz e 1972. Dilezet gantañ atant bihan e gerent, e Kesoue, e oa aet, evel kalz tud all eus e oad, da labourat e kêr, ha kavet en doa krog, ken aes ha tra, er *Joint Français*. Setu pe soñj en deus dalc'het eus an darvoudoù :

« Bec'h a oa savet diwar gudenn ar goprou : goulenn a raemp ur c'hresk gopr a 70 sentim. Dre ma nac'he ar renerezh ar c'hresk gopr-se e voe votet ganeomp un harz-labour darnel. Padout a reas teir sizhun, met ar c'hendivizoù ne gasjont da netra. Neuze, d'an 10 a viz Meurzh ez eo un harz-labour hollek eo a voe votet, gant ac'huberezh al labouradeg. Harpet e vezemp neuze gant

ar pennoù mestroniezh. D'ar 17 avat e voemp dilojet gant ar CRS-ed, a chomas da ac'hubiñ an atalieroù, ha diwar neuze ez eas ar stourm war galetaat ha war hollekaat : kilañ ne felle ket deomp ober, ha bodadoù skoazellañ a voe savet e kement korn a oa e Breizh : harpet e vezemp gant an tu kleiz, ar Gomunisted hag an tu kleiz diseurt, gant sindikad al labourerien-douar, gant ti-kêr Sant-Brieg, a oa d'ar c'houlz-se Yves Le Foll e penn anezhañ, gant kuzulioù liseidi ha studierien, ha gant eskob Sant-Brieg ivez. E Lannuon, e Pempoull, e Loudieg e voe savet bodadoù skoazell ivez... E Breizh, ya, hag e lec'h all : anv a veze ingal en tele hag er radioù, e Bro-C'hall, eus harz-labour ar *Joint*. René Pleven a oa d'ar c'houlz-se maodiern, dindan Pompidou, ha war ar memes tro prezidant kuzul-meur an departamant, ha votet e voe gant dilennidi an departamant ur skoazell d'an dilabouridi. Arzourien eus ar vro – Gilles Servat da skouer – hag eus pelloc'h – Claude Nougaro – a gemeras perzh er stourm ivez, ha dalc'het em eus soñj eus ar manifestadegoù bras a voe e Sant-Brieg – 15 000 den d'an 18 a viz Ebrel – ma tibunjomp start-ha-start dre ar straedoù en ur ganañ : *ne blegfomp ket dirak gourdrouz ar fuzuilhoù !* Padout a reas ar stourm betek penn-kentañ miz Mae. Neuze e plegas gouarnamant Chaban-Delmas a-barzh ar fin, ha roet e voe deomp ur c'hresk gopr a 65 sentim. »

Harz-labour ar *Joint-Français* a zo chomet bev-mat ar soñj anezhañ amañ e Sant-Brieg, hag e lec'h all ivez, 'm eus aon. Bet eo arouez ar stourm evit ar justis sokial evel-just, hogen dougen a ra testeni ivez eus youl ur bobl o sevel, hini Breizh, a oa o stourm, war an hevelep tro, evit he dazont hag he dinded.

Hent-houarn ha furnez

Neb a fell dezhañ mont war-droad eus porzh al Lege betek kreiz-kêr Sant-Brieg dre draoñienn wezennek ar Gouedig, a rank tremen dindan pont an hent-houarn. Bep tro ma tremenan dindanañ, ne c'hellan ket parraat a soñjal e pont Montroulez. Damheñvel ez int, o-daou, nemet ez eo hiroc'h hag uheloc'h pont Montroulez eget hini Sant-Brieg. Savet int bet o-daou, a-hend-all, damdost d'an hevelep mare, ha diouzh an hevelep patrom : diazezoù ledan-meurbet, pilerioù postek-kenañ, bolzioù maen-benerezh gouest da herzel ouzh ar gwashañ kren-douar, leur-bont tev-tev. Savet int bet e-tro ar bloavezhioù 1860, hag an dro gentañ e istor ar vro e oa gwelet pontoù ken uhel ha ken hir o c'haoliata traoñiennoù ken ledan ha ken don, kontet, a-holl-viskoazh, da vezañ didreuzadus. An ijinour a c'hoursellas ouzh al labourioù war-dro an daou bont-se a oa Victor Fenoux e anv, ha gouzout a rae dibolotennañ labour, rak anavezet mat eo ivez, a-hend-all, abalamour m'en deus graet war-dro al labourioù a welas o sevel, a-zioc'h an tonnoù kounnaret, tourioù-tan *Ar Men*, *ar Wrac'h Vras*, hag *ar Vein Zu*, anezho taolioù kaer a-fet adeiladur, ma ranker anzav.

Diaes deomp-ni bremañ, tud ar c'hentañ kantved

warn-urgent, fastet ma 'z omp gant a bep seurt araokadennoù teknikel, empeniñ na pegen skoet e voe ar speredoù e Breizh hag e lec'h all, pa welas an dud vat an tren o kerzhout stroñs-distroñs war ar roudennoù dir, o treuziñ ar maezioù gwerc'h hag oc'h en em gavout, evit ar wech kentañ, er garioù, bras pe vihan, ouzh bouilh-moged ar marc'h du. N'eus mui bremañ nemet ul linenn o tremen dre Sant-Brieg. An hini a gas eus Brest da Bariz an hini eo. N'eo ket bet atav evel-se avat, rak linennoù bihanoc'h a oa bet, hag o deus padet betek deroù ar bloavezhioù 1950. Meret e oant gant ur gompagnunezh prevez, hag a oa anvet gant an dud *Tren bihan Aodoù an Hanternoz*, diwar anv bet an departamant a zo anvet bremañ *Aodoù an Arvor*. Unan eus al linennoù-se a gase da Bempoull, da-heul froudennoù an arvor, o treuziñ an traoñiennoù hag an aberioù war bontoù bet savet gant an ijinour Louis Harel de la Noë. Ul linenn vihan all a sanke en argoad hag a dape betek Koedlinez ur wech treuzet Ilfinieg ha Monkontour. Al linennoù bihan-se e oa kalz arsavlec'hioù warno, ha darbariñ a raent al lec'hioù distroañ, en ur mare ma oa c'hoazh poblet stank ar maezioù en departamant, ha ma ne oa nemet dibaot a otoioù e-touesk an dud.

Al linenn a anavezen ar gwellañ a oa an hini a gase eus Sant-Brieg da Loudieg. Meret e oa honnezh gant an SNCF, ha tremen a rae damdost da atant va zad-kozh, e parrez Ploheg. Un diduell e oa evidomp-ni, bugale, sevel gant ar c'hra serzh a gase da lez ar c'hoad, lec'h ma oa ti ar gward-kael, da vont da sellet ouzh an tren o tremen : gortoz a raemp ar pred ma tifoupje a-douesk ar gwez, ha, pa welemp ar stlejerez o tiskornadiñ gant ur sutadenn

skiltrus, e stlakemp hon daouarn hag e saludemp ar veajourien dispouron o devoa bet an hardizhegezh da bignat e-barzh an tren evit ur veaj ken hir : treuziñ an departamant ha mont, koulz lavaret, betek harzoù ar bed anavezet ! En diskaramzer hag er goañv, pa veze dibres va zad-kozh, e vourre o tremen ur pennadig amzer e ti Charlez, ar gward-kael, ha pa ne veze ket a skol ez aen gantañ. O gwelout a ran c'hoazh, an daou zen mat, en o c'hoazez dirak ur c'horadenn vat a dan, e korn an oaled, o tivizout sioul, bep a gorn-butun ganto.

Un devezh ma tistroemp d'an atant, goude bet o welet Charlez, Tad-kozh a lavaras din :

— Gout a rez, Herve, ar Charlez-se a zo ur gwir fur a-ziwar ar maez.

— Petra eo ur fur, Tad-kozh ?

Tad-kozh a chomas a-sav, a skrabas e benn, hag a lavaras :

— Ur fur, Veig, a zo un den hag a gemer an traoù e-giz ma teuont, hag ar bed war an tu ma tro.

— Hag an tren, Tad-kozh, bet out ennañ, ur wech bennak ?

— Ya 'vat ! Pell zo avat... Pignet on en tren e Sant-Brieg e miz Gwengolo 1939, ha deuet on en-dro pemp bloaz goude, e 1945, goude bezañ bet prizoniad en ur c'hamp, er *Prussoriental*.

Ne ouien dare pelec'h e oa ar *Prussoriental*-se, met gwall bell e tlee bezañ, diouzh ma lavaras Tad-kozh :

— Soñj 'ta : 1500 kilometr a-dreuz an Alamagn, e bagonioù hep kouch na brich... Dizonet on bet diouzh ar beajoù dre dren, Veig, sur eo ha n'eo ket marteze. Padal, an tren, bremañ, a zo talvoudek din.

— Perak, Tad-kozh ?

— Selaou : pa vezan e foenneg an traoñ, an hini a zo war hent Kreac’h-Meur, ha pa vez an avel er mervent... Ma klevan sutelladenn an tren, ha mar bez koumoul a-us d’ar c’hoad, se zo diougan glav, Veig, dalc’h soñj...

Bremañ ma skrivan kement-mañ, e kav din e oa Tad-kozh ur fur ivez, evel Charlez, e vignon, ar gward-kael, ha ne ’m eus ket adkavet alies, er c’hêrioù, o doare bevañ ha soñjal sioul hag aketus war un dro...

Montparnasse blues

Goude strinket un dufadenn war ar riblenn lous dirazañ e amboul ur sigaretenn gant an evezh bras a zo dleet d'un ober ken pouezus. An troellennoù moged a sav lochore, en em goll en oabl teñval kent en em zispenn e safar ar c'hirri diniver war ar vali vras. Toumpi an otoioù flaeius a vouzar an divskouarn hag a vorz ar spered. Goude dastumet pizh ar bechad sigaretenn en ur voestig houarn en em damolod e-barzh e sac'h-kousket, reut gant ar gramenn, evel ur maligorn e gwarez e grogenn. Chom a raio evel-se, astennet penn-da-benn gant e gorf war ar gael-arañ, betek tarzh an deiz : n'eo nemet c'hwec'h eur, hag er mare-mañ eus ar bloaz e vez c'hoazh div eurvezh da dremen e kelc'h sklêrijenn ar c'hleuzeur-straed, uhel a-us d'e benn.

Tro-dro dezhañ e red ar vuhez, ha n'en deus mui perzh enni a-werso. Tud a zeu, tud a ya, tropellad diseblant ar re a zo c'hoazh e-barzh ar jeu, ar re a ra c'hoazh an asvan da grediñ e talv ar boan reiñ bec'h hag en em zifreñ. Den ebet ne soñj mui ennañ evit ur blanedenn all. Ne ra van, an dud ne ra mui forzh ebet ganto. Emañ evel ur merdead e-unan war e gael difiñv ma sav diouti flaer tomm ar metro. Ar paotr-kafe a zo o paouez enaouiñ ar

goulou, en tu all d'ar straed. A-us d'ar rakstal e wilc'hata bremañ lizherennoù ruz ar barr-ti : *À la ville de Morlaix*. N'eus ket keit-se c'hoazh e c'helle, bep mintin, mont di da evañ ur banne kafe tomm. P'en deveze gwenneien, evel-just. Bremañ avat, abaoe m'eo deuet ar patrom nevez, e vez berzet outañ mont-tre. Kuit da rukuniñ ar pratik, moarvat. Pegeit zo ne vez mui degemeret en ostaleri ? Ne oar mui. Mont a ra diwarnañ ar sizhunioù hag ar mizioù, ha dre ma ya an amzer e esper nebeutoc'h-nebeutañ digant ar vuhez.

Mouskanañ a ra. Drailhennoù peuzankounac'haet ur ganaouenn gozh hag a sav don eus e amzer bugel. Dizesket en deus al lavar abaoe ar c'heit. A-wechoù, pa dro en e benn, e sav, trumm ha feuls, hag e taol kunujennoù spontus en ur jestraouiñ. Vad a ra dezhañ, neuze, gwelet an dud o pellaat, souchet hag aonik. Pegeit zo n'eus bet den o tostaat dezhañ ? Lezet en deus e vlev hag e varv da greskiñ. Ar pep diaesañ a zo tec'hout rak e adsked en ur melezour pe e gwerenn ur stal bennak. Mard en deus bet un dremm, gwechall, ne welo mui anezhañ, biken.

N'eus ket keit-se c'hoazh e oa bet ur vaouez eus e vuhez kent o tremen dirazañ. Paket berr e oa bet ouzh he gwelet, hag e galon a oa chomet a-sav en e greiz, trumm. Goulennet en doa arc'hant diganti, ha gwelet en doa anezhi o c'hwiliañ he sac'h, oc'h astenn he dorn, hag o teurel ur pezhig er gluzenn dirazañ. He daoulagad o devoa rinklet warnañ, prim-ha-prim. Un taol-lagad war-dec'h. N'he doa ket anavezet, er paourkaezh treul kreouichennek ha lous-pest, gronnet en e zilhadañ fank ha marvasennet dirazi war ar riblenn-straed, he mignon

a-wezharall. Heuliet en doa anezhi dre e selloù, pa oa hi o vont etrezek ar metro, kant metr alese. Neuze en doa tapet krog en e voutailh ha skarzhet a glukadennoù kivioul kement a chome enni.

Bremañ e oar : n'en deus mui kentel ebet da gaout digant den...

Hir e vo ar goañv

Ur beurevezh a viz Du, e-tro eizh eur. Ul litenn begus a ziskenn sioulrik war ar porzh. Talbennoù damlouet ar renkennad tiez lizennet dindan ar glav tanav. Al latar a zo savet tri devezh a zo gant al lanv ne ra ket van d'en em zispenn. Ar c'hontrol 'ni eo : war devaat ez a. War elum emañ c'hoazh ar c'hleuzeurioù-straed en-dro d'al lenn-borzh, hag ar c'helc'hioù sklêrijenn a weler o dameuc'h morlivet er poullou-dour teñval, penn-da-benn gant ar c'hae gludek. Hiraezh am eus da fourradoù avel miz Genver, un avel dreut ha binimus, a dra sur, hogen plijusoc'h din-me eget al leizhder milliget-mañ, a dreant ar c'hroc'hen hag a sklas an izili !

Paket-mat em mantell e kerzhan. Evit mont da ostaleri *an Oriaved* e rankan hedañ ar c'hae. Dec'h da noz, diwezhat – e-tro unnek eur e tlee bezañ – ez eus en em gavet ul lestr-karg norvegiat, *Katarin* e anv. Dre ar prenestr em boa gwelet anezhañ o skluzañ hag o riklañ, pounner ha gorrek, war an dour du. E blas da gaeañ a oa bet miret, evel kustum, gant servijoù ar porzh, rak bep miz e teu betek al Lege, leun-barr gant e gargad prenn. Emañ bremañ paotred ar porzh, kefridi warno, o tiskargañ anezhañ. Daou bezh luc'hvanner a daol o gouloù trellus

war ar pont, hag ar givri-houarn a dro goustad en oabl morfont. Ret eo lakaat bec'h, hag ar vartoloded n'o devo ket amzer da lezirañ : warc'hoazh beure e ranko ar vag mont er-maez. N'o devo gwelet netra, nemet ur porzh evel ar re all, hag anv Sant-Brieg ne enaouo en o spered nemet brizhsoñj kaeoù didud o lufrañ gant an ailhenn. Bale a ran buanoc'h evit tec'hel rak c'hwezh empennus ar bernioù prenn renket war ar c'hae, ur c'hwezh displijus abalamour, moarvat, d'an aozadoù kimiek m'eo intret ar c'hoad ganto.

En tu all d'an dour, lec'h m'emañ bagoù bihan ar besketaerien, ar porzh a zo sebeliet er sioulañs. Ur c'houblad morvrini, en o sav war aspled ar c'hae, mut, difiñv, ha dispak o divaskell, a glask, gwellikañ ma c'hallont, sec'hañ o fluñv du, ha n'eo ket hiziv eo e vo gwelet ar skreved o troidellañ uhel a-us d'an dour : re gogusek ha re drist an amzer evito ivez, moarvat. Gwech ha gwech all koulskoude e klever unan anezho o sevel he mouezh, klemmus evel leñvadennoù bugel. Ne chom mui eno nemet pemp pe c'hwec'h chaluter bihan, izel o aros ha pennek o frigalion. Etre div droiad pesketa e vez ar vartoloded war-dro o bagoù. A-hend-all ne weler mui nemet ral a wech diskeud un den o tremen dillo dre eno.

Dre ma 'z an pelloc'h ha dre ma tostaan d'ar pont-tro e franka warnon un tamm bihan. Ne glever mui amañ na flaer ar gazeoul na c'hwezh heugus ar pesked marv : ar bigi-bale n'eus c'hwezh ebet ganto. Renket int penn-da-benn gant ar c'hae, moñsell-ouzh-moñsell. Pell o deus c'hoazh da c'hortoz, betek devezhioù kaer an nevezamzer, kent kuitaat ar porzh. Gleb ha ramp eo mein ar c'hae,

ha, pa dremen un oto em c'hichen, e rankan pellaat un tammig bihan, kuit da vezañ breliñset a zour lous ha yen. War an dorn dehoù, goude ostaleri vrudet *Ar Marmous*, ar ru a ya goustad war ledanaat hag a dro da blasenn. N'eus nemet daou brenestr sklêrijennet, ha, pell c'hoazh dirazon, barr-ti ostaleri *an Oriaved* o wilc'hata hag o stourm kalonek ouzh an amzer lug.

Ur wech bountet an nor e choman ur pennadig amzer trellet gant ar gouloù ha kennerzhnet gant klouarded an aer. N'eus en ostaleri d'an eur-mañ nemet daou zen ouzh ar c'hontouer ha, en e gorn boas, Jakez, lesanvet *Ar Mud*, abalamour ma ne zistag ket muioc'h eget peder gomz setañsus er sizhun. Hiziv avat – dre be vurzhud ? – eo tuet mat hag e lavar din : « Hir e vo ar goañv, Herve ». Teurel a ran ur sell war an amc'houloù en tu all d'ar prenestr stlabezet gant ar glav, ha, souezhet un tamm bihan o klevet ar *Mud* o tistagañ ur frazenn ken hir, e respontan dezhañ : « Ar gwir a zo ganit, Jakez, hir e vo ar goañv »...

Hor barzh paour

Bez' e c'heller gwelet, er *Staatlichen Museum*, e Berlin, ur gaer a daolenn bet livet gant un arzour hag a oa Carl Spitzweg e anv. Bevañ a reas al livour-se en XIX^{vet} kantved e Bayern, ha, mard eo brudet, abalamour d'ar fent ha d'an deneridigezh a sav eus e daolennoù an hini eo. Deuet eo a-benn, e gwirionez, da unvaniñ en e oberennoù realouriezh ha barzhoniezh. N'eo ket souezh pa ouezer e oa Spitzweg, war ar memes tro, flemmskeudenner ha barzh : savet en deus barzhonegoù e rannyezh Schwaben. Met distroomp d'an daolenn vrudet a c'heller gwelet e Berlin : *der arme Dichter* eo anv an daolenn-se, da lavaret eo *ar barzh paour*. Gwelet a reer warni diabarzh ur c'halatrez, pe ur c'hozh vañsardenn baour. Ar c'hrignol-se, liv an dienez warni, n'eus ket kalz a dra enni : ur fornigell yen en ur c'horn, stlabezadennoù levrioù ha dornskridoù a-bempoù dre holl war al leur, ha, pelloc'h, un den gourvezet war ur vatarasenn, dilhad tomm en-dro dezhañ, ur boned gloan tev war e benn, tamolodet dindan ur c'holc'hed peñseliet. A-us d'e benn ur pezh disglavier du dispak, da virout ouzh ar glav da gouezhañ warnañ dre faoutoù un doenn dirapar. Emañ an den o skrivañ, pe, pa lavarín mat o klask skrivañ : derc'hel a ra e bluenn en e c'henoù. En e zorn kleiz, ur fichellad

paperachoù harpet war e zaoulin, endra ma weler mat emañ, gant an dorn dehoù, savet gantañ er vann, o kontañ treid e werzennoù da zont. Santet mat e vez e rank an arzour paour-se bevañ en dienez ha gouzañv dioueroù a bep seurt. Padal ne ziskouez e zremm na c'hwervoni, na tristidigezh, na chal na tregas. Ar c'hontrol kaer an hini eo : lintrañ a ra e zremm gant al levez, ha Spitzweg a zo deuet, e gwirionez, un taol-kaer gantañ da vat : diskouez deomp pimpatrom an arzour o labourat hag o krouiñ gant kement a entan hag a virvidigezh ma ne wel mui na boutinded na viloni ar bed en-dro dezhañ.

Bez' hon eus, amañ, e Sant-Brieg, ni ivez, hor barzh paour. Dre an doujañs dleet da gement boud bev a zo, da holl izili kenvreuriezh enorapl-meurbet ar varzhed paour, ha, dreist-holl, da bratikoù va ostaleri vuiañ-karet, e tavin amañ war e anv, hogen ma tichañs deoc'h tremen dre amañ ha mont da evañ ur banne e ostaleri *an Ti-Post*, damdost d'an iliz-veur, e-tro dek eur diouzh ar mintin, e welfet anezhañ, sur-mat, rak hor barzh paour a vez dik d'e emgav pemdeziek gant e dasad kafe bras, e gazetennoù, hag e frapad kaoz ken pemdeziek all gant ar vignoned. Ur barv hir ha luziet, ur c'hozh kabig joget en-dro d'e gorf, peg outañ kreunennoù bara ha breunennoù butun, ur bipenn varv en e veg, ur skerb hir ha teuc'h tortigellet en-dro d'e c'houzoug ken hir all, ur gravatenn disliv, ur bragoù mezher glas kalz re verr, dalc'het e-giz ma teu e teu en-dro d'e zargreiz gant ur c'hozh fiseleenn, sed hon den. Meur a wech em eus klevet an eil pe egile o lavaret dezhañ : « Gwelet ec'h eus penaos out ginet hiziv ! ». « Petra 'vern din, » a respont hor barzh bep tro... Bez' e vez dalbezh gantañ ur sac'h-skol kofellek, leun-

kouch gant kazetennoù kozh, levrioù-godell digorniet, kaieroù ha karnedigoù, hag a bep seurt bitrakoù ha sikludoù didalvez. Chom a raio en *Ti-Post* betek fin ar beurevezh. Ne zebro ket da greisteiz, rak berrek e vez an traoù gantañ ordin, ha tremen a ra alies hep tamm. Gwech ha gwech all, koulskoude, e vo pedet da zebrin gant unan bennak eus e anaoudeien. Neuze ez aio ar gaoz war e “oberenn”, ha ne vo prenn ebet d’e latenn. Komz a raio deoc’h, entanet-holl, eus al labour ramzel a zo gantañ war ar stern abaoe bloavezhioù : « Ur ganennneur, Herve, soñj ’ta ! Gant al labour-se emañ o vont da adneveaat hengoun ar varzhoniezh filozofel – aet da get abaoe Alfred de Vigny ! Unvaniñ en-dro ar furm klasel – gwerzennoù daouzektroadek – hag an danvez – filozofiezh hon amzer-ni, evel m’en doa graet Lucrèce en e *De Natura Rerum* evit reizhiad filozofel Epikur, sed pehini eo pal va labour !!! »

Din da c’houzout, n’en deus biskoazh diskouezet da zen gwerzenn ebet bet savet gantañ, ha, pa zichañs din e welet el levraoueg-kêr, n’eo ket skrivañ ha labourat eo a ra, leuniañ kaeloù gerioù-kroaz avat ne lavaran ket, rak gwrac’h eo gant ar c’hoari-se. Me, evel-just, ne gredfen ket sevel an disterañ mar war e labour : piv on-me evit barn ur barzh, dreist-holl mard eo paour ? Padal, abaoe ar c’heit ma welan anezhañ o vevañ amañ hag o kas e vuhezig arouarek en hon touesk, e Sant-Brieg, en em sil un diskred bennak em spered, hag en em c’houlenn a ran aliesoc’h-aliesañ, koulskoude, ha skrivet en deus, ur wech en e vuhez, ul linenn bennak... Hor barzh paour ne vefe ket an hini kentañ oc’h en em blijout o c’hoari roll an arzour milliget... nag an hini diwezhañ kennebeut, ’m eus aon !

Hud ar goadeg

Kredet o deus an istorourion e-pad pell e oa bet peurc'holoet hor bro, adal an amzerioù koshañ – an Henamzer – betek ar Grennamzer, hep distag ebet, gant ur goadeg vras ha diergerzhadus. Gouzout a reer bremañ avat, hep ket a var, n'eus ket bet eus ar goadeg-se pe, pa lavarín mat, e oa bet difraostet tammoù bras anezhi ken abred hag oadvezh an houarn : hon hendadoù n'o deus ket gortozet ar Grennamzer evit en em lakaat, a-zevri-bev, hag a-daoladoù, da zigrakañ ar c'hoadoù. Betek n'eus ket keit se c'hoazh e oa an noblañsoù eo a biaoùe an tachadoù koadek. Ur skouer nemetken : ar goadeg vras en em astenn etre Sant-Kareg hag Uzel, e departamant Aodoù-an-Arvor, a voe prenet e-tro ar bloavezhioù 1660 gant an dug de Lorges, un uheliad pinvidik-mor, evel ma vez displeget du war wenn e-barzh *Eñvorennoù* Saint-Simon, ha, da-heul ar brenadenn-se e kollas ar goadeg hec'h anv : anvet e oa bet, a-holl viskoazh, *Koedrac'h*, ha dont a reas da vezañ, dindan berr amzer, *koad Lorges*. Seul brimoc'h e c'hoarvezas ar cheñchament-se m'emaomp aze e Breizh-Uhel, ha ma oa aesoc'h d'an dud distagañ an anv nevez-se, muioc'h doareet diouzh genoù ar c'hallougerien.

En amzer benniget va bugaleaj ne oamp ket chalet

gant pe anv reiñ d'ar goadeg, hag an anv “nevez” a oa gwriziennet ken don e spered hag e memor an dud ma vije bet souezhet bras ar re goshañ anezho o klevet ur furcher levraouegoù o lavaret dezho kement emañ o paouez displegañ deoc'h. Koad Lorges a oa koad Lorges, a-holl-viskoazh – ha da viken – na petra 'ta, ha mat pell zo ! Ni bugale ne raemp forzh gant soutilderioù an istor. Ar goadeg a oa hon tachenn c'hoari hag hon domani hud etre fin miz Eost ha kreiz miz Gwengolo. E-pad an hañv hon doa ranket labourat war-dro an atant : bez' oa bet, da gentañ, ar foenn, ha, da-heul, an eost hag an dornadeg. War-lerc'h an eost e oa bet tro al labour er parkadoù avaloù-douar. Ur wech yoc'het mat an avaloù-douar en ur c'harrdi bennak, pa ne chome mui war douar skuizh ar parkeier nemet ar strev devet, e kave da Dad-kozh hon doa poaniet a-walc'h hag e oa dleet mat dimp ebat ha kemer plijadur betek an distro-skol, a c'hoarveze d'ar c'houlz-se d'ar 15 a viz Gwengolo. Er goadeg e tremenemp neuze hon amzer.

Mont a raemp d'ar c'hoad dre un hent don, peur'holoet e gleuzioù gant torkadoù gwez-kelvez ha bodennoù mouar-drez, a greske sof-kont ha didrabas, ha pa zegouezhemp gant lez ar c'hoad hor boa dija graet ur c'hofad frouezh chugonus ha du, hag e oa koeñvet hon chakodoù gant kraoñ-kelvez bihan ha gell. Ur wech treuzet ganeomp ur gourizad gwez-sapr, du, toupek hag enkrezus, ec'h erruemp gant harzoù hor rouantelezh. Ne oa mui dirazomp neuze nemet ur faouenneg bras-divent, poblet gant enebourien faltazius ha meuriadoù gouez a rankemp stourm didruez outo a daolioù penn-bazh ha batalmoù ! En em stagañ a raemp, a-zevri-bev, ha n'eo

ket ober van eo a raemp ! Ar gwez-faou uhel a blañsone o brankoù a-us d'hor penn, o stigmañ etre hor selloù hag an oabl ur volz skedus e-lec'h ma richane al laboused. Al lus, ar brug hag ar man a c'holoe an douar gant o mantell morlivet, ha ma ne oa ket krog ar c'hoad, evit c'hoazh, da wiskañ sae an diskaramzer, santet e veze memestra n'edomp mui e-kreiz an hañv.

Ne zistroemp d'an atant nemet e dibenn an deiz, evit en em akuitañ eus ar c'hefridi nemetañ a boueze c'hoazh war hor chouk : mont davit ar saout er prad ha kas anezho d'ar c'hraou, a-zoug o c'hamm, evit goroadenn an abardaez. Ha diwezhañ tra a welemp, dre hor soñj, kent menel kousket, a oa ar gwez faou, sonn hag uhel, gant o bolzad delioù melen m'en em sile a-dreuz dezho bannoù an heol... Ur gaer a bromesa a-benn an deiz war-lerc'h !

Ikar ar Faoued

Kentañ den a nijas biskoazh a oa Ikar e anv. Skrivet eo, du war wenn, el levrioù. Savet en doa divaskell diwar-bouez pluñv ha koar. Siwazh dezhañ, sevel a reas re uhel : terennoù grizias heol Bro-C'hres a lakaas ar c'hoar da deuziñ, hag ar paourkaezh Ikar a gouezhas er mor hag a veuzas, damdost d'un enezennig hag a zo bet anvet dioutañ abaoe. Krisat ur blanedenn ! Bet hon eus bet, amañ, e Bro-Oueloù, un den hag a zegouezhas koulz all gantañ ivez, war-bouez nebeut. An nijer disaouzan-se, brudet-mat c'hoazh e Bro-Saoz, a zo bet ankounac'haet e anv amañ avat, ar pezh a zo direizh, ken-ha-ken, hag evit digoll an dismegañs graet d'an nijer-se gant an Istor emañ o vont, el linennoù da-heul, da adsevel buhez Fañch ar Men, genidik eus ar Faoued, ur barrez a Vro-Oueloù, a-gichen Pontrev, kentañ den eus e vro a nijas biskoazh !

D'al Lun 14 a viz Mae 1923 e tibradas un daougeflusker eus ar gompagnunezh yaouank *Air Union*, bet diazezet un toullad mizioù kent hepken, eus nijva ar Bourget, damdost da Bariz, evit mont da Londrez. Edod c'hoazh, er mareoù-se, e deroù tre an nijerezh aerbostel, ha mont evel-se dre nij eus Pariz da Londrez ne oa ket

dizañjer, na pell ac’hano. E-tro dek eur diouzh ar mintin e welas annezidi Monsures (departamant ar Somme) an tan o kregiñ trumm er c’harr-nij bihan, pa oa hennezh uhel en oabl boull. An daougeflusker e tavas e fraoñv, kouezhañ a reas en ur dreiñ warnañ e-unan, hag o lezel war e lerc’h ur stlejad moged, kent flastrañ gant ur safar bouzarus en un dachenn, nepell diouzh ar bourk, dirak daoulagad sebezet ha spontet ar gouerien. Kement den a oa bet er c’harr-nij a voe lazhet-mik. Evel-se eo e varvas Fañch ar Men, paotr ar Faoued, ha nijer dre e vicher.

An hini kentañ e oa bet en Istor o kas treizhidi, dre nij, eus Pariz da Londrez, e-bourzh ur *Breguet XIV*. An taol-kaer-mañ a c’hoarvezas d’an 19 a viz Gwengolo 1919, ha pa lavaran “taol-kaer” n’ez an ket re bell ganti, rak doare an hin ne oa ket a-du : da gentañ e oa bet barradoù avel kreñv a-walc’h, hag ur wech paouezet an avel, e oa kouezhet un nivlenn dev war ar mor – “soubenn gaoc’h” eo a ra an nijerien eus an doare amzer-se. Ar veaj he devoa padet 2e57’, e-bourzh ur c’harr-nij a c’halle, pa sanke ur pennad tizh, lonkañ 150km en un eurvezh d’ar muiañ – ha c’hoazh, gant ma veze a-du an aerfroudoù ! Hejet ha dihejet e oa bet an dreizhidi, war enk er garlink bihan brall-divrall, bouzalet ivez gant safar ar c’heflusker ha fraoñv ar biñsoù-tro, ha c’hoazh ne gomzan amañ nag eus c’hwezh heugus an eoul nag eus afenn² flaerius an trelosk !

Diouzhtu goude ar Brezel Bras e oa bet roet lañs d’an nijerezh-kenwerzh gant tud leun a intrudu gounezet d’an

2 Afenn : odeur, émanation mauvaise, forte et écœurante.

doare treuzdougen nevez-se : difraosterien dispont evel Louis Renault pe Louis-Charles Bréguet a grede mort e ranked kousto pe gousto diorren an dezougen dre nij. Klask a rejont digeriñ linennoù etre ar c'hêrioù bras. Ha d'ar c'houlz-se ne rae ket diouer an nijerien, rak paot mat anezho a oa bet stummet da servijiñ en nijerezh brezel – ne oa ket anv, evit c'hoazh, eus “aerlu”. Fañch ar Men a oa bet unan eus an nijerien-se, hag ur pout hep e bar an tamm anezhañ, mailh war an argadennoù a bik. Teurel a reas brud war e anv en emgannoù dre-nij daou-ha-daou : bleniet en doa, etre 1916 ha 1918, a bep seurt nijerezed brezel, ha bet zoken ouzh stur un dournijerez a gasas d'ar strad listri-spluj alaman e-tal Dunkerque.

An nijerien, d'ar c'houlz-se, ne raent ket kozh kroc'hen avat. Ha buhez verr an den-se am laka da soñjal e vije bet disheñvel e blanedenn panevet ma tarzhas, d'un devezh kaer a viz Eost 1914, ur brezel euzhus : bevet en dije, e peoc'h, e parrez ar Faoued, evel e vamm hag e dad en e raok, hag ar chañs en dije bet, marteze, da vont da gozh en ur sellet, hunvreüs, ouzh ar skreved o tarnijal a-us d'e barkeier, hep soñjal, gwech ebet, e follentez ar brezel, hag hep c'hoantaat nijal !

Inizi Sant-Ke e miz Kerzu

Pa seller ouzh ur gartenn-vor eus bae Sant-Brieg, digor-bras da seizh avel Mor Breizh, e weler, er gwalarn, etre ar c'hrouizadur don m'eo tamolodet strizh ennañ porzh Binig, er su, ha tornaodoù uhel Plouha, en norzh, ur chapeledad enezennouigoù a-strew nepell diouzh an aod. Krediñ a-walc'h a rafer zoken, ouzh o gwelet evel-se, du war wenn war ar paper, gant an tost m'emaint diouzh an douar-bras, emaint o paouez en em zistagañ dioutañ, dre un taol imor bennak, marteze a-walc'h. An inizi-se a vez graet anezho Inizi Sant-Ke, abalamour m'en em gavont e-tal porzh Sant-Ke just a-walc'h. Anvet int bet evel-se e koun ar sant avieler a zouaras warno, e-tro ar VI^{vet} kantved. Neb a fell dezhañ mont d'an inizi-se a c'hell mat-tre, ha ken aes ha tra, tizhout anezho a-sec'h d'an izelvor, dre an draezhenn. An deiz-se avat, un devezh a viz Kerzu, hor boa graet hor soñj, Pêr ha me, mont di dre vor. E-tro dek eur diouzh ar mintin, e oamp tremenet hebiou da dour-tan al Lege, e bourzh bag vihan va mignon, dezhi un anv hag a gavan plijus-meurbet, abalamour d'un n'ouzon dare petra a skañv, lamm-dilamm ha moan : *Heizez an arvor*.

« Ne gresk war an inizi-se, dezho un douar distruj, nemet geotlennoù hesk, » en doa lavaret Pêr din a-raok

hon zroiad war an inizi. Hag e gwirionez ne welen tro-dro din, dre ma 'z aemp war ar wenodenn gammigellek, e-kreiz enez Harbour, nemet bodennoù geot treut ha lann gwallgaset gant an avelioù, hag, amañ-ahont, brugennoù o kreskiñ a-dorkadoù e frailhoù ar reier.

Ar mor, evit mont di, a oa bet treboulet : ma risklas *an Heizez* war ur mor plaen betek beg ar Rozeler, neuze avat, ur wech tremenet a-vaez d'ar beg-se, e stardas an traoù, hag hejet-dihejet e voe ar vagig gant ar c'hoummoù-mor keit ha ma padas ar verdeadenn. Goloet e oa an amzer a-bell-dro, teñval an oabl, ennañ koumoul izel bountet gant ar gwashañ avel a ve tu da gaout e bae Sant-Brieg : an avel viz. C'hwezhañ a rae yud, a-fourradoù karget a c'hlav, ha, war ar vag o vranselet, e taole, bep tro ma tiskennemp e pleg ur wagenn, ur berniad spoum gwenn ha yen-sklas. Mouezh Pêr a glevis a-greiz-holl, mouget gant yudadennoù an avel, toc'helladennoù ar c'heflusker, ha galvadennoù skiltrus ar skreved o troidellat en-dro d'ar vag : « Sell, Herve ! Dirazomp : an inizi ! ».

An inizi : ur c'hleger uhel, un diniver a reier, a gerreg noazh bern-war-vern ha kenempret, goloet ar re izelañ anezho gant stlejadoù filid, melez ha felu-mor taol-distaol gant an tarzhoù. A-us d'ar reier goumonek-se, ur wenodenn strizh, bet toullet er vri a-zioc'h an dour, a gase da grec'h an enezenn Harbour, an hini vrasañ, a gaven, bremañ m'edon o vale warni, gwall durumellek ha digevannezus. Ouzhpenn-se, an avel diroll a fuste ken-ha-ken. « Garv an hin amañ, eme Bêr. Hogen talvezout a ra ar boan. Dalc'h soñj, Herve, em eus kaset ac'hanout betek amañ evit diskouez dit *Kador ar Sant*, e krec'h. N'emaomp ket pell ken. »

Gwir en doa lavaret Pêr : talvezout a rae ar boan bezañ deuet betek eno. *Kador ar Sant* n'eo, evit komz heñvel ouzh ar wirionez, nemet ur garreg kleuz, ur meni kev bihan pintet uhel war laez an enezenn vrasañ, ichoù a-walc'h ennañ evit daou zen, gwarezet diouzh ar gwallamzer gant ur roc'h war valir, ha durc'haet da gavout ar mervent. Pebezh arvest avat dirak va daoulagad sebezet ! Bete keit ha ma dape ar selloù, ne welen nemet un aridennad tornaodoù uhel-uhel, eus Beg Minard, e Plouha, er gwalarn, tre betek Beg ar Rozeler, morailh ar bae, er gevred. Aodoù va Bro-Oueloù en o c'haerañ, digemm abaoe nouspet kant mil vloaz, evel deuet trumm war-wel eus ar pelldon ag ar mareoù geologel koshañ ! Sevel a reont uhel-kenañ, an tornaodoù-se, a-us d'ur sichennad reier debret gant an amzer, krignet gant an dour ha rognnet gant an hollen. A-zioc'h ar sichenn serzh ha roc'hellek-se, n'eus na bod na skod warni, ez eo goloet an dinaou gant ur struj stank, ichoù a-walc'h ennañ evit gwenodenn ar valtouterien hepken, en em sil, gwellikañ ma c'hall, dre-douesk ar brouskoad, oc'h heuliañ al linenn gribenn. An tornaodoù-se, ma n'int ket ar re serzhañ a gaver e Breizh, a zo ar re uhelañ, ha neb a sell outo evel ma raen an deiz-se, hennezh en em sil en e spered hag en e galon estlamm rak kened sebezus ar biojoù hag efreizh rak nerzh an elfennoù.

« C'hoant am eus da ziskouez dit al lec'h m'en em gavan an eürusañ, » en devoa lavaret Pêr din. Hag e gwirionez, bremañ p'en em zispake dirak va daoulagad an arvest meurdezus-se, e intenten gwelloc'h va mignon...

Jules Grand-Jouan an Naonedad

Bez' ez eus kêrioù, e Breizh, hag a zo bet kemmet bras o neuz er c'hantved tremenet, en abeg d'ar brezel bed diwezhañ peurgetket : Brest, an Oriant, Sant-Maloù ha Sant-Nazer, da skouer, a voe distrujet a-benn-font da-geñver an emgannoù taer etre ar Re Gevredet hag an Alamaned. Ar re-se, goubet d'en em zifenn d'ar mud, a oa en em gaeet a-dreñv o difennoù er porzhioù-mor bras-se, a deuas da vezañ o repu diwezhañ, ha bec'h bras e voe ouzh o diboufañ ac'hano. Ar c'hêrioù-se a yeas da gement a dachenn emgann, hag ar bombezadegoù, ar c'hanoliadegoù a hadas enno an dismantr hag ar freuz. N'eus nemet Sant-Maloù a gement hag a voe adsavet, tamm pe damm, evel ma oa bet a-raok bombezadegoù spontus 1944, hogen ma teufe en-dro war an tamm douar-patatez-mañ ur Brestad eus an XIX^{vet} kantved, hennezh en em gavfe, e kêr Vrest a-vremañ, hep ket a var, en un *terra incognita*.

Evit kêrioù all avat n'eo ket ar brezel eo a voe pennkaoz d'an treuzfurmadurioù, al labourioù terkañ avat ne lavaran ket. Kement-mañ a c'hoarvezas, da skouer, e kêr an Naoned : etre 1926 ha 1946 e oa bet labourioù bras eno. Pal al labourioù-se a oa modernaat ar gêr diwar-

goust an dour, hag evit se e voe strishaet naoz al Liger ha toullet ur ganol danzouar. Al Liger e voe ivez leuniet hag atredet brec'hioù anezhi, hag an Erzh e voe distroet he naoz. Chaoseriañ ha stankañ a voe graet hep poell hag a vil vallozh kaer. Kalz enezennoù a oa gwechall, ha ne chom netra ken eus an darn vrasañ anezho. Pell emaoamp amañ diouzh ar pezh a vez anvet bremañ “keraozouriezh poellek”, hag e gwirionez e voe al labourioù-se evit Naonediz ur stroñs taer o devoe bec’h o tistrafuilhañ dioutañ : kêr an Naoned, lesanvet gwechall *Venezia ar c’hornôg* a oa bet, e berr amzer, kemmet he neuz penn-da-benn, mazaouet zoken.

An hini a falvezfe gantañ adkavout ene ar gêr, evel ma oa bet goveliet a-rumm-da-rumm, kantvedoù-pad, a c’hall en em frealziñ dre al levrioù, marteze, ha karout a rafen menegiñ amañ ur c’haer a levr hag a deuas er-maez e 1899. Titl al levr-se a zo *Nantes la Grise*, ha savet e oa bet gant un den yaouank – 24 bloaz e oa d’ar c’houlz-se – a oa Jules Grand-Jouan e anv. Ur c’haer a levr eo, en anzav a ranker. Mont a ra hanter-kant maendresadenn a vent vras da ober anezhañ, ha pep hini eus ar maendresadennoù-se a ziskouez kêr an Naoned – ha Naonediz ivez – tre evel ma oant war zibenn an XIX^{vet} kantved. Lezomp ar gaoz amañ gant an oberour :

« *Karout a raen an Naoned ; fellout a rae din diskouez na pegen dudiuz e oa ar gêr. Ya, lezel un testeni feal eo a felle din ober, gant from ha kizidigezh, eus Venezia ar c’hornôg a oa krog da cheñch ha da vont da get. Falvezet eo bet ganin lakaat du war wenn kement a yae e poultr, kement a vruzune, a-van-da-van, ha prim-ha-prim koulskoude,*

kement a yae da goll el luskad unvanadur a welen tro-dro din, ken a-fed ar savadurioù, ken hag a-fed an dud... »

Ha Grand-Jouan eo deuet e daol gantañ da vat, n'eus ket da nac'h. Ouzhpenn-se, n'eo ket ar savadurioù hepken eo a vez roet deomp da welet gantañ, hogen an dud ivez, dreist-holl an dud vunut, ar re a wele en-dro dezhañ pa valee e kêr : ar marc'hadourezed-red, al legumajerien, ar sonerien biell, ar bortezerien, ar glaskerien-vara, ar vartoloded, ar vicherourien, ar varc'hadourien boteier-koad, e berr gomzoù tud vunut an Naoned, en em sante Grand-Jouan tost-tre outo, daoust ma oa bet ganet ha maget en un tiegezh bourc'hizien.

Ha n'eo ket souezh ez eas Grand-Jouan diwezhatoc'h war an dachenn bolitikel : fromet e oa bet gant reuzeudigezh an davanteien a wele bemdez-doue en-dro dezhañ, ha feuket ivez gant an digevatalder kevredigezhel. En em ravoltiñ a reas ha lakaat e zonezonoù arzel e servij ar c'hazetennoù hag ar c'helaouennoù anarkour ha sindikalour. Un arzour liberter a voe anezhañ, ur goaptresour enepkloer, enebarmeur, hag enepbrogar. A-hend-all e chomas feal, e vuhez-pad, d'e gêr c'henidik, hag en Naoned eo e varvas, e 1968, oadet a drizek vloaz ha pevar-ugent. Trugarez dezhañ da vezañ lezet deomp gant *Nantes la grise*, ur c'haer a desteni istorel !

Karr-boutin Pempoull

Tuet a-walc’h ez on da soñjal ez eo bet ar c’harr-dre-dan gwashañ ijinadenn an XX^{vet} kantved. E feur va meno ez eo ar wetur ul loen marlonk en deus ezhomm, hag ezhomm bras, evit ober berzh, eus danvezioù krai, eus gremmoù kondon, eus douaroù-gounit. Ouzhpenn-se, ar c’harr-dre-dan ne ra nemet difesoniñ an douar gant digloradurioù euzhus : sellit ouzh ar gourhentoù, ouzh ar parkvaoù divent, ouzh an takadoù kenwerzh, ouzh an treuzforzherioù divalav. Ha ret e vefe komz ouzhpenn, evit klokaat an daolenn, eus saotradur an aer hag an dour. Trawalc’h. Evidon-me ez eo keal ar c’harr-dre-dan hiniennel un diboelladenn, tra muioc’h. Ur pec’hed a-enep ar skiant-vat hag a gousto ker deomp, koulz pe ziwezhat. Setu perak e vevan hep oto abaoe un dek vloaz bennak bremañ.

C’hoantaat a ran koulskoude, gwech ha gwech all, mont da welet penaos e tremen an traoù e lec’h-all : n’eus ket gwelloc’h kelennadurezh da Vab-den eget gwelet e nesañ o vevañ, e-giz ma lavare an hini all. Pa sav ennon an debron beajiñ e kemeran ar c’harr-boutin a gas da Bempoull. Evit mont eus Sant-Brieg da Bempoull n’eus nemet un tregont kilometr bennak, da lavaret eo div

eurvezh gant ar c'harr-boutin. Arabat bezañ broudet gant ar mall en em gavout e penn ar veaj a-raok bout loc'het, evel m'eo ar c'hiz bremañ. Karr-boutin Pempoull a gemer e amzer hag a ya war-raok war e bouezig, a vourc'hadenn da vourc'hadenn, gant kas ouzh an hentoù darempredet hag ouzh an "hentoù-tizh". Chom a ra a-sav, alies-mat, e-kreiz ar maezioù, e penn un hent hag a gas d'ur pennkêr diamen bennak, da sammañ unan hag a c'hortoz anezhañ dindan ur c'houdorenn brenn.

Me, em c'hoazez war va azezenn, am bez goar, bep tro, da arvestiñ ouzh ar gweledva ha da sellet gant bam hag evezh ouzh ar c'horn-bro hep bezañ taget gant terzhienn Yann vlenier, uhel e bouez-gwad ha krizet e dal a-dreñv e rod-stur. Va emgavioù am eus war an hent. Emgavioù bet merket ganin abaoe bloavezhioù hep gouzout dare da zen, emgavioù na c'hwitfen warno evit mad ebet : ur chapel bet adkempennet n'eus ket pell zo hag en em ziskouez en he yaouankiz diroufenn war skramm inizi Sant-Ke, un ti kozh e dalbenn greunvaen hag e stalafioù ruz, n'eus nemedon o c'houzout e c'hellfen bevañ eürus ennañ, dizamant-kaer e-keñver brud ha pinvidigezh, un taol-lagad war dec'h war un dister a borzh-mor morzet e latar tev un endervezh a viz Du, tarchadoù melen ar balan war ur c'hleuz n'eus mui warnañ, a-hend-all, nemet un dervenn gozh digavandenn, un ti bet un ostaleri gwechall, en ur c'hroashent... ha kant tra all a davin warno dre elevez, rak an holl draoù-se a zo din, ha din-me hepen, ha bezet droukplijet neb a garo.

Darn eus an emgavioù-se a zo dic'hortoz, anat deoc'h : penaos gouzout en a-raok, piv a raio kavandenn

din e-pad ar veaj ? Piv a savo er c'harr-boutin an arsav kentañ ? Pelec'h e tiskunno ar pezh maouez lard-tev-se ? Betek pelec'h ez aio an den yaouank e selloù speget ouzh e *smartfon* ? Daoust hag e pigno, e Kastellaodren, evel ar wech diwezhañ, paotr kozh e varv hir, bet marc'hadour traoù kozh, em boa komzet gantañ ur wech pe ziv ? Ur santad anavezet mat en em sil ennon, hini al levenez ganet diwar ur meni breudeuriez gant va c'henveajourien peuzdianav.

Ya. Un dra dinec'hus eo evidon gouzout e c'hellan, pa fell din, mont betek Pempoull gant ar c'harr-boutin.

Pinvidik on, koulz ha nikun

« Ha sur oc’h ne fell ket deoc’h prenañ unan diganin ? Unan hepken ? Ur barzhoneg bet savet ganin, sinet ganin, un dornskrid n’eus bet moulllet skouerenn ebet anezhañ ! Ne gousto nemet pemp euro deoc’h... »

En ur lavaret ar c’homzoù-se he devoa lakaet he dorn war va brec’h, ha ne c’hellis ket mirout a ober ur souz prim a-dreñv o welet he bizied lous hag hec’h ivinoù hir, na oant bet na skarzhet na krennet abaoe pell a oa.

Balbouzat a ris : « Ya, sur on. Barzhoneg ebet » hag ar plac’h a voubennas trumm.

Plac’h he seier plastik eo a vez graet anezhi gant an holl. Ar re a anavez anezhi un tammig muioc’h – Sant-Briegiz a ouenn anezho – a lavaro deoc’h ez eo Kati hec’h anv-bihan. Kontañ a raint deoc’h ivez, mar goulennit titouroù resisoc’h diwar-benn ar baourkaezh liboudenn-se, n’eo ket bet atav o lardañ ar pavez etre porzh al Lege ha karter an iliz-veur, hag he deus graet un tamm studi gwechall, war an arzoù-kaer, e Roazhon. E-tro ar bloavezhioù 1980 e tlee bezañ, da varn diouzh he oad. He oad ? Diaes-kenañ, koulskoude, muzuliañ kont he bloavezhioù, rak gwall vazaouet eo bet gant ar vuhez hag anat eo war he dremm

dic'hailhet merkoù an dienez : ur pennad blev lous ha digrib o fuilhañ a vouchadoù war un tal krizet-don ha rouzet gant ar seizh amzer, daoulagad drouk kounnaret dindan divabrant fonnus ha druz, ha, pa vousec'hoarzh, he genoù digor a ziskouez muñsunoù diannezet... Ar peurrest a zo heñvel : paket eo hañv-goañv he dilhad truilh dindan ur vantell bilhennek, botoù distumm en he zreid... Ha dalbezh e vez ganti daou sac'h plastik leunbarr gant paperachoù hag a bep seurt rikoù tresañ.

Kas a ra hec'h amzer, abaoe bloavezhioù, o ruzañ he botoù e kreiz-kêr, hag o vont a skaon publik da skaon publik, pe eus an eil ostaleri d'eben – hep boesoniñ avat : ne ev nemet kafe du hep sukr... Ha pa vez fall an amzer ez eur sur da gavout anezhi el levraoueg-kêr. Eno, er gwarez, he deus ichoù a-walc'h da zispakañ he zraoù, da zuiñ, eurvezhioù-pad, he strobadoù paperachoù gant he skrabadennoù yar pe da dresañ en ur vousekanañ. Ha ne vern ma laka evel-se, dre hec'h emzalc'h direspè, al lennerien da vroeziñ. Diouzh he c'hlevet ez eo-hi un arzourez villiget. Hag ur varzhez villiget, na petra 'ta, a rank en em zizober diouzh sujidigezh ar reolennoù boutin. Gant se ne dremen ket un devezh hep menegiñ devotamant anvioù Antonin Artaud, Gérard de Nerval, Camille Claudel pe Séraphine de Senlis, tud hag a zo bet kriz ha kalet o flanedenn, a ouzoc'h a-walc'h.

Den ne oar re vat na perak na penaos ez eo difaragoellet evel-se. Tud zo a lavaro deoc'h e vank ur c'hreunenn d'he chapeled. A c'hall bezañ. Din da c'houzout avat ne wel morse na bredvezeg na psikologour ebet. Ur wech ma oa aet ar gaoz etrezomp war ar c'hraf-se he deus lavaret

din, fae ha dispriz en he mouezh : « Ar re-se, Herve, a zo mevelien an urzh, na mui, na maez ! ». Petra lavaret c'hoazh ? Bevañ a ra diouzh un tammig pañsion, en un ti dirapar bet a-ziwar-lerc'h he zud, a oa koñversanted en o aez, ma ranker reiñ kred d'ar pezh a vez kontet amañ-ahont.

En em c'houlenn a rit, marteze, hag eürus eo ? Tuet a-walc'h e vefen da respont he deus momedoù eürusted, evel pep hini ac'hanomp. An deiz all da skouer e oan en em gavet ganti diouzh an abardaez pa oa o sevel gant ru ar Fardell, an hent a gas d'he zi. Gwerzhet he doa ur barzhoneg. Kanañ a rae, a-bouez-penn, ha bez' e oa war he zal hag en he daoulagad ur skleur bennak eus levez ha kened ar baradoz. Soñjet em eus neuze er c'hrennlavar kozh : « Pinvidik on, koulz ha nikun, pa 'z on kontant eus va fortun ».

Simon Sidorot (1825-1903), un digorer hent war dachenn an arkeologiezh

Etre Kankaven ha Menez Mikael en em led ur gompezenn bras-divent. Douaroù geuniek eo a ya d'ober ar blauenenn-se. An douaroù-se a zo bet lakaet da dalvezout, tamm-ha-tamm en daou gantved tremenet, ha n'ouzon ket hag-eñ ez adkavfe Chateaubriand, bet skoliad e Dol, doare ar vro en doa anavezet en e yaouankiz, e-tro ar bloavezhioù 1780. D'an deizioù diskol ez ae da vale gant e vistri hag e genseurted betek Menez-Dol, un torosad greunidek, serzh e doroù, o valirañ 65 metr a-us d'ar gompezenn tro-war-dro. Sed a skrivas diwezhatoc'h diwar-benn an dosenn-se : « *Diwar lein an dorosenn digenvez-se e plav hor selloù pell war ar mor hag a-us d'ar geunioù, a weler enno, en noz, keleroù o nijal* ». Neb piv bennak a erru er vro-hont ne c'hell nemet bezañ souezhet gant Menez-Dol, gant an dic'hortoz ma 'z eo gwelet un dosenn ken uhel e kreizig-kreiz ur gompezenn, hogen mard eo brudet ar gumun-se, ur mil bennak a annezidi enni bremañ, abalamour d'ur gavadenn arkeologel a c'hoarvezas eno e 1872 an hini eo. Ar gavadenn-se a zo chomet evel ur maen-bonn e istor an arkeologiezh,

abalamour dreist-holl ma voe graet, evit ar wech kentañ, gant doareoù labour skiantel.

Emaomp neuze e miz Mae 1872. Micherourien un embregerezh hag a zo o vengleuziañ war-dro an dosenn a zo sachet o evezh gant tammoù eskern a dennont er-maez eus o boutegadoù atredoù. Kelaouet e vez diouzhtu ar penn embregerezh, hag hennezh, d’e dro, a gas kemennadurezh d’ar pennadurezhioù publik. Un toullad devezhioù goude, en em gav war al lec’hienn dean Skolveur ar skiantoù, e Roazhon, Simon Sidorot e anv, hag hemañ ne vo ket pell o stadañ ez eus bet kavet, e gwirionez, ur gwelead fosilek evel n’eus ket kalz anezho. D’ar c’houlz-se avat ne oa ket savet c’hoazh an arkeologiezh da renk ur skiant, hag an doareoù furchal a oa pell da vezañ ar re a anavezomp bremañ : an amatouriezh an hini a oa o ren. Edo Sidorot a-bell-gozh o tamall d’ar furcherien o diouer a riktet, ha bremañ m’emañ e karg eus ur chanter bras e tiskouezo d’an holl penaos e ranker labourat evit kas da benn ar furchadennoù en un doare skiantel. Kentañ a reas a voe mirout al lec’hienn, lakaat war-wel ar gweleadoù amzerel a gaver bep ma touller, muzuliañ an dachenn hag ar c’havadennoù, ha renabliñ pizh-ha-pizh kement a veze kavet, en ur resisaat endro ar gavadenn.

Ur gwir deñzor eus henoadvezh ar maen (paleoliteg) eo a lakaas Sidorot war-wel er gwelead fosilek-se : mamouted gant o stilhonoù, kezeg, frikorneged, kirvierc’h, broc’hed, bleizi, leoned, bovideged, bet fosilet dre garrekaat, ha kalz mein-kailhastr benet hag a bep seurt binvioù. An dro gentañ e oa, a-hend-all, d’un arkeologour kas da benn un enklask ken pervezh gant ur gwir hentenn

labour, hag a-drugarez d'an teuliadoù enklask bet savet gantañ e c'haller, bremañ c'hoazh, adsevel al lec'hienn tre evel ma oa : gouzout a rae Sidorot e tenn an traoù bihan da vras, dreist-holl war dachenn ar skiantoù.

Kavadenn arkeologel Menez-Dol he devoa heuliadoù en tabut diwar-benn oad an denelezh : gant ar gavadenn-se e voe kadarnaet ur gronologiezh skiantel diwar-goust amzeroniezh ar Bibl, evel ma veze difennet c'hoazh gant an Iliz d'ar c'houlz-se, ha meur a hini a savas e vouezh a-enep an arlakadenn gronologel nevez. E-touesk enebourien Sidorot e voe ur beleg, an tad Hamard e anv, hag a savas flemmskridoù tagus a-enep dean ar Skol-veur. An tad Hamard avat a zo bet ankounac'haet e anv, hag e skridoù ne vezont mui lennet. An dastumadeg fosiled bet kavet, renket, rummet ha studiet gant Sisorot a c'heller he gwelet bremañ c'hoazh e Roazhon (Skol-veur Roazhon 1), hag an arkeologourien a-vremañ, pa fell dezho mont donoc'h e studi lec'hienn arkeologel Menez-Dol, a gemer harp warni ingal.

Kenavo Niko

Erruet e oa amañ, en hon touesk, ur pennad brav a zo, un dek vloaz bennak a zo marteze. Soñj am eus c'hoazh eus ar c'hentañ tro din da welet anezhañ : edon o vale en-dro d'al lenn-borzh, abredik-mat, e miz Mae pe e miz Even, hag en ur dremen hebiou d'an iliz, goulaouet holl he zalbenn greunvaen gant kentañ skleurioù an deiz, e spurmantis ur stumm difiñv gourvezet dindan ar porched. Un den an hini e oa. En em gafunet en doa en ur sac'h-kousket lous, ha ne welen nemet e benn. Blev ruz, difoupet-holl, ha barv rouestlet, ken ruz all. Diroc'hal a rae evel ur broc'h. Diouzh e welet e c'helle bezañ un daou-ugent vloaz bennak. En e gichen, ur sac'h kofek, eus ar seurt seier-se a gaver en arme, ha, war ur c'hozh kazetenn chokinet dispak war al leur, restachoù e goan : ur voestad *Pâté Henaff*, un hanter vegetenn, hag ur voutailhad *Coca-Cola* hanter c'houllo. Diwezhatoc'h, e-tro unnek eur, e welis anezhañ adarre, e ostaleri *ar Skreved*, en e sav ouzh ar c'hontouer, o tarlipat ur banne kafe. An deiz war-lerc'h ar beure edo adarre dindan porched an iliz. Ha da unnek eur rik edo oc'h evañ e vanne kafe, evel en derc'hent. E giz p'en defe klasket kemer e voazamantoù e karter ar porzh ha degas evel-se ur meni reoliegezh en e vuhez nevez. Rak ur vuhez nevez e oa evitañ, evel m'en

displegas din diwezhatoc'h. Tremenet en deus c'hwec'h miz evel-se, betek an Nedeleg, ha tamm-ha-tamm ez omp deuet a-benn da c'houzout penaos e veve ha penaos e kase e amzer. Peurvuiañ en em gave er porzh diouzh an abardaez, ha, goude bezañ tremenet an noz dindan porched an iliz, e chome da straniñ war ar c'haeoù. P'en deveze gwenneien a-walc'h ez ae da evañ e vanne kafe da unnek eur. Goude, e sac'h gantañ war ar gein, e save betek kreiz-kêr Sant-Brieg dre straed al Lege, ur straed hir ha liv ar c'hañv warni, hag ez ae da goazezañ e-tal an ti-post pe dirak ar varaerezh en tu all ar blasenn. Lakaat a rae dirazañ ur gluzenn, ha, tavedek ha distrauilh, e c'hortoze an dud da deurel ur pezhig enni, hep teurvezout morse trugarekaat hini ebet. Eno e tremene ar pezh brasañ eus e amzer, ha gwech ebet ne 'm eus e welet oc'h ober kavandenn ouzh ar sklankerien all. Ne felle ket dezhañ, evel m'en displegas din ur wech diwezhatoc'h, kemer pleg diwar gouzougoù-karn Sant-Brieg ha mont da vezvier.

Goude an Nedeleg en doa dilezet ar porzh ha kuitaet porched an iliz. E welet a raen alies, en e lec'h boas, e-tal an ti-post, hag ur wech ma oan deuet a-benn da doullañ kaoz gantañ e lavaras din ne felle mui dezhañ kousket el Lege abalamour ma veze re a dud o tremen hebiou dezhañ, dreist-holl d'an dibenn-sizhun, pa ziskenn yaouankizoù Sant-Brieg d'ober un taol bos e tavarnioù ar porzh. Kavet en doa ur gwasked-bus dilezet, en ul lec'h distro, tu-bennak keit-ha-keit diouzh ar porzh ha diouzh ar c'hreiz-kêr. Kendalc'het en deus, koulskoude, da ziskenn betek ar porzh, evit e vanne kafe pemdeziek. A-van-da-van hon eus graet anaoudegezh gantañ, daoust ma oa un den outañ e-unan, ha klevet hon eus e veze graet

Nikolaz anezhañ. Aleze ar pleg da vont drezañ dre *Niko*, hepmuiken. Distrañset e oa e spered, ha barradoù feuls a groge ennañ gwech ha gwech all. Ne oa ket drouk avat, hogen gwelet a raed anezhañ neuze o komz outañ e-unan hag o tiskalfañ rampadennoù hir en ur jestraouiñ. Neuze ne veze ket brav tostaat outañ, rak dont a rae gantañ beogadennoù euzhus ha kunujennoù seurt n'emañ ket o flas war ar paper moulllet.

Un toullad bloavezhioù zo e oa bet tud ar gevredigezh ADALEA oc'h ober war e dro. Mont a rae gwelloc'h gantañ, neuze, ha klevet em boa e oa bet kavet bod dezhañ, evit c'hwec'h miz, ul lojeiz hag a oa evel un dreuzell evitañ war-zu ur ranndi sokial. Ar skoazellerez sokial he devoa skoet un taol-bazh en dour avat, rak n'eo ket chomet daou viz el lojeiz-se : aet eo kuit, un abardaez, hep rannañ grik da zen, hag aet eo da gousket dindan e wasked-bus distro.

Eno e oa bet kavet e gorf, teir sizhun a zo. Marvet eo e-kreiz ar goañv, e-unan-penn, evel m'en doa bevet. Klevet hon eus e oa o ren e seizh vloaz ha daou-ugent...

Kenavo Niko !

Requiem evit un tad-kozh

E 1805 e voe diazezet Greoù Broadel e Langoned, war atiz an impalaer Napoleon, a felle dezhañ kaout kezeg a-feson ha diouzh an druilh evit an ergerzhadegoù-brezel gwadek a rene dre holl en Europa. Dibabet e oa bet ar barrez-se abalamour m'en em gave e-kreiz ar vro, hag ivez dre ma oa eno savadurioù un abati kozh a c'helled staliañ enno ur servij-kezeg hep na rankjed embreger labourioù bras. D'ar mare-se avat e oa fall-meurbet ha krenegellek-holl an hentoù a gase da Langoned, leun a boulloù pri hag a fontigelloù treitour, a sanke don ar veajourien enno, ha kent e voe pell e ranked serriñ ar stal-roñseed nevez-se abalamour ma oa re ziaes mont di er mizioù du. Unan all a voe digoret, e 1856, en Henbont. Etre an daou zeiziad-se – 1805 ha 1856 – ez eus unan all hag a zo bet a bouez evit istor ar sevel kezeg e Breizh : e 1825 e voe digoret Greoù Broadel e Lambal ivez. Savadurioù ar greoù-se a zo c'hoazh en o sav, petra bennak ma voe serret ar stal un toullad bloavezhioù a zo, hag ur wech er bloaz e vez aozet enno ur c'hoñkour loened-kezeg. Bez' ez eus bet, ar bloaz-mañ, 88 saver kezeg eus departamant Aodoù-an-Arvor o kemer perzh er genstrivadeg-se. E gwirionez, ar sevel loened-kezeg a zo bet, a-holl-viskoazh, un obererezh a bouez-bras e Breizh. Ur skouer nemetken : da geñver

ar Brezel Tregont Vloaz, a wastas an Alamagn etre 1618 ha 1648, ez eus bet etre 11000 ha 12000 roñse o kuitaat Breizh bep bloaz, da vezañ kaset da dachennoù emgann diamen.

Pa zic'hañs din gwelet ur marc'h-sugell, e sav eus don va amzer bugel skeudenn va zad-kozh, a oa o terc'hel tiegezh – unan gwall vihan avat – e Ploheg, damdost da Beniti-Koedrac'h. E-touesk ar re ziwezhañ e oa bet oc'h enebiñ ouzh an araokadennoù teknologel hag o chom feal d'e ziv gazeg. An daou loen-se a dalveze dezhañ da bep tra : terriñ douar, ogediñ, mediñ, falc'hat, tennañ pato ha beterabez, charreat... Dic'hastiñ a raent, ha n'eo ket ober van, ha boazet e oant, o div, ouzh kolier, gwakol ha sugell ! Ur garantez don a oa etre Tad-kozh hag e ziv gazeg. Doujañs en doa evito ivez, rak gouzout a rae re vat en doa ezhomm anezho : petra e vije deuet da vezañ hepto ivez, ma Doue ? Mont a rae dezho dre gaer, ha neket dre heg, ha gwech ebet ne 'm eus bet gwelet anezhañ oc'h ober trouz dezho. Goude labourat a-zrailh-korf penn-da-benn gant an deiz e ranke c'hoazh ober war o zro diouzh an abardaez : neuze e vezent skrivellet ha paloueret, ha roet e veze dour, foenn ha kerc'h dezho. Tad-kozh ne oa ket evit gouzañv e vije lous e gazeKenned : ar vlevenn warno a ranke bezañ atav flour ha lufrus, ha ne 'z eus nemeur a loened hag a ve bet graet aketusoc'h ha karantezusoc'h war o zro eget na zo bet graet da gazeKenned Marsel Guyony, *Lizette* ha *Mignonne* ! Meur a wech em eus bet gwelet anezhañ o komz outo e pleg o skouarn, dre chuchumuchu, ha, pa c'houlennan gantañ petra a lavare dezho, e responte : « Emaomp o terc'hel kuzul, Veig ! ». Ne gomprenen ket re vat. Evelato e kave din e tlee ar c'huzul-se bezañ un dra

a bouez-bras. Ouzhpenn-se, estlammet holl e oan dirak Tad-kozh, pa oa gouest da zivizout e yezh kevrinus ar c'hezeg.

Va brasañ plijadur a oa pignat war gein *Lizette* war an distro da vezañ bet o labourat er parkeier. A-c'haoliad war an araog, va daouarn bihan peg mat er gwakol pe er moue melen ha druz, endra ma kerzhe Tad-kozh a-zoug e gamm, o kas an denn dre ar rañjenn, e kave din e oan kar ha par d'ar roue ! Soñj em eus eus un devezh ma oa bet sterniet *Lizette* ouzh ur c'harrad foenn frondus hag uhel-meurbet. Evit mont eus foenneg an traoñ betek an ti e oa ur c'hra gwall serzh, hogen an denn a savas gant an hent divec'h, diflip, evel o c'hoari, gant ar c'hreñv ma oa ar gazeg sioul-se.

Panevet e fellas da'm eontr, e 1969, prenañ un traktor evit modernaat an atant hag aesaat al labour, en dije miret Tad-kozh e gazeKenned, moarvat. Hogen un devezh diskol m'en em gavis en atant, e kavis goullo ar marchosi. Er c'hrañj avat e oa un traktor *Renault* nevez-flamm... Tad-kozh n'en doa ket gallet enebiañ pelloc'h, ha pleget en doa, a-geuz-kalon, en desped da gement a c'hoantae. Hogen treuzet e voe e galon gant ar glac'har d'e gazeKenned hag adal an deiz-se e koshaas a-daol trumm. E amezeien a glaskas sershaat anezhañ war e gilhoroù, hogen ar paourkaezh den ne c'hellas biskoazh kemer an tu war-c'horre, ha mervel a reas bloaz goude, ouzh ar stern : ne oa nemet 59 bloaz, ha biskoazh ehan ebet ne oa bet evitañ war an tamm douar-mañ. Soñj am eus bezañ klevet unan bennak eus e anaoudeien o lavaret, un devezh m'edomp o tennañ pato e Kreac'h-Meur :

« Paourkaezh Marsel, an traktor milliget-se eo en deus lazhet anezhañ ! ».

Kintin

En em c'houlenñ a ran alies peseurt elfennoù kuzh a ya d'ober hoal forc'hellek ar vein kozh, ha perak e klaskomp atav, pa vezomp en ur rannvro dianav, gweladenniñ ar c'hêrioù bihan neuzeit-kaer, ar re a weler enno dismanthroù an tremened. Respont ebet ne 'm eus kavet betek bremañ, nemet hennezh marteze : vad a ra deomp, en ur bed didouellet, adkavout ul lusk disheñvel, roudoù ar gened, hag aspadennoù un doare-bevañ lakaet ganimp, e gwir pe e gaou, da vezañ siouloc'h ha tostoc'h d'hon ezhommoù donañ. Daoust-hag-eñ n'omp ket techet, an holl ac'hanomp, da hiraezhiñ d'un Oad-aour kollet ? Hag hunvreal d'an amzer wechall, d'un amzer aet da get ha ne welimp mui, a laka da ziwan ennomp ur meni hiraezh a zegas deomp frealzidigezh e trepetoù dizehan ar bed.

Sed moarvat ar pezh a glaskan pa vezan o vale e Kintin. Neb a dremenfe buan dre ar gêr vihan-se, o teurel ur sell prim warni, ne welfe nemet ar c'hastell, troet e dalbenn balc'h hag e dour uhel karrez ouzh ar su. Lec'h a zo da estlammiñ un nebeud ouzh e welet avat, rak savet e voe er XVII^{vet} kantved gant an Aotrouien De La Moussaye, diwar batrom adeiladurel ar *Palais Bourbon*, e Pariz, war

diazezoù ur c'hastell-kreñv kalz koshoc'h, testeniet abaoe an XIII^{vet} kantved. An noblañsoù-se, en o rogentez, a felle dezho estlammiñ dirak dassked o c'hastell el ledennad dour a weler dirazañ, dalc'het gant ur chaoser mein en tu all d'an hent. Hogen kestell el loar eo e oant o sevel, ha ne deuas ket o zaol da vat ganto : ar c'hastell a chomas diechu abalamour ma oa aet an arc'hant da hesk e kefioù ar c'hont : mennet da harpañ ar brotestantiezh er vro, an Aotrou De La Moussaye en devoa foeltret e beadra, hag ar brotestantiezh a skoanas buan en tolead dre ziouer a ziazez sokial ledan a-walc'h. Ret e voe dezhañ lezel an dorn gant ur c'henderv dezhañ. Hennezh en devoa arc'hant d'ober teil hag a gavas gwelloc'h lakaat sevel un annezlec'h a-lorc'hañs nepell diouzh Kintin, e peniti-Koedrac'h.

Hogen estreget ar c'hastell a zo danvez ur sell ennañ : bez' ez eus e kêr paot a ostelioù prevez lorc'hus hag a zegas da goun eus pinvidigezh ar varc'hadourien lien. Kalz tiez o framm koad a zo ivez, tolpet strizh en-dro d'ar benniliz, ha tiez bihan ar wiaderien a weler ivez, e goueled kêr, war ribl ar Goued. Pa baouezas en tolead artizanelezh al lin hag ar gwiaderezh, ar vro a yeas war he genoù, kantadoù a dud paour a voe taolet war an hentoù, en diouer a bep tra, hag ar rezeudien-se a rankas mont a di da di, da astenn an dorn. Unan a zaou : bevañ diwar an aluzenn pe mervel gant an naon !

Padal, ar gwir deñzorioù a zo e lec'h all, e feur va meno, ha da neb en defe c'hoant d'ober gwelloc'h anaoudegezh gant ar gêr, e kinnigfen pellaat diouzh melezhour al lenn, kompez-meurbet ha lugernus, sevel gant grav *Roc'h-an-*

Hent ha troc'hañ berr-ha-berr betek ar c'hloerdi bihan, evit mont d'en em goll e milendall ar banelloù kamm-digamm, liv ar c'hevrin warno, a gildroenn etre mogerioù uhel o mein manek. Eno ez eo achantus an aergelc'h, ur marzh !

Ar gwellañ mare eus ar bloaz evit ober anaoudegezh gant ar gêr vihan-se a zo, hep mar ebet, an dianeost, d'an hini en deus amzer d'ober baleadennoù war ar maez. E miz Here, p'en devez peurskubet an avel traoñienn ar Goued, orgedet feuls gant gwez bras o delioù melen e donderioù kevrinus koad Lorges, ha dastumet er brugegi, en touskanegoù hag er broustoù e eostad frondoù, ha pa sav eus traoñ al liorzhoù c'hwezh peuzdous an delioù sec'h, ar rotel hag ar c'histin grilhet, ez eo un dudi bale e kêr, etre tiez o zalbennoù koad, e brizhc'houloù peoc'hus an diskaramzer, pell, gwall bell, e gwirionez, diouzh safar hon amzer-ni... Un emgav na c'hwitfen warnañ evit mad ebet !

Kreiz-kêr, emit-hu?

Un nijad golvini marnaoniet a blav war ar blasenn vras hag a ziskrap ar restachoù boued, gragailh ganto. Emañ paotred an ti-kêr o naetaat al leur. Ur sadornvezh a viz Mezheven eo ha marc'had a zo bet war leurgêr an ti-post, e Sant-Brieg. Leun-chouk eo bet an ostalerioù penn-da-benn gant ar beurevezh, met roueshaet eo ar pratikoù a-benn bremañ. O paouez pakañ o stal emañ ar varc'hadourien diwezhañ, hag ar re o deus amzer vak dirazo a zo aet da evañ ur banne evit kemer o didorr un tammig bihan kent distreiñ d'ar gêr. Stank eo bet an dud war ar marc'had, evel bep Sadorn pa vez brav an amzer, hag un estrañjour bennak, bet o straniñ etre ar stalioù, a vefe bet techet a-walc'h da grediñ ez eo bev-buhezek ar c'henwerzh e kêr-benn departamant Aodoù-an-Arvor. Hogen ma yafe da ober un tamm-tro e kreiz-kêr war ar sizhun, ret-mat e vefe dezhañ merzout n'eo ket ken brav an diskan ha ma oa bet ar c'han, rak e Sant-Brieg evel e paot a gêrioù all emañ ar c'henwerzh o tizeriañ : ne weler mui dre holl nemet straedoù didud riblet a stalioù dall. Ar goñversanted a chom digor o stalioù en desped da bep tra o devez poan, muioc'h-mui, o pakañ an daou benn, ha n'o devez ket kalz fiziañs e amzer da zont o zammig aferioù. Kement ha ken bihan m'eo deuet ar c'hreiz-

kêr da vezañ trist, un druez ! Ha daoust da strivoù an
dilennidi ne ra an traoù nemet mont war washaat.

Da biv tamall stad fall an traoù e Sant-Brieg ? Ar
respont a vezo kavet, marteze, e istor an hanter-kant
vloaz tremenet : e deroù ar bloavezhioù 1970 e oa bet
digoret, e-maez a gêr, tachennoù-kenwerzh bras-divent.
An tachennoù-se o deus graet berzh ha kresket o deus hep
paouez nag ehan, o lonkañ tamm-ha-tamm, marlonk, an
douaroù-labour er c'humunioù tro-war-dro : Langaeg,
Tregaeg, Plerin... Kement-mañ, anat deoc'h, a zo c'hoar-
vezet diwar-goust stalioù ar c'hreiz-kêr. An dud o deus
kemeret ar pleg da vont da zispign o arc'hant en trepasioù
kenwerzhel bras, ha n'eus tra diaesoc'h eget terriñ ur
voaz...

Va mignonez Valérie, hag a zo o terc'hel un ti-kram-
pouezh – bihan hogen dibab – e skeud an iliz-veur, a zo
genidik eus a Vontroulez, ha sed a lavaras din an deiz-all,
p'edon o tebriñ du-se : « E Montroulez, evel e Sant-Brieg,
e weler bremañ ur bern stalioù serret, hag e-keit-se ne
ra an tachennoù kenwerzhel a-ziwar-dro nemet kreskiñ.
Hogen gwashoc'h a zo c'hoazh : an dud bremañ, n'o
devez ken diverr-amzer ebet, d'ar Sadorn, nemet mont
betek Brest gant o oto da brenañ traoù. Da'm soñj, n'eo
ket gant politikerezh an dilennidi eo e vo cheñchet penn
d'ar vazh a-fet koñvers ar c'hreiz-kêr, gant an dud o-unan
avat ne lavaran ket. D'an dud eo da zivoazañ diouzh ar
stalioù bras. Mont di da brenañ traoù n'eo nemet ur pleg
fall. Ret eo dezho kemer plegoù mat en-dro ha distreiñ
d'ar c'hreiz-kêr. Me, da skouer, pa fell din prenañ botoù
nevez, daoust hag ez an da bell ? Ne ran ket 'vat ! Da di

Bourc'hiz eo ez an-me, damdost da iliz Sant-Vaze. Eno emañ an traoù bern-war-vern hag a-stlabez, un tamm bihan, gwir eo, hag e c'hellfe bezañ e vefe liv ar c'hozh war ar stal-se, hogen atav e kavan ar pezh a glaskan ».

War hent an distro, ha me o vale, neuze, dre ar straedoù didrouz ha goullo, hag o pellaat war droad eus an iliz-veur gozh sonnet en he hunvre-maen abaoe mil vloaz, e soñjen er pezh he devoa lavaret Valérie din. Kemmañ a ra pep tra, anat eo, ar vuhez an hini eo. N'eo mui kêr Sant-Brieg ar pezh e oa gwechall. Hogen ar gwir a zo ganti : pep hini ac'hanomp, dre e zibaboù, a zo kiriek eus emdroadur ar bed. Evidon-me, ne cheñchin netra em doare da vevañ : derc'hel a rin da vevañ hep oto, da reiñ douar da'm zreid en ur gerzhet ar muiañ posupl, da brenañ va diankachoù e kreiz-kêr, ha, gwech ha gwech all, da zebriñ krampouezh e ti Valérie : he skiant-vat a blij din... Kenkoulz, gwelloc'h krampouezh ne gavin e lec'h all ebet !

Levrioù

Ha bet oc'h e Brehant-Loudieg ur wech bennak c'hoazh ? Ur gumun vihan an hini eo, souchet war grap ur run peuzuhel, tu bennak etre Roc'han ha Josilin. Hogen ar barrez-se, daoust m'eo bihan-bihan, a zo dellezek da vezañ meneget el levrioù istor rak eno e voe diazezet kentañ ti-moullañ ar vro. N'eo ket dec'h an hini e oa, anat deoc'h : e 1484 e teuas a-zindan ar wask al levr kentañ bet moulllet e Breizh. Bez e oa anezhañ ul levrig tanav, skrivet e galleg, diwar-benn marv ar Werc'hez Vari. Anv ar voullerien ? Jehan Cres ha Robin Fouquet, anezho tud araokour ha leun a intrudu, hep mar ebet. Ur pemzek vloaz bennak goude, e 1499, e voe moulllet, e Landreger, ur pezh mell geriadur teiryezhik anvet *ar C'hatolikon*. E-keit-se, un den anvet Kristof Goulm en doa dizoloet Amerika, ha gant an tri bloaziad-se e paras war hor bro skleur an amzerioù nevez hag ar vodernelezh.

Jakez eus du-mañ a c'hellfe displegañ an dra-se deoc'h, ha kalz traoù all c'hoazh, ha dibunañ deoc'h dre ar munut, ha gwelloc'h eget n'eus forzh piv, kement a denn da istor al levrioù dre vras. Un denig treut evel ur vazh-kloued an hini eo, e-tro hanter-kant vloaz, tamolodet hañv-c'hoañv en un hir a vantell c'hlas hag a dap betek e zaoulin.

Kromm eo e gein, hag ar peurliesañ e vez stouet e benn. War ar penn-se, ur gasketenn. Dindan ar gasketenn, un dremm kastiz, ennañ ur fri hir-hir a-us d'ur varvenn fraost, ha daoulagad lemm a bep tu dezhañ. A-zindan ar gasketenn mezher fetis, troc'het giz gwechall, e fuilh blev gwenn a-vouchadoù hir ha digempenn. Abalamour d'e vlev, moarvat, eo bet lesanvet *ar Chouan*. M'hoc'h eus c'hoant da ober anaoudegezh gantañ, ret eo deoc'h en em gavout e korn straed ar Vali, e Sant-Brieg, e-tro nav eur diouzh ar mintin, rak eno eo e krog e droiad pemdeziek. Rak Jakez a oar ober un implij mat ag e amzer ha n'en deus ken ger-stur nemet hennezh : « Bemdez an hevelep tra d'an hevelep eur ». Gant se ne c'hellit ket c'hwitañ warnañ. E korn ar straed-se ez eus bet staliet, un dek vloaz bennak a zo, kentañ boestad levrioù kêr Sant-Brieg : pep hini a c'hall degas di al levrioù a fell dezhañ en em zizober diouto. Neb a gar a c'hall kas gantañ al levrioù a blij dezhañ. Sellit ouzh Jakez o furchata er voest : palvata a ra al levrioù, o digeriñ ha o serriñ a ra tro-ha-tro, sellet a ra outo a-dost, krizet e dal gant mil roufenn, ha ruflañ gant dudi c'hwezh ar paper louedet a sav diwar ar pajennoù kornek. Goude e raio tro an teir stal levrioù kozh a gaver e kêr. Da greisteiz, ur bara pok-ha-pok debret buan war ur skaon, e liorzha ar prefeti, ha yao gant an hent adarre : gwelet e vo o c'hwiliat an embannadurioù kozh el levraoueg-kêr hag o turmuch er c'hozh levrioù e ti-Emmaüs. E-tro pemp eur e raio un ehan e *Ostaleri an Ti-post*. Eno, en e goazez dirak an hevelep taolig kelc'hiek, e lipo ur banne kafe du hep sukr a lonkadennoù bihan, lipous hag evezhiek en ur sellet a-dostoc'h ouzh ar pinvidigezhioù bet dastumet gantañ abaoe ar beure, kent distreiñ da borzh al Lege, lec'h m'emañ o chom abaoe pell amzer.

Tremen a ra bemdez hebiou va zi, ar skrifelleg-se, uhel war e zivesker, e sac'h gantañ war e choug, e c'hodelloù koeñvet gant e eostad levrioù. An deiz all em eus goulennet outañ : « Ur berniad brav a levrioù a zo ganeoc'h er gêr bremañ, Jakez. Daoust hag amzer hoc'h eus da lenn anezho ? ». Ha gouzout a rit petra en deus respontet din ? Ma, setu :

— Peogwir ez omp mignoned vat, ni hon-daou, Herve, ez an da anzav un dra bennak deoc'h : me, gouzout a rit, ne lennan mui, abaoe pell zo, nemet frazenn gentañ va levrioù, hag an hini diwezhañ ivez.

— Souezhet on ganeoc'h Jakez. Ar peurrest ne ra ket diouer deoc'h ?

— Ac'h, ar peurrest emit-hu ? Ar peurrest, c'hwi 'oar, a zo evel ur park a lezan e fraost. Ne ran ket war e dro, met kreskiñ a ra warnañ bleunioù va faltazi. Hag ar seurt bleunioù-se a dalv' gwelloc'h eget rambreadennoù ha sorc'hennoù ar skrivagnerien...

Livourien

An arzoù-kaer – hag ar mor war ar memes tro – em eus graet anaoudegezh ganto em bugaleaj dre c’halloud ur gaer a daolenn hag a ziskoueze, dindan un oabl koumoulek e arlivioù tener, ur oueletenn bet lakaet war ar sec’h, d’an izelvor, war an traezh gleb. En-dro d’ar vag kostezet e weled martoloded o tougen, dre-douesk ar poulloù dour-sall, kasedadoù ha boutegadoù pesked betek ur c’harr-tumporell nepell alese. Ar mell loen-sugell sterniet ouzh ar c’harr a c’hortoze, sioul ha diglemm, e-giz ur prederour kozh, an urzh da vont war-raok ha da gas d’ar c’hal an dumporellad moru bet paket en Douar-Nevez. An daolenn-se – pe un eiladur anezhi pa lavarín mat – a oa war ziskouez e ti va mamm-gozh : prenet he devoa anezhi en amboaz kaeraat ar speurenn goad a stanke an oaled, deuet da vezañ didalvoud abaoe ma oa bet prenet ur fornigell glaou evel ma oa deuet ar c’hiz war ar maez er bloavezhioù 1960. Pep tra a blije din en daolenn-se : ar c’haer-dreist ma oa bet livet an draezhenn frank dindan an oabl marzhus, ar gwirheñvel ma oa bet treset ar vag, an dud hag ar marc’h, ar bev-mat ma oa ar mouch-avel e moue al loen, tresadenn bizh ar biriniked war ar reier blevek pe ar c’hrankedigoù er poullouigoù dour, ha goude ma chomfen bev kant vloaz

c'hoazh, chom a raio garanet don em spered labour dreist an arzour. Ne ouien ket avat gant piv e oa bet livet an daolenn-se, a enaoue ennon kement a estlamm, ha ranket em eus gortoz va oad gour ha digarez ur weladenn en ur mirdi evit adkavout, gant from, an daolenn a orin, ha gouzout anv al livour.

An arzour-se eo Eugène Boudin (1824-1898) e anv. Evel an arzourien Paul Signac ha Berthe Morisot e reas meur a chomadenn e Bro-Oueloù, dreist-holl e Sant-Ke-Porzh-Olued hag e Pempoull, ma livas trevell paotred an Douar-Nevez hag an Islandiz. Taolenniñ a reas ivez buhez ar porzh, ar marc'hadoù, buhez pemdeziek ar besketaerien, an dud vunut ha gweledvaoù meurdezus bae Sant-Brieg. A-raok en em gavout e Sant-Ke hag e Pempoull e oa bet e Trouville hag e Deauville, hogen anzav a reas e oa aet skuizh gant « lezhiregezh arouarek ar vondianed hag ar sunerien ». Ne oa ket awenet gant an doare dibreder ma rene ar vourc'hizien o buhez hag evel paot a livourien d'ar c'houlz-se e klaske e awen e kement a oa “gwir” hag en toleadoù kentidik. Hag e Sant-Ke-Porzh-Olued e kavas ar pezh a glaske, da lavaret eo tud didro o ren ur vuhez eeun, poanuis ha paour alies-mat, gwir eo, met en un endro hag a oa chomet digemm ha ken brav ha liorzha Eden. Rak Sant-Ke, e eil hanterenn an XIX^{vet} kantved, ne oa ket deuet c'hoazh da vezañ ar c'houronklec'h a anavezomp, hag a oa c'hoazh un dister a borzh pesketa, na weled ennañ nemet tiez paour ar besketaerien bodet en-dro d'un iliz na enored enni sant brudet ebet. Dibaot a genkizoù a gaved eno ha ken gloev all e oa an tiez-hañv. Gant se n'eus ket da vezañ souezhet ma tivizas Boudin livañ eno...

Eugène Boudin ne oa ket par dezhañ da liveañ an natur, ha pezh a garan en e daolennoù, an oabloù an hini eo dres. Camille Corot, un arzour hag a ouie an doare, en deus skrivet e oa Boudin « roue an oabloù ». En e daolennoù e weler gwech an aer boull evel ar gwer, gwech froum ha daskren er sklêrijenn en neñv diroufenn, gwech tremen ar c'houmoul oc'h ober o hent uhel en oabl pe c'hoazh c'hoarioù kemm-digemm ar skeudoù hag ar sklêrijenn dre fregoù ar c'hoabrennoù. Kemeret e voe, gant e gempredidi, evit un diaraoger eus an impresionouriezh. Pezh a zo diarvar eo emañ da vezañ renket e-touesk al livourien o deus taolennet hor bro en he c'haerañ hag o deus douget testenî, dre o oberenn, eus ar garantez don a vagent en he c'heñver.

Loened an draoñienn

Birgit he deus kuitaet Hamburg pemp bloaz zo evit bevañ en avantur doue e-bourzh he bag. Emañ amaret e porzh al Lege abaoe miz Gwengolo, hag e sell da c'hoañviñ amañ. Kas a ra hec'h amzer o vale e traoñienn ar Gouedig hag o skrivañ. Asantet he deus e lakfen e brezhoneg ur bajenn bennak eus an deizlevr ma skriv ennañ kement a wel e-kerzh he baleadennoù en draoñienn :

« Gwelet em eus ar gerc'heiz ar mintin-mañ. Mignoned vat omp abaoe pell zo, bremañ, hep gouzout dezhi, avat. An dimezell-se, dezhi ur bouchadig pluennoù du war he fenn, he deus graet he neizh e-mesk ar raoskl uhel, war ur gwelead traezh bouk, damdost d'ar Gouedig, lec'h ma ra ar stêr ur pleg trumm kent diruilh buan etrezek ar greizenn burañ, en tu-all d'ar c'hleuziad strouezh. P'he deus klevet ac'hanon o tostaat, war an hent, he deus kavet furoc'h pellaat, daoust m'edon war ar ribl enep, ha gwelet em eus anezhi o vont diwar nij, a daolioù eskell kompez, hag o skeiñ etrezek ar su en oabl luget. Heuliet em eus anezhi dre va sell : kaer e oa da welet gant he gouzoug hir ha gwevn, he figos kreñv hag he fluñv louet-du. Bourrañ a ra-hi en draoñienn, ha pa ne vez ket war-dro he neizh ez on sur da gavout anezhi e poull-dour *Roc'h-Bihan*, pemp

kilometr alese, e krec'h, kuzhet e-touesk ar c'hoad-med hag ar gwern.

[...]

Biskoazh ken abred ne oan bet en draoñienn. Nozik e oa c'hoazh ha berr e oa ar gwel. Daoust ma oa bet un nozvezh loargann ne welen en amc'houlou nemet seizenn sklaeroc'h an istreved kildroennek dirazon, rak al loar a oa skoachet gant koabrennoù pounner. A bep tu d'an hent, drailhadoù teñvalijenn a spege er skourroù treut, ha diwar ar stêr e save lатар sklas ar goañv. Trouz ebet tro-war-dro, war-bouez hiboud an dour en ardraoñ. A-greiz-holl e spurmantis, dirazon, ur stumm izel a dreuzas an hent, prim evel ul luc'hedenn, hag a yeas da guzhat er brouskoad. Amzer am boe, koulskoude, da anavezout, diouzh ar fri moan, ar penn tric'hornek hag al lost bodennek, ul louarn en e oad gour. Aon en deus bet, moarvat, ha me ivez...

[...]

Dizesk ez on war an evnoniezh, ha ken dizesk all war al louzawouriezh : dibaotik al laboused ez on gouest da anavezout, ha ken dibaot all ar gwez a c'hellfen reiñ un anv dezho amañ, en draoñienn... Koulskoude ez on bet ganet ha maget en un atant, hini va zud-kozh, met an dud vat-se a oa re zalc'het gant preder ar bara pemdeziek ha n'o deveze ket amzer da genteliañ ac'hanon war gement na selle ket ouzh chal ha tregas an trevell war-dro ar c'hezeg, ar saout, ar parkeier hag an trevadoù. Un deiz bennak, koulskoude, e vefe mat sevel ur meni renabl eus kement am eus desket diganto a-fet natur.

[...]

A bep seurt spesadoù laboused a zo dre amañ : laboused-mor, evel-just, ha laboused ar c'hoadoù hag ar maezioù.

Pep spesad, war a seblant, en deus e diriad. An oriaved a droidell uhel en oabl, en-dro d'ar porzh. Ar skreved a gaver anezho stank-ha-stank er porzh ivez, hogen klevet a raer anezho ivez o vagaan cholori en-dro d'an iliz-veur hag a-us d'ar c'harterioù kozh, uhel e kreiz-kêr. Ar morvrini o deus graet o annez e bleñchoù ar gwez, e-harz tosenn *Roc'h-an-Nec'h*, e-tal al lenn-borzh. An tridi a chom war ar maez e-pad an deiz hag en em daol war gwez ar c'hreiz-kêr diouzh an abardaez, en diskaramzer. Hini ebet eus al laboused-se ne weler en draoñienn avat, daoust m'emañ-hi etre ar porzh hag ar c'hreiz-kêr. An draoñienn ne weler enni nemet laboused ar maezioù : brini, fraved, dubeed, boc'hruzed... Hogen an dud a oar diouzh an evnoniezh, an arsellerien evezhiek, a lavaro deoc'h ez eo rouesaet kalz ar spesadoù laboused, dreist-holl ar re vihanañ anezho, er bloavezhioù tremenet, amañ en draoñienn evel e lec'h all. Ar beufiged, ar pintiged hag ar golvaned n'in ket ken stank hag un toullad bloavezhioù a zo

[...]

En tu all d'ur gael, war vord an hent, div yar, unan zu hag unan ruz. Brav o buhez : kas a reont o amzer o tiskrabad an douar hag o klochal, o pigosat ar preñved hag o ragachat, ken dinec'h ha tra, gwarezet mat ma 'z int diouzh al lern gant ur gael uhel. Boazet int diouzh va mouezh avat, ha pa glevont ac'hanon o trevezañ o ragach e savont trumm o fenn sanket don e-touez plu o bruched, e paouezont gant o figosadur hag e tenijont da'm bete : gouzout a reont em bez atav un tamm bara evito. Bep tro an hevelep arvest neuze : dao d'ar pigos, ha dao d'al lorgn ha d'an drailh ! An hini zu a gemer atav he c'hreñv war eben, a argas anezhi a daolioù pigos hag a lamm a-dizh, marlonk, war ar bruzun-bara. Kaer em bez

teurel an tamm bara pelloc'h hag ober va seizh gwellañ
evit ma vije reishoc'h an traoù etrezo, an hini zu a vez
trec'h atav. Kriz ar vuhez, a-wechoù !

[...]

Koumoulet-du eo an oabl hiziv, morzet ha teñval
an draoñienn er goañv truilhek. Didrouz-kaer ar bed
ha mouch avel ebet. Ur flistrerezig-dour digavandenn a
dreuz an hent dirazon en ur lammedikat war he favioù
moan. Eus pelec'h e teu ? Den ne oar. Da belec'h ez a ?
Den ne oar. Daoust hag e oar, hi hec'h-unan ? »

Louis Guilloux, Sant-Briegad, skrivagner ha stourmer

Brud fall he deus kêr Sant-Brieg : hervez kont e vefe ur gêr divalav, diharak ha trist, hep pezh-kurius ebet da welet enni. Gustave Flaubert e-unan en doa skrivet, en e zeizlevr beaj, goude bet e Sant-Brieg e 1847, ne oa er gêr-se « tra ebet hag a vije danvez ur sell enni ». Ret mat eo anzav ne gaver e kêr-benn departamant Aodoù-an-Arvor nemet dibaot a vanelloù kamm-digamm gant tiez o framm koad, ar seurt straedoù-se hag a blij kement d'an douristed. Ken rouez all eo ar straedoù strizh gant tiez o zalbennoù benerezh kozh evel ar re a gaver e Dinan, Montroulez, Kemper ha Gwened. Ya, e-skoaz ar c'hêrioù-se ez eo pennañ dezverk Sant-Brieg, hep mar ebet, an dister ma 'z eo a-fed tisavouriezh.

War-bouez nebeut diouzh an iliz-veur koulskoude, setu straed Kerdenwall, enni tiez o diarog damruz bet savet e-tro ar bloavezhioù 1930. Ar brikennoù a ro d'an tiez-se an neuz unton ha stipet kaer a gaver alies e kêrioù bihan Bro-Saoz, ha ma yafe Yann valeer da bourmen er straed-se, e welfe, e penn uhelañ anezhi, ur porched ledan-ledan o valirañ a-us d'ar straed. Engravet ez eus bet tri ger ouzh talbenn ar porched-se : *Ti ar Bobl*. Savet e oa

bet an ti-se er bloavezh 1932, hag ur skrivagner, Louis Guilloux e anv, en deus kontet en ur romant hag a zo, just a-walc'h *Ti ar Bobl* an titl anezhañ, e pe gemperzh istorel e voe savet an ti-se.

Louis Guilloux a oa Sant-Briegad. Ganet e oa bet e 1899, en un tiegezh paour. E dad a oa kere, war e gont, ha, pa ne veze ket o fardañ hag o tresañ boteier ar vourc'hizien e damskeud e stalig, e kemere perzh en emsav micherel : kreñv e oa e emskiant renkadel, ha stourm a rae evit kas war-raok ar mennozhioù sokialour. Ha bezañ sokialour, d'ar c'houlz-se, a oa, war ar memes tro, bezañ dispac'her : evel e geneiled e c'hortoze an deiz ma c'hallje ar renkad micherel embreger ar galloud. Bez' e oa anezhañ, ouzhpenn, un den hag a gerzhe gant un neudenn eeun. Louis Guilloux e voe merket don e spered gant engouestl politikel e dad, ha chom a reas feal, e vuhez-pad, d'an dud vunut ha da dalvoudegezhioù an tu kleiz : stourm a reas a-enep ar faskouriezh, sevel a reas krog ar repuidi eus Bro-Spagn, pan errujont e Sant-Brieg e 1937 ha 1938, ha, goude an Eil Brezel Bed, e voe ivez dileuriad en un aozadur etrebroadel, an Uhelgomisieriezh evit ar Repuidi.

Guilloux a oa romantour, dreist pep tra, ha skrivet en deus un daouzek bennak a romantoù. Ne c'heller reiñ, e ken berr un destenn, nemet un damskeud eus e oberenn hag eus e vuhez. Setu perak ne gomzin amañ nemet eus unan eus e romantoù, an hini kreñvañ ha fromusañ, ha, gouez d'an arbennigourien, an hini gwellañ ivez. Titl ar romant-se, a deuas er-maez e 1935 : *Ar Gwad Du* an hini eo. A betra ez eus kel ennañ ? Kontañ a ra Guilloux un

devezh e buhez ur c'helenner war ar brederouriezh, en ur gêr vihan, er bloavezh 1916. Ar gêr-se n'eo ket meneget hec'h anv er romant, hogen anat eo ez eo kêr Sant-Brieg eo a zo e kont. Ar c'helenner-se, lesanvet *Cripure* gant e skolidi (abalamour da levr Kant, *la CRItique de la raison PUre*), en deus darbar gant amodedigezh ha strizhder spered an dud, ha reiñ a ra Guilloux deomp un daolenn gwall griz eus stuz Mab-den : evel en e romantoù all e tiskouez estrenvan an dud a rank stourm ouzh an direizhder, ar brezel, an digenvez, ouzh an droug a bep seurt a bouez warno, dreist-holl war an dud a renk izel, adalek ar vugaleaj betek ar gozhni. Gouverket ez eus bet un nested bennak etre Guilloux ha tud evel Malraux pe Céline, a-fet temoù ha stil. Ar skrivagner en em sante Guilloux an tostañ dezhañ a oa Albert Camus avat, hag an daou zen a oa mignoned vras. En em gavout a raent alies e Pariz, pa veze Guilloux eno : rannañ a rae ar skrivagner e amzer etre Pariz ha Sant-Brieg, ha lavaret en deus bet meur a wech ne soñje nemet en e gêr c'henidik pa veze e Pariz, hag ez hiraezhe da Bariz pa veze e Sant-Brieg... Sachet ha disachet e voe, e vuhez-pad, etre ar garantez a vage evit kêr Sant-Brieg, eus un tu, hag an diaes ma oa dezhañ bevañ enni. Feal eo chomet d'e gêr c'henidik avat, hag an darn vrasañ eus e levrioù a zo lec'hiet enni.

Gall' a reer lenn Louis Guilloux en hor yezh, rak daou levr bet skrivet gantañ a zo bet lakaet e brezhoneg : *Ti ar Bobl* a oa bet troet e brezhoneg ur pemzek vloaz bennak a zo, hag embannet gant *An Here*. Warlene e oa bet troet ul levr all, un danevell ar wech-mañ, ha ti-embann Goater en deus bet ar mennozh mat da embann al levr-se en ur

stumm divyezhek. *Daouzek boled aet d'ober ur sribilhon*
eo titl an danevell-se.

Lennadenn vat deoc'h neuze !

Louis-Marie Faudacq, maltouter ha livour (1840-1916)

Bez' e oa e Lezardrev, sa-troioù ar bloavezhioù 1870, ur burev maltouterezh. Ar c'hargiad a laboure er burev-se a oa Louis-Marie Faudacq e anv. A-raok bezañ bet anvet er porzh-se a Vro-Oueloù, e oa bet e Kankaven, un toullad mizioù-pad, ha goude Lezardrev, e vo kaset gant ar melestradur, da Landreger, lec'h ma chomo betek e retred, e 1900. Din da c'houzout e oa Faudacq un implijad skouerius : damantus e oa d'e zlead, seveniñ a rae e zeveioù, ha kas aketus e labour da benn. En tu-hont da se, ne oa na dispignour, na boesonier, na butuner. N'eo ket dre zegouezh eo e oa aet Faudacq da valtouter : e dad, bet sekretour ti-kêr war Enez-Vriad, en doa graet ar vicher-se ivez. Hogen Faudacq, panevet e oa livour ha tresour war e amzer vak, e vije chomet e anv da boultrenniñ e marilhoù bras diellaoueg ar maltouterezh, ha ne glaskjen ket, hiziv, sevel ur pennad-skrid diwar e benn goude bet o welet e daolennoù e mirdi Sant-Brieg. Ha c'hoazh, mard eo deuet e anv betek ennomp, a-drugarez da dud all an hini eo, rak ar maltouter-se, ur skouer a barfeded vicherel anezhañ, n'en deus ket teurvezet ober tra ebet evit kreskiñ e vrud vat ha treuzkas e anv d'ar rummadoù da zont.

Neb en dije gwelet anezhañ o vale e trowardroioù Landreger pe Lezardrev en dije soñjet : « Ata ! Sed amañ pimpatrom an arzour ! ». Sellit outañ, c’hwí ivez : un den mentet bras ; un dremm hegarat dindan ur mell tog erienet-ledan, ha daoulagad lemm en e benn dindan abrantoù fonnus, ken druz hag e vourroù ; war e gein ur c’hozh chupenn mezher du peñseliet ; bragoù voulouz tev, bodreoù o klozañ e zaou gof-gar, ha botoù lêr en e dreid ; bez’ ez eus gantañ ouzhpenn, a-dreuz-skoaz, ur voest prenn, enni e rikoù livañ ha tresañ, hag en e zorn dehoù ur pikol pezh bazh. Ar Sadorn eo, ur sadornvezh a viz Mae, peuzgoude tarzhan-deiz. Kuitaet en deus Faudacq Lezardrev gant ar c’hentañ skleurioù. Emañ bremañ damdost da Lanserv, hag a-ziwar ar c’hrav serzh e wel ar pleg-mor en e led, brav-eston dindan an oabl boull. En tu all, en ardraoñ d’ur c’hoad-pin distank, an Trev a lintr e zour glas dindan flouradenn vrokus an terennoù heol, etre toroù serzh an draoñienn goloet a vrug hag a valan. Labouret en deus Faudacq penn-da-penn gant ar sizhun, etre peder moger, en e vurev maltouterezh ha, ma ya evel-se, abredik-mat, ribin-diribin, e-unan-penn a-hed an hentoù distro, n’eo ket hepken da aveliñ e benn, evit tresañ ha livañ avat ne lavaran ket.

Bihanik-tra e oa bet plijet gant an arzoù, ha daoust ma n’eo ket bet er skolioù bras da zeskiñ ar vicher, tro en deus bet, koulskoude, da zaremprediñ amañ-ahont livourien vrudet pe vrudetoc’h : heuliet en deus kentelioù al livour Alfred-Charles Foulongne, ha levezonet eo bet gant ar strollad arzourien a laboure e Barbizon, ur gêriadenn damolodet war lez kornôg koad bras Fontainebleau, hag he deus gwelet o tiglorañ luskad ar ragimpresionourien.

An dud a oar diouzh istor al livouriezh a lavaro deoc'h e oa un nested arzel etrezañ hag al livour Boudin, un den hag a labouras kalz e Bro-Oueloù ivez. A c'hall bezañ. Ar pezh a zo anat avat eo n'eus ket anezhañ un arzour bourc'hiz, ha degas a ra soñj din eus tud evel an dougerlizhiri Cheval, a savas, e-unan-penn, e balez mil-anavezet, e Hauterives. Un heñvelded a zo ivez, e-keñver an doare bevañ, gant ur maltouter all, anvet Rousseau, a ziazezas luskad al liveañ eeunek.

Rousseau a voe anavezet e labour avat, endra ma vebas Faudacq ur vuhez kuzh. D'an oad a zaou-ugent vloaz e voe diskouezet e daolennoù, e Saloñs an Arzoù, e Pariz. Hogen Faudacq ne blije ket kalz dezhañ fougeoù ha safaroù ar bed. N'en deus ket darempredet ar varc'hadourien taolennoù, ha techet e oa da reiñ e oberennoù kentoc'h eget d'o gwerzhañ. Se zo kaoz ma chomas strewet e daolennoù, e engravadurioù hag e dresadennoù. An hini kentañ a gemeras preder gant e oberenn hag a glaskas brudañ e anv, a voe al livour Paul Signac, e-tro ar bloavezhioù 1930, da lavaret eo ur pemzek vloaz bennak goude marv Faudacq. Labouret en deus Faudacq gant a bep seurt teknikoù, ha ma oa ur mailh war ar gouach hag an dourlivadur, kenkoulz arzour e oa ivez war ar gwalc'hlivadur hag an engraverezh dre zour-kreñv. Pleustret en deus ivez ar c'hreion glaou en un doare dibar. Penn-da-benn gant e vuhez en deus gaoliatet an hentoù hag ar graeoù, ha livet en deus buhez an dud d'ar c'houlz-se, ha kement a yae d'ober o zrevell pemdeziek. Legadet en deus deomp taolennoù ha tresadennoù o tiskouez dremmvroioù an arvor hag ar vuhez er porzhioù-mor. Gant se e c'hellomp lavaret ez

eus gant e oberenn un dalvoudegezh tudoniel hag a ya dreist bevennoù an arz : oberenn Faudacq a zo un testeni feal eus doareoù ar vuhez hag eus boazioù an dud e Bro-Oueloù hag e Bro-Dreger, etre 1870 ha 1915.

Mervel a reas, d'an 31 a viz Mae 1916, en ti end-eeun en doa lakaet sevel e Plaeraneg, lec'h ma oa en em dennet e 1900, pa oa bet deuet ar c'houlz dezhañ da vevañ diwar e leve. Ur vuhez eeun, kuzh ha fur en doa bet, e servij an arz... hag ar maltouterezh !

Labour ouzh ar steudad

E levraoueg-kêr Sant-Brieg eo em boa graet anaou-degezh gantañ. Al levraoueg-se a zo enni, en estaj kentañ, ur gaer a sal-studi a c'hiz kozh a anavezit marteze. Lañsus eo d'al labour-spered gant he c'hoadaj koaret, he mogerioù goloet a levrioù kozh o c'heinadur leuegen, he sel kombodek hag he frenestroù uhel-uhel a c'haller gwelet drezo, pa saver an daoulagad, ar c'houmoul digabestr o redek en oabl frank. Bep Sadorn e veze-efñ eno, en e goazez, bepred en hevelep plas, etre div eur ha c'hwec'h eur, studius, aketus da skrivañ. Bez' e veze bep tro, dispak dirazañ, karnedoù bihan goloet o fajennoù gant ur skritur moan, hag evit doare ez adskrive ar skrabadennoù-yar-se en e urzhiataer hezoug. Sachet e oa bet va evezh gantañ abalamour d'un n'ouzon dare petra ennañ hag a ziskoueze, mesk-ha-mesk, dalc'husted, mennerezh ha skuizhder. Un den e-tro daou-ugent vloaz, dremmet rust, daoulagad lemm en e benn, doare dezhañ da vezañ yac'h ha kreñv, hogen anat warnañ en doa ranket stourm kalz. « Dremm un den hag a stourm c'hoazh, » a lavis ouzhin va-unan an dro gantañ din da welet anezhañ.

Sevel a reas kaoz ganimp en-dro d'an dasparzher kafe,

ur sadornvezh a viz Kerzu ma tabouline taer un dourbil war toenn ar gafetaria, ha tamm-ha-tamm e kontas din e zoare : e vugaleaj en un atant, damdost da Lannolon, ar bloavezhioù skolaj ha lise e Sant-Brieg. Da c'houde, dao d'ar studi e Roazhon, lec'h m'en doa tapet un D.U.T. war micherioù an treuzdougen. War-lerc'h en doa kavet labour e Pariz, hag eno e oa chomet e-pad un dek vloaz bennak. Dav da bep hini mont da-heul e vara, keta ? Savet en doa tiegezh du-hont, ha dibriedet a-benn seizh vloaz goude. Ur mab en doa, a oa o chom e Pariz gant e vamm. Deuet c'hoant gantañ distreiñ da Vreizh, en doa graet e soñj en em staliañ e Sant-Brieg, pa oa ar gêr-se an hini a anaveze ar gwellañ. Klasket en doa fred, ha kavet labour e Lambal, en ul labouradeg gounezvouederezh.

« Ul lazhti eo e gwirionez. Lazhet e vez moc'h, ar re a vez savet a-vilieroù – a-violonoù kentoc'h – e krevier-moc'h Aodoù-an-Arvor, ha treuzfurmet e vez ar c'hig ivez. Eizh eurvezh bemdez, adal pemp eur diouzh ar mintin betek un eur goude merenn, hep paouez nag ehan, em sav, ouzh ar steudad. Kantadoù a relegennoù moc'h, a-ispilh o zreid, o tibunañ dirazon. Va c'hefridi ? Dispenn ar relegennoù-se ar buanañ ar gwellañ, dibe-zhiañ ar moc'h... Atav an hevelep jestroù pa vezan o tiemprañ ar melloù, kement ha ken bihan m'em bez poan em arzorn dehoù noz-deiz bremañ, goude bloaz hanter hepken : droug ar stirennoù an hini eo. An darn vrasañ eus al labourerien du-hont a rank paouez gant al labour e-tro hanter-kant vloaz abalamour da se. Kengred ebet, a-hend-all, e-touesk ar vicherourien : pep hini a sach diouzh e du, par ma c'hall ! Hag ar flaer, ar safar ! Ha gwask ar vestricherourion ! Goude eizh eurvezh

en em santan evel mezevellet, badaouet, hag ur wech erru er gêr n'em bez mui ken c'hoant nemet kousket pe chom marvasennet dirak ur skramm bennak. D'an noz, pa hunvrean, eo relegennoù moc'h eo a welan... Hag ar gopr ! Gwall zister eo : ur wech paeet pep tra – feurm ar ranndi, ar frejoù war-dro an oto, an asurañs kenwarez, an tredan, ar c'hargoù a bep seurt –, ne chom ket kalz a dra ouzhpenn... Hag ur mab am eus war an dorzh, e Pariz, sikour e vamm eo a rankan... Me a zo a-du, krenn, gant paotred ha merc'hed o jilettennoù melen, daoust ma n'on ket bet o vanifestiñ ganto ! »

Ha dic'hortoz-kaer e kendalc'has evel-henn : « Setu perak e skrivan... Evit chom bev, kompren a rit ? Ne fell ket din en em anevalaat. Skrivañ a ran diwar-benn va buhez, diwar-benn al labour dreist-holl, klask a ran dezrevell penaos ez a an traoù en-dro, du-hont e Lambal, e-barzh uzinoù *ar C'hooperl*. Diouzh an abardaez, du-mañ, e-lec'h sellout ouzh an tele, en em redian da skrivañ, e sipan va spered da grouiñ... Ya, klask a ran krouiñ un dra bennak, dre ar skrid... Ne fell ket din ober an dilez eus va dinder. Ya, va doare da chom den an hini eo. Kompren a rit ac'hanon, kuita ? »

Ma komprenen ? Ya, hogen ouzhpenn kompren eo a raen : chom a raen en estlamm dirak stourm kalonek an den-se. Vad en doa graet din, gant e gomzoù. Ha daoust hag e c'hellan skrivañ amañ e santen ennon ivez, ouzh e glevet, un asez mezh o soñjal em buhez arouarek ?

Marcel Dirou, al livour kuzh

N'en doa mui, a-bell-amzer moarvat, na kar na par war an tamm douar-patatez-mañ, ha kloareg an noter 'ni eo a zigoras dor e ranndi, peuzgoude e varv, evit sevel ar renabl eus e vadoù. Ur ranndi bihan, tri fezh ennañ, e estaj kentañ un ti kozh, goursezet en ur ru sioul, e kreiz-kêr Lambal : ur gegin, ur sal-da-vevañ, hag ur gambrig. Anat e voe diouzhtu d'ar c'hloareg ha d'e skoazeller ne oa ket bet Marsel Dirou, an hini marv, un den a beadra, rak ne oa er ranndi nemet dibaot a arrebeuri. Pep tra a oa diginkl hag eeun hag an den en doa bevet, a-hervez, en emziouerez. Un emziouer bet choazet gantañ avat, rak ne oa ket bet paour-razh : kelenner e oa bet, e-pad pemp bloaz ha tregont, e lise ar gêr, ha, dre ma oa chomet dizimez ha divugel, n'en deveze ket re a gargoù. Frank e oa an traoù gantañ zoken, ha gallet en dije, hep mar ebet, bevañ gant muioc'h a aezamant.

Edomp neuze er bloaz 2009 ha Marcel Dirou a oa o paouez mervel, d'an oad a nav bloaz ha tri-ugent. Ganet e oa bet e Karanteg, ha, goude e studi e Roazhon – lizhiri klasel – e oa bet anvet e lise Henri Avril, e Lambal. Chomet e oa da ober e respet penn-da-benn el lise end-eeun e oa bet anvet ennañ d'an oad a bevar bloaz warn-ugent.

Evit ar skolidi e oa anezhañ “Aotrou Dirou”, hag ar gelennerien all a yae dezhañ dre “Marcel”, hepmuiken. Den ne ouie kalz a dra diwar e benn. Anavezet e oa er c’harter, ha dre ma oa anezhañ un den seven hag hegarat, e veze deuet mat gant an amezeien. Un aergelc’h a gevrin a blave un tamm bihan en-dro dezhañ koulskoude, abalamour d’e emzalc’h souezhus evit traoù a oa. Ne oa ket anezhañ un oristal, nann, met disheñvel e oa, e meur a geñver : an oto, da skouer. Biskoazh oto ebet n’en doa bet en e vuhez, daoust ma oa o chom en ur gêr vihan. Petra c’hoazh ? Ar fotoioù : biskoazh n’en devoa asantet bezañ luc’hskeudennet a-gevret gant e skolidi. N’anavezet diverr-amzer ebet dezhañ. Div pe deir gwech er bloaz, koulskoude, ez ae da Bariz, da welet un diskouezadeg verrbad bennak. Ne oa ket tavedek. An divizoù gantañ evelato a chome peurvuañ war dachennoù bevennet-strizh : al labour, ar politikerezh. Petra lavaret c’hoazh diwar e benn ? Rebechet e oa bet dezhañ gant ensellerien an Deskadurezh-Stad pellaat re, a-wechoù, diouzh ar programmoù ofisiel. Padal ne oa ket bet lakaet diaes gant se : un dec’halv d’an urzh ha mat pell zo. Tud zo a rae “ar c’how-boy” anezhañ abalamour ma veze gwisket atav er memes mod : ur roched karezenet, ur chupenn jean, bragoù jean, hag ur re santiag. Atav ar memes dilhad, hañv-c’hoañv.

Ar c’hloareg hag e skoazeller, graet ganto renabl hollek ar rann diester, a yeas c’hoazh war-zu al laborenn e lost ar porzh. Digoret ganto an nor, e chomjont sabatuet-naet : al loch-se e oa ennañ lienoù, lienoù diouzh an druilh, ha n’eo ket kantadoù anezho eo a gontjont, miliadoù avat ne lavaran ket : 2500 lien, sinet MD ! Ar c’helenner

sioul ha didrouz, an hini a rae skol e-pad an deiz, en doa livet, e vuhez-pad, a-fet-noz hag e-kuzh d'an holl. O klevet ar c'heloù, ar re o devoa "anavezet" anezhañ a chomas sebezet d'o zro, rak gwech ebet n'en doa Marcel rannet grik da zen a-zivout e labour livour. Souezhet e voe an dud ivez abalamour ma n'en doa ket klasket sevel diskouezadegoù (peadra a vije bet d'en ober). Ma ! Evel-se emañ, koulskoude : bez' ez eus arzourien techet da fougeal diwar-benn o labour, tud na c'hwitont morse da vrabañsal – evit nebeut a dra alies : « lorc'hig moan, muioc'h a voged eget a dan » ! Marcel Dirou, eñ, ne oa ket bet falvezet dezhañ diskouez tra ebet. Perak e live, a c'houlennno lod ? Gwall ziaes degas ur respont bennak. Marteze e oa un doare evitañ da vevañ muioc'h, pe da virout ha da greñvaat ur meni kempouez. Tuet on da soñjal e oa anezhañ un den dieub, a c'halle mat-tre bevañ hep melezeurezh e nesañ.

Prenet eo bet e liennoù gant un dastumer, diskouezet e vezont ingal bremañ, hag a-barzh nemeur ac'hann e vint anavezet mat e meteier an arz, hep mar ebet. Bep gwech ma vez aozet un diskouezadeg e tired ur mor a dud da welet labour al livour kuzh. An taolennnoù-se eo diaes komz diwar o fenn, hogen kavout a raer enno lusk-dilusk un ene, heklev ur spered frank hag ur galon oc'h en em glask. Ha bep tro m'o gwelan e teu soñj din en-dro eus ar c'hrennlavar kozh : *An hini en em fougas e-unan ne dalv' na gour nag unan...*

1706 e porzh al Lege: Marie Balavenne hag ar Seurezed Gwenn

Bez' ez eus, e porzh al Lege, damdost d'an iliz, e korn an div straed strizh a grap ouzh tor an dosenn, hag a zo, e gwirionez, kreizenn ha kalon ar gêriadenn gozh, un ti framm koad toennet izel hag a zo danvez ur sell ennañ. Ma rankfen reiñ un ali d'ar baleer arouarek troet war studi an istor ha pitilh gant ar vein kozh, e lavarfen dezhañ, sur-mat, ober un distro, pellaat un tamm bihan diouzh ar c'haeoù, ha mont da welet an ti korbelloù-se, dezhañ prenestroù bihan-bihan a bep tu d'ur skalier diavaez manek-holl. Savet e oa bet, ma ranker teurel kred war an deiziad a weler engravet a-us d'an nor vihan bolzet a c'hiz kozh, er bloavezh 1675, da vare emsavadeg ar Bonedoù Ruz, pa oa Loeiz XIV o ren war Vro-C'hall. Ma ! An amzer a zo aet hebiou, bloavezhioù ha kantvedoù a zo nijet kuit, a-sil-kaer, ar Roue Heol a zo marvet e derennoù pell zo, hag aet e relegoù ken pell all da boultrenn a-benn bremañ. An ti bihan-se avat a zo chomet distrafuill en e sav, digas ouzh tagadennoù didruez ha ganas an amzer ha, mard eo techet da gosteziñ un disterañ, fesonet-brav eo bepred, ha « gouest da badout c'hoazh e-pad un toullad mat a gantvedoù », hervez Klaod, ar perc'henn, evit brasañ dudi an danvez istorourien da zont.

Ma ran kement a stad eus an ti kozh-se, n'eo ket hepken abalamour m'eo livek dreist, dre ma c'hoarvezas ennañ un darvoud istorel hag a zo arouezek eus istor ar vro, ne lavaran ket. Emaomp er bloavezh 1706. Ar porzh, d'ar c'houlz-se, a zo disheñvel diouzh ar pezh ez eo bremañ : ar Goued n'eo ket bet c'hoazh eeunaet e naoz tro-didro gant ur savenn douar hag ur voger vañsonet. N'eus na kaeoù maen na skluzioù, hag ar bagoù a rank chom war ar sec'h da vare an tre. War an engravadurioù kozh e weler frikerien-kranked bihan hag un toullad bagoù-pesketa astennet war al lec'hid e-tal ur renkennad tiez : ur skolaj dister evel ma oa kalz anezho en arvor d'ar c'houlz-se. Ur boblañs oberiant a vev en-dro d'ar porzh bihan-se : pesketaerien, martoloded, labourerien, marc'hadourien, artizaned ha koñversanted. Oberiant, ya, hogen paour-ran, evit an darn vrasañ anezho : war-bouez daou pe dri ziegezh paramantourien hag un dornadig koñversanted ez eo tavantek an dud, hag annezidi al Lege a vev en un dienez hag a lakfe ar c'halonoù kaletañ da deneraat.

En ti kozh emamp o paouez ober anv anezhañ, ez eus ur vaouez yaouank o chom, Marie Balavenne hec'h anv. Ur galon dener a blac'h eo, ha, mard eo devot-meurbet, speredek eo ivez, ha youlet-kreñv war ar memes tro. Rannañ a ra he c'halon o welet ar vugale diskol lezet en o-unan etre daou benn an deiz, ar reuzeudien bec'hiet gant un druegezh diharak oc'h astenn an dorn, ar glañvourien o toc'horaat hep sikour na skoazell ebet... Asambles gant ur vignonez dezhi en em laka da zegemer en he zi bugale ar porzh, ha, digoust, e ra skol dezho : ret eo, d'an nebeutañ, deskiñ dezho lenn, skrivañ, ha kontañ. Mont a ra ivez da gestal, a di da di, hag an arc'hant bet

evel-se digant ar re binvidik a vez ingalet goude e-touesk ar geizh hag an dreued. Pa gav dezhi e ranker ivez soursial ouzh ar re glañv, ez a daveto – n’eus d’ar c’houlz-se, anat deoc’h, mezeg ebet evit ar beorien du – evit o frealziñ ha, pa vez ret, kennerzhiñ anezho war o zremenvar. Tamm-ha-tamm ez a maouezed all daveti : div e oant er penn-kentañ, dek, ugent, tregont int a-benn daou vloaz. Hiziv e rafer eus al lusk-se un “aozadur karitezel”. En XVIII^{vet} kantved avat ez eo hollbouezus ar relijion, hag ur beleg eus Plerin, an aotrou Leuduger e anv, a ali dezhi krouiñ un urzh relijiel nevez, a vezo e gefridi hag e c’halvedigezh sikour ar re baour. Asantiñ a ra Marie, ha, nebeut amzer war-lerc’h, setu savet Urzh Merc’hed ar Spered Santel, a vezo muioc’h anavezet e Breizh dindan an anv a Seurezed Gwenn.

Ken bras eo an ezhommoù ken e ra berzh an urzh nevez-se diouzhtu : kalz merc’hed yaouank en em ouestl evel-se da servijañ ar re baour, ha gwelet e vez, e pep parrez, skolioù o vleuniañ. Alies, pa vez skoet ar vro gant ur reuz bennak – kleñvedoù-red ar vrec’h pe ar c’holera, pe c’hoazh ar gernez vras – ez eo an aozadurioù ofisiel eo a c’halv ar seurezed war-dro ar glañvourien hag ar beorien : ne oa ket eus ar stad warediat³ c’hoazh d’ar c’houlz-se. An urzh en em ledet kalz en XIX^{vet} kantved, betek en Afrika pe en Amerika ar Su. Bez’ ez eus c’hoazh un toulladig leanezed kozh o chom amañ el Lege, rak fellout a ra d’an urzh e vefe seurezed el lec’h end-eeun ma tiwanas an aozadur, tri-c’hant vloaz a zo. Thérèse a zo unan anezho. Kozh eo, hogen serzh c’hoazh evit he

3 Stad warediat : État providence.

dek vloaz ha pevar-ugent, ha bemdez e ra, meur a wech, tro al lenn-borzh, d'ar piltrotig. Ha gallout a ran skrivañ amañ, hep dispenn he brud, e vourr-hi ivez oc'h evañ, e-tro pemp eur, he banne kafe e ostaleri *an Oriaved* ? Ya, rak evel m'he deus lavaret din ur wech ma oa aet ar gaoz etrezomp war ar c'hraf-se : « Kavout mat ar c'hafe, ha daremprediñ an ostalerioù, se n'eo ket pec'hed marvel eo, Herve ! ».

Louis Massignon ha pardon ar Seizh Sant er C'houerc'had

A-walc'h eo, dre amañ, distreiñ un disterañ diouzh an hentoù bras evit en em gavout e lec'hioù dudio. Pa valeer da skouer eus Sant-Brieg da Vinig, war hent ar valtouterien, ec'h en em gaver gant traezhenn bras divent ar Rozer. Un nebeud goude treuziñ an draezhenn-se, setu ur wenodenn serzh o krapañ gant an tornaod. Tre el laez, an arvest a denn gantañ pep preder gant ar c'haer ma 'z eo : dispak dirak ho taoulagad, setu bae Sant-Brieg en e gaerañ, eus ar C'hab-Frehel, er reter, tre betek Enez-Vriad, er gwalarn. Kent erruout e Binig e ranker c'hoazh treuziñ ur saonenn dudio-meurbet da welet. Ouzh tor ar saonenn-se, setu ur feunteun gozh beget gant ur groaz keltiek. Mard eo kozh-kenañ ar feunteun, ar groaz a zo nevez a-walc'h : kizellet e oa bet, e-tro ar bloavezhioù 1940, gant un den hag a zo anavezet mat e anv e Porzhig. An den-se e veze graet Louis Massignon anezhañ.

Louis Massignon a oa bet ganet e 1883 e rannvro Pariz. Marvet eo e 1962 e Porzhig, ha bez' e c'heller gwelet e vaen-bez e bered ar barrez-se. Louis Massignon a oa un den desket-meurbet. Anavezout a rae mat-tre Bro-Varoko hag holl vroioù ar Reter-Nesañ hag ar Reter-Kreiz, ha graet en

doa un dezenn Skol-veur gouestlet d'ar mestr soufi Mansur Al-Hallaj, a vevas e Bagdad en X^{vet} kantved. Desket en doa an arabeg pobl, an arabeg lennegel hag an turkeg, ha levezonet don e oa bet, en e yaouankiz, gant tri den : ar skrivagner gall Huysmans, an egiptour meur Gaston Maspero, hag an tad Charles de Foucault. Gant hemañ diwezhañ e voe e darempred dre lizher tre betek marv ar beleg penitiour. Brudet e oa dre e zeskadurezh hag e anaoudegezh eus an Islam, ha kelenner e voe e Skolaj Bro-C'hall hag e Skol Bleustrek ar Studioù Uhel (EPHH). Ur c'hristen gredus a oa anezhañ ivez. E vuhez-pad e voe prederiet gant penaos kreñvaat al liammoù etre an Islam hag ar Gristeniezh, penaos magañ ha diorren ur c'hendiviz peoc'hus ha frouezhus etre ar sevenadurioù hag ar relijionoù.

A-bell a oa e oa bet Massignon o studiañ kement a oa boutin etre an Islam hag ar Gristeniezh, ha studiet pizh en doa mojenn ar seizh kousker a Efez, a gaver ken er C'horan (souratenn 18), ken er mojennerezh kristen. Petra a vez kontet a-zivout ar seizh kousker ? Sed, e berr gomzoù, danvez ar vojenn : seizh den yaouank o dije kavet repu en ur c'hev, en ul lec'h distro-meurbet, war an amboaz tec'hout rak an heskinerezh ha ren ur vuhez santel. Eno e vijent manet kousket ha ne vijen dihunet, dre vurzhud, nemet tri c'hant vloaz goude.

Re Vassignon o devoa un ti e Porzhig, ha Louis a anaveze Breizh mat a-walc'h. Klevet en doa anv eus chapel ar Seizh Sant, er C'houerc'had, ha tro en doa bet da lenn un droidigezh bennak eus ar werz kozh a vez kontet enni mojenn ar seizh kousker. Sed amañ, kement ha kaout un tañva, un arroud eus ar werz :

*Er gêr eus a Ephese e oua neuse seiz breur
En amzer ma oua e Rom Ducius ampereür
Seiz bugel a galite hag a gondision
Remplisset a bep vertuz hag a berfection*

Neuze, evel tud all en e raok, e reas Massignon al liamm etre azeulerezh ar seizh sant er C'houerc'had – a oa, e gwirionez, ar seizh sant diazezer eus eskoptioù Breizh – hag ar vojenn eus ar gêr a Efez : droukvesket e oa bet, e gwirionez, gant an amzer, ar mammennoù hag an daveoù istorel. Setu dre benaos e tideñvas en e spered ar soñj da aozañ, er C'houerc'had, ur pardon a vije bodet ennañ Muzulmaned ha Kristenien. Ar pardon kentañ a voe dalc'het e 1954, hag abaoe ez eus anezhañ bep bloaz.

Nevez zo ez eus deuet er-maez ur romant polis, gant Yann Bijer, awenet gant ar pardon-se. Titl al levr ? *Diougan ar seizh sant*. Un digarez, evit Yann lenner, da ober gwelloc'h anaoudegezh, war un ton skañv, gant mojenn ar seizh sant !

Mathurin Méheut, livour Lambal (1882-1958)

E-kreiz ar gwashañ reuzioù en em gav atav arzourien e-tailh da grouiñ, kousto pe gousto, ha neb a vije bet war an talbenn e 1915, oc'h heuliañ, e kreizig-kreiz an druilh hag an drailh, an 71^{vet} rejimant a droadegezh, eus Sant-Brieg, a vije bet sachet e evezh, marteze, gant un isofisour yaouank, bliv ha gwevn evel ur c'hazh-koad, un den mentet-izel, dezhañ selloù lemm a-dreñv lunedoù bihan o stern houarn. Ar pezh a remerked ennañ dreist pep tra a oa kement-mañ : kerkent ha tavet kanoliadeg pe fuzuilhadeg, d'an disterañ sav-kein, e tenne eus e sac'h paper ha kreionoù liv, hag e stage da dresañ kement a wele en-dro dezhañ. Pa veze kaset e rejimant d'an adreñv evit ur prantadig diskuizh, etre ar c'hrogoù, eo livañ eo a rae neuze. Deuet eo e dresadennoù hag e livadennoù brezel betek ennomp, ha diskouezet e oant bet, un toullad bloavezhioù zo en ur mirdi, e Lambal, a-gevret gant taolennoù bet livet, er memes mare, gant un arzour alaman, Otto Dix e anv. Gwall fromus e oa, e gwirionez, gwelet evel-se, kant vloaz war-lerc'h, oberennoù an daou enebour a wechall lakaet en ur geñver ouzh mogerioù ar mirdi bihan-se, hag anat warno an hevelep euzh ouzh ar brezel. An isofisour am eus graet anv anezhañ a oa

Mathurin Méheut e anv, hag aesoc'h e voe evitañ dibenn ar brezel, pa voe kaset e 1916 da servij kartenniñ ha topografiañ Strollad uhel an ofiserien, lec'h ma c'hellas lakaat e varregezhioù arzel da dalvezout, dizañjer a-walc'h, war dachenn an tresañ hag ar reizhañ kartennoù.

Ar Mathurin Méheut-se a oa bet ganet e Lambal e 1882, hag abred-tre en doa diskouezet bezañ barrek-tre war an tresañ. E dud, artizaned vihan e Lambal, a gasas anezhañ da Skol Rannvroel an Arzoù-kaer, e Roazhon. Eno e studias betek 1902. E gentañ oberennoù bras a savas, etre 1910 ha 1912 e Rosko, lec'h ma labouras evit ar *Savlec'h Biologel*. E-kerzh an daou vloaz-se e savas 450 plankenn o tiskouez, betek er munudoù bihanañ, al loened-mor hag ar struzh arvorek. Degemeret mat e voe e labour e meteier an arz, ha roet e voe ur yalc'had dezhañ da vont da beurzeskiñ ar vicher livour ha tresour e Bro-Japan. Eno e voe kadarnaet en e zibaboù arzel ha teknikel : penaos reiñ da welet ar pep pouezusañ gant nebeut a dra, pe c'hoazh penaos ober gant teknik an apladennoù, peseurt splet a c'haller tennañ eus an diouer a skeudoù en taolennoù, penaos mestroniañ al livañ war ar prim... Edo c'hoazh er vro-se pa darzhas ar brezel. Pa voe disoudardet, e 1919, ez en em dennas un toullad mizioù-pad er Vro-Vigoudenn, dezhañ da zistrafuilhañ diouzh euzh ar Brezel Bras, ha, adkavet gantañ nerzh ha startijenn, ec'h en em roas adarre d'al labour.

Rak Méheut a voe, penn-da-benn gant e vuhez, ul labourer difaezhus, ha krouet en deus war dachennoù arzel a bep seurt : skeudennaouet en deus bet nouspet levr : romantoù Maurice Genevoix, Colette, Roger Vercel,

Pierre Loti. Kenlabouret en deus ivez, bloavezhioù-pad, gant kelaouennoù evel *Art et Décoration*, pe *La Bretagne touristique*, a veze tennet miliadoù a skouerennoù anezho bep miz etre an daou vrezel. Koulz all e labouras evit feilhañserezh Henriot, eus Kemper. E-tro ar memes mare e livas kalz ivez diwar urzhiad evit kompagnunezhioù treuzatlantel, ha kalz mordreizherien bras a voe kinklet gantañ. E labour war-dro ar mordreizherien a zegasas brud dezhañ, hag a zigoras dorioù nevez d’e awen : anavezet mat eo e ginkladurioù evit an embregerezh Heinz, e Pittsburg, er Stadoù-Unanet, pe ivez evit Ensavadur ar studioù uhel war ar c’heologiezh e Roazhon.

Hogen, ma voe anavezet betek en Amerika, e Breizh eo dreist-holl e klaskas, e vuhez-pad, nevesaat e awen ha, daoust ma oa Breizhuhelad ez eo e Kerne eo e tremene an hañv, peurvuiañ. N’it ket da grediñ avat e tiskuiজে ! Tennañ a rae ampled eus e chomadennnoù e Kerne evit tresañ ha livañ kement a wele en-dro dezhañ, hag en e oberenn ez eo ur pennad a-bezh eus hon istor eo ez adkavomp. Er bloavezhioù-se ne oa ket bet c’hoazh peurgemmet nag eilpennet ar vro gant roulouer an arnevesaat, hogen Méheut, anat dezhañ edo ar sevenadur kouer kozh war-nes mont da goll, a lakaas e striv da zastum, en e dresadennoù hag e daolennoù, ar besketaerien hag ar vezhinaerien war o labour, an artizaned gant o binvioù hag o zeknikoù, al labourerien-douar en o atantoù hag en o farkeier. Evel un tudoniour e ro deomp, dre e oberenn, un deskrivañ klok eus modoù bevañ Breizhizeliz a-ziwar ar maez etre an daou vrezel. Redek a reas ivez ar pardonioù bras – ar Folgoad, Lokorn, Santez Anna-ar-Palud – evit tresañ ar gwiskamantoù hengounel a yae dija war rouesaat

e-touesk an dud. Evelato estreget an tremened a zechasas anezhañ, ha, da guzh-heol e vuhez e lakaas e stumm gant ar porzhioù-mor bras, gant o chanterioù modern : Douarnenez, Kameled, Konkerne. Gant an diwezhañ levr bet skeudennaouet gantañ, diwar-benn an Naoned, ez eo anat an deur a ziskoueze ouzh ar modernelezh.

Ur mirdi en deus war e anv en e gêr c'henidik, ha bep bloaz e vez aozet ennañ un diskouezadeg nevez, unan disheñvel bep tro. Ar bloaz-mañ e vez dalc'het ennañ un diskouezadeg gouestlet da labour Méheut war-dro struzh ar c'hoadeier, hag adkavet em eus, o welet al liennoù hag an tresadennoù-se, hud un arzour a ouie meskañ en e oberenn realouriezh an arseller aketus ha pervezh, ha soutilded ha kizidigezh ar barzh awenet kaer.

Brud va zad, pe : penaos e teuis da vezañ reder war varc’h-houarn

Sachet e oa bet va evezh, n’eus ket pell zo, gant ur pennad-skrid bet embannet e pajennoù an *Télégramme*. Gouestlet e oa ar pennad-skrid-se d’ur Montroulezad, ur Guy Jaouen bennak, bet kaset da benn gantañ ur gwir labour manac’h. Klevit kentoc’h : troet en deus e galleg ur mell levr, ur meni holloueziadur, ma vez displeget ennañ orin, emdroadur istorel ha reolennoù ouzhpenn 3000 c’hoari pe sport hengounel eus ar bed a-bezh. Al levr-se a oa bet savet gant ar Polonad Walcieh Lipanski, diwar atiz an UNESCO, da-geñver ur c’houlzad brudañ ar sportoù hengounel.

Ne ’m eus ket lennet al levr, ha, gant se, n’oufen ket lavaret deoc’h hag anv a zo ennañ eus ar vell-droad. Ha gwall zipitet an tamm ac’hanon, rak karout a rafen a-walc’h gouzout hiroc’h diwar-benn istor ar sport-se e Breizh. Sed amañ avat kement em eus gallet pennaouiñ amañ-ahont war ar c’hraf-se : ar Saozon eo o deus degaset ar vell-droad en hor bro, ha savet e oa bet ar skipailhoù kentañ e-tro ar bloavezhioù 1900 e korn-bro Dinarzh, lec’h ma veve un drevadennad Saozon binvidik. N’it ket da grediñ avat e oa ar vell-droad, d’ar c’houlz-se, ur

sport poblek : ar c’hontrol kaer an hini eo ! Ar skipailhoù mell-droad ne oa enno, er bloavezhiennoù kentañ, nemet pennoù-uhel, pitaoded, mondianed. An dud vunut, ar bobl voutin, d’ar c’houlz-se, a chome pell diouzh an tachennoù sport, ha gant se n’eus ket da vezañ souezhet m’en em astennas ar vell-droad da gentañ dre ar skolioù-meur hag al liseoù, en ur mare ma ne veze darempredet an ensavadurioù-se nemet gant ar vourc’hizien. Menegiñ a c’haller amañ, kement ha reiñ skouerioù, ar *Stade Rennais Université Club*, pe ar *Stade Quimperoïs* (stag hemañ, en deroù, ouzh al lise publik), a-raok ar Brezel Bed Kentañ.

Ar vell-droad e vije bet aesaet he lañs, hervez kont, ha broudet he argerzh demokratekaat etre an daou vrezel dre an enebiezh kreñv, e Breizh, etre patronajoù katolik ar parrezioù, diouzh un tu, hag ar meteier republikan ha lik, diouzh an tu all, pep kostezenn o klask sachañ ar yaouankizoù d’he heul gant un intampi bepred gredusoc’h. Ar Stad ne emellas eus ar sport-se nemet da vare an *Talbenn pobl*, a lakaas da dalvezout, adal 1936 ur politikerezh diorren sportel ha desevadurel, a voe kendalc’het gant Vichy e-pad ar brezel. Hogen d’ar c’houlz-se e oa endev ar vell-droad, mui pe vui, ar sport poblek a anavezomp hiziv. Souezhus eo pegen buan e oa en em astennet ar sport-se e Breizh !

Ma pledan er pennad-skrid-mañ gant ar vell-droad, ez eo abalamour m’on “kouezhet e-barz” pa oan bihan : va zad Guy Gouedard a oa askeller kleiz e skipailh Ploheg er bloavezhioù 1960, ha va eontr Izaac, e vreur, a oa askeller dehoù en hevelep skipailh. Gwall c’hoarierien e oant o-daou, aes war o zachoù, ha dezho un divhar ouesk, ha

gouest e oa an daou vreur da deurel ar spouron e kalon diwaller palioù ar skipailh enep, n'eus forzh pegen barrek e vije bet hennezh a-hend-all. An adregerien a grene p'o gwelent o kas un argadeg pell eus an a-dreñv, o tribblañ gant un aestad abafus, o sankañ ur pennad tizh ken aes ha tra en ur ober al lu gant an difennerien, oc'h ober kilgasadennoù souezhus p'en gortozed an nebeutañ, hag o skeiñ tennoù sabataus ne oa dizarbenn ebet outo. Ral an dro m'o deus manket digarez da verkañ ! Kement ha ken bihan m'en em astenne brud an daou vreur, d'ar c'houlz-se, betek pell en tu-hont da harzoù ar c'hanton ! (evit brasañ mad, anat deoc'h, stal-ispisiri va zad...)

Ha setu perak, moarvat, n'on ket deuet da vezañ ran gant ar vell-droad : ne gleven anv, ouzh taol, er gêr, er skol, er bourk ha war ar maez, e kement degouezh a oa, nemet eus ar sport-se, ken ez on deuet buan da heugañ outañ... Ha pa rankis, da'm zro, erru da grennard, choaz ur sport, ez eo ar marc'h-houarn eo a zibabis, marteze a-walc'h evit enebiñ gwelloc'h hag efedusoc'h ouzh va zad, evit hegaziñ anezhañ, tra ken... Krennard e oan, petra 'fell deoc'h !

Morueta

Bro-Oueloù a zo bet merket don hec'h istor gant ar morueta, ha komz a reer a-walc'h, dre amañ, etre Plerin ha Pempoull, eus Paotred an Douar-Nevez hag eus an Islandiz, gant ur sell folkloriel hepken, siwazh, hag hep mont morse e don ar gudenn. Va mignon André Guego, eus Plerin, a zo troet-kenañ gant an istor, ha graet en deus enklaskoù pizh, e servij Dielloù ar Verdeadurezh, e Brest, diwar-benn ar prantad-se eus hon istor, ma vevas tud ar vro-mañ diwar besketaerezh ar moru. Kavet en deus roud evel-se, war marilhoù an enskriverezh-mor, eus e hendadoù bet en Douar-Nevez da gentañ, hag en Island da c'houde. Ha selaouit mat : evit tri anezho en deus kavet ar meneg *kollet er mor*.

Lezel a ran ar gaoz gant André :

« Ambarkiñ a raed d'an oad a zaouzek vloaz, evel mous. Ha dao d'ar mor, evit ar pep fallañ-gwellañ. Ar c'houlzad a bade pemp miz. Kalet e oa an aozioù labour, met an dud a gave gwelloc'h drailhañ o c'horf war bourzh goueletinier an Douar-Nevez, kentoc'h eget chom er vro, bec'hiet gant an dienez : ar vartoloded, n'eus forzh pegen dister e oa o gopr, a c'houneze muioc'h eget ar gouerien, al labourerien hag an artizaned a chome er gêr.

War an douar-bras e oa kalet ar vuhez ha dister ar yalc'h, ha dav e oa tennañ ur gwennege bennak eus tu pe du. Hag ar goueleter-se, ken mistr ha ken brav da welet pa zañsent war ur mor seiz, en hañv, a oa e gwirionez diskoñfortus ha kleñvedus-meurbet : ar vartoloded a ranke rannañ o fledoù etrezo ; bevañ a raent mesk-ha-mesk ha bern-war-vern, atav er glebor, er yenienn, gant prantadoù kousk berr-berr, ur spont... Ret e oa kiañ ha kiañ c'hoazh hag adarre dindan ar seizh amzer : erc'h, kazarc'h, latar gleb ha yen, avelioù put o sklasañ an izili, prantadoù labour hirbadus... N'eo ket souezh ma vezent taget gant a bep seurt kleñvedoù : ar veskoul er bizied pe en treid, ar skorbud, drougoù an daoulagad, kleñvedoù ar skevent, remm, artroz, ha me 'oar-me... Ha medisin ebet war vourzh. Hag un dra c'hoazh : an aozioù bevañ war bankeier an Douar-Nevez hag an Island a oa ken kalet ken ne vije ket bet gouest ar vartoloded da c'houzañv anezho, nemet an hini-kreñv o vadaouiñ o fenn. Ar feur mervel a oa uhel-tre, abalamour d'ar c'hleñvedoù pe d'ar gwallzarvoudoù. Ar re a chome bev en desped da bep tra a goshae buan, ha d'an oad a zaou-ugent vloaz e oant kozhidi, taget gant a bep seurt kleñvedoù, ha kollet aliesmat gant ar boeson...

« Eürus c'hoazh ar re a deue en-dro. Bet on e Ploueg-ar-Mor, meur a wech, o welet moger ar vartoloded kollet er mor, e bered ar barrez. Un nebeud sifroù ? Sed : etre 1905 ha 1914 ez eus bet 32 oueleter o vont d'ar strad. War ur prantad eus 83 bloaz e konter ouzhpenn 2000 den kollet er mor, da lavaret eo, well-wazh, un ekipaj bep bloaz. Ar bloavezh spontusañ a voe 1903, ma kollas 89 den o buhez. An darn vrasañ anezho a oa tud eus Ploueg-ar-Mor, Keriti ha Plaeranege...

« Da biv an tamall ? N'eo ket d'ar baramantourien, a dra-sur, rak hini ebet eus an aotrouien-se, gouezet mat eo, ne c'hell bezañ lakaet kiriek eus dienez ar besketerien, a bourveze o familho diwar o gopr. Sed da nebeutañ ar pezh a zifenn diskennidi ar baramantourien. An istorourien avat a lavaro deoc'h e oa korvoerezh, tra muioc'h, hag e tenne ar baramantourien gounid eus dienez an dud diwar o c'houst... »

Soñjal a ran alies e kement a lavaras din André Guego, an deiz-se. Ha bremañ, pa 'z an da zigeriñ beg dirak tiez lorc'hus ar baramantourien, el Lege, e Binig pe e Pempoull, n'on ket gouest da chom hep soñjal e poan kantvloaziek ar geizh, dalc'het gant chal ar bara, ha kenlodeien holl dirak ar vuhez hag ar marv, ma voe savet an tiez-se diwar o c'houst...

Gwezenn ar morvrini

Bevañ en ur porzh-mor birvidik evel Al Lege a zo koulz ha kaout bemdez dirak an daoulagad un arvest dudies ha kemm-digemm. Dre c'halloud an arvest digoust-se e c'heller dioueriñ ken aes ha tra kement diverr-amzer a zo : netra kaeroc'h d'un arouareg eget bale war ar c'haeoù pe sellet dre ar prenestr ouzh monedoneoù ar bagoù hag an dud, ouzh nij al laboused-mor, ouzh beaj didrouz ar c'houmoul, broudet, atav, gant ar c'hoant da vont pelloc'h. Kaeoù al lenn-borzh a ya eeun evel un tenn, war-gaout ar biz, en tu-hont d'ar skluzioù. Tremen a reont e-harz krec'henn Roc'han hep ober van. War lein ar grec'henn-se e welan, dre va frenestr, ar c'haer a genkiz a voe lakaet sevel, ouzhpenn kant vloaz a zo, gant ur paramantour pinvidik a felle dezhañ, emezer, evezhiañ e vatimantoù, izelloc'h, er porzh, diwar toull dor e di, hep fiñval pav. War ar c'hartennoù-post kozh e weler ez eo moal tor ar grec'henn. Ar paramantour en deus lakaet plantañ gwez, ar pezh a zo atav ur mennozh mat, gwellañ doare, hep mar ebet, da dostaat d'an divarvelezh.

Ar gwez o deus graet berzh, keuneudet-kaer eo ar grec'henn bremañ, hag e-touesk ar gwez-se – lod anezho o vezañ spesadoù rouez – ez eus unan hag a zo anavezet

mat gant tud ar porzh abalamour ma ro bod, bemdez-Doue, d'ar morvrini. N'ouzon ket perak o deus dibabet ar wezenn-se kentoc'h eget unan all. Ar pezh a ouzon avat eo ez eo erru kromm ha dizeil skourroù uhelañ ar wezenn dindan bec'h an itronezed balc'h-se. O gwelet a reer, bemdez, abred diouzh ar mintin, pe adalek peder eur diouzh an endervezh, pa vezont o tiskuizhañ, o sec'hañ o fluñv hag o tiazezañ o boued etre o zroiadoù pesketa en donvor. Sellit outo, pintet-uhel, kludet en ur gichen, o eskell du ganto dispak-bras. Gouest int da chom difiñv evel-se, eurvezhioù-pad, diseblant ouzh birvilh ha mesk ar porzh tregont metr dindano. Ma rankfen dibab ur skeud-ardamez evit ar porzh, ur vorvran hieratek o sec'hañ he fluñv an hini e vefe, a dra sur.

Arabat deoc'h krediñ, diwar gement-se, e vezont difiñv atav : ret mat eo dezho mont da glask o boued. O gwelet a ran, bep mintin, o kemer o nij : ur c'haer a arvest 'ni eo, gwelet anezho o sevel a-rez an dour, a vagadoù, hag a daolioù eskell prim, kreñv ha nerzhus, dirak skramm an tornaod hag an heol o sevel. Emaint o vont da nijal evel-se trema an donvor. Ken dudius all eo gwelet anezho o splujañ, re bar da vannadelloù a vije bet jedet o hent hag o zizh gant ur gwall spيدر. Ha gwazh a-se d'ar pesk en em gavo da bal o splujadenn : lonket e vo, buan, ken aes ha tra, ha kenavo ar bed-all... Rak ar morvrini a zo splujerezed ha neuierazed dispar, gouest da neuial pell dindan an dour.

Pa vezan er porzh e-tro peder eur goude lein e c'hedan anezho war o distro da vezañ bet o pesketa. Meur a gildro a reont en-dro d'o gwezenn vuiañ-karet a-barzh kludañ.

Alies-mat e c'hoarvez ganin kejañ gant Malou. Serzh eo c'hoazh war he c'hilhorou, en desped d'he fevar-ugent vloaz, ha bemdez e tiskenn war droad eus kreiz-kêr Sant-Brieg, lec'h m'emañ o chom en un tammig ranndi, ha dao d'ar porzh da welet he “mignonezed” ar morvrini, un emgav ne c'hwitfe Malou warnañ evit mad ebet.

— Gouzout a rit diouzh al laboused-mor, Malou...

— Feiz, va albac'henn 'ni eo.

— Ha petra a soñjit eus ar morvrini ?

— Bez' ez eus un dra a garfen gouzout.

— Petra eo ?

— Me a garfe gouzout petra a soñjont pa chomont difiñv evel-se.

Chomet on berr da respont dezhi...

Ostaleri ar c'hroashent

1969. Ur toullad tiez en ur c'hroashent, tu bennak er maezioù tost d'ur porzh-mor a Vro-Oueloù. An ti brasañ ho salud a-bell gant e zaou estaj hag e doenn maen-glas o lufrañ dindan heol grizias miz Gouere. Ouzh ur gwel ez eo heñvel an ti-se ouzh ar re all, moredet e gwrez an endervezh, dindan un oabl glas-pers gouest da vadaouiñ ho penn. Trouz ebet tro-war-dro, nemet bouderezh un dornerez, pell a-walc'h, e porzh un atant. Ur paotrig eizh vloaz a dremen hebiou d'ar gazeg, staget e-kichen an nor war-bouez he rañjenn, e skeud un dilhenn gozh. Bountañ a ra an nor, ha, diouzhtu, ar freskter hag an damdeñvalijenn a bak krog ennañ. Diabarzh an ti e sav diwarnañ ur c'hwezh mil anavezet, hini an douar palumet, gant advlaz an avaloù azv, hag un n'on dare petra hag a denn d'ar butun gris, d'ar sistr fresk ha d'an armelioù koaret-mat. Ar paotrig e plij kalz ar c'hwezh-se dezhañ. Ruffañ a ra gant dudi endra ma klask e zaoulagad toullañ an damskeud.

Ur sal vras hag izel dindan ur sel harpet gant treustoù tev duet gant ar maged. Taolioù, kadorioù, hag a-dreñv d'un daol-gont, lañsedoù karget a voutailhoù. Pelloc'hik, war an tu dehoù, en tu-all d'ar siminal, lañsedoù all,

warno ar pep retañ a-fet ispisiri : chikore, pakadoù kafe, sukr, a bep seurt boestoù-mir, tablezennoù chokolad. Rouantelezh Anna-Vari... Emañ-hi, just a-walc'h, Anna-Vari ar Floc'h, a-zevri o skubañ al leur. Un tammig hini gozh an hini eo, paket evel kustum en ur flotantenn mezher glas, ha botoù-koad en he zreid. Jilgamm eo-hi. En e sav dirak an daol-gont, ur c'houer a lip ur werennad gwin ruz. Azezet war ur pallenn en ur c'horn eus ar pezh, ur plac'hig tri bloaz a c'hoari gant he merc'hodennoù. Annaig eo, merc'h-vihan Anna-Vari Gozh. En e goazez e-tal ar prenestrig barrennet, un den kozh, e ilinoù harpet war an daol, a sach goustad war e gorn-butun. Kas a ra ul luchadenn d'ar paotrig ha teurel, gant un ton drantik, godisus ha tener war un dro : « Erru out, Veig. Pell out bet gant da dro. Me zo bet darbet din gortoz ». War an daol dirazañ, ur bann-heol en em sil dre ar prenestr hag a ra allazig d'un damer prenn. « Prest out evit an taol damez, paotrig ? »

An amzer a dremen, goustad. Emañ ar c'hozhiad hag ar paotrig a-zevri gant o abadenn damoù. Ur mailh a c'hoarier eo an den, ha gantañ eo ez a ar maout bep tro. Ne glever mui, e sal an ostaleri, nemet trouz ingal ar momeder oc'h ober e vonedone pennek en e voest, fraonvadeg diastal ar c'helion, ha fistilh Annaig o komz ouzh he foupinelloù. E-tro peder eur ez erru ar c'hoarierien kartoù : paotred kozh, martoloded war o leve. Mard int bet broudet, en o yaouankiz, gant ar c'hoant beajiñ, furaet int a-benn bremañ ha n'emaint ket pell diouzh soñjal n'eus tra pouezusoc'h en o buhez eget taol kartoù peder eur gant o c'heneiled. Anna-Vari, ur bervig dous en he daoulagad evel kustum hag ur mousc'hoarzh war

he muzelloù, a ra war o zro, drantik, hag a ziskenn bep a vanne dezho. E-ser c'hoari ha butuniñ, ar baotred a rann etrezo komzoùigoù berr ha sioulik. A-benn nebeut setu karget sal an ostaleri gant ur vogedenn dev ha mougus. Gwech ha gwech all, ur vaouez a deu tre da brenañ un dra-bennak. Setu pemp eur o seniñ. « Ha gwelet ec'h eus an eur, Veig ? 'M eus aon ez eo poent dit distreiñ d'ar bourk... »

2018. Setu tri bloaz, d'an nebeutañ, m'emañ ti Anna-Vari e gwerzh. Lec'hiet fall eo, war a lavar an dud : emañ e-kreiz ul lodennaoueg poblet-stank, ha re dost d'ur c'hroashent-tro e tremen a-hed an deiz ur bern otoioù warnañ. Pell a oa ne oa mui ostaleri-ispisiri ebet ennañ, aes deoc'h soñjal.

Gwech ha gwech all en em gavan gant Annaig pa 'z an da brenañ boued : kefierez eo-hi e ti Leclerc. Daoust ha graet e vefe o amzer gant an tiez-koñvers bihan diwar ar maez ?

Ar Rouedad Shelburn e Plouha

Kumun Plouha, nepell diouzh Pempoull, e arvor Bro-Oueloù, a zo anavezet mat hec'h anv abalamour da chapel Kervaria-an-Iskuit ha da Goroll an Ankoù, bet livet ouzh he mogerioù gant un arzour dianav a vevas e-tro dibenn ar XV^{vet} kantved. Diskouezet en deus al livour paour ha pinvidik, plac'h ha paotr, kozh ha yaouank, eskob ha person, marc'hadour hag artizan, bourc'hiz ha den a noblañs o tañsal dorn-ha-dorn ouzh son skiltr ar binioù, ha kaset holl d'ar bed all gant an Ankoù didruez. Kalz noblañsoù a oa gwechall e Plouha, moarvat, hag estreget tud pinvidik en o zouesk, ma ranker teurel kred war ar c'hrennlavar kozh : *Noblañs Plouha, noblañs netra*. Brudet eo an tolead ivez en abeg d'an tornaodoù, ha tud Plouha n'int ket ar re ziwedhañ o tennañ lorc'h ganto. Gwir eo e sav an tornaodoù-se betek 104 metr a-us d'ar mor, ha gant se ez int ar re uhelañ e Breizh a-bezh. An dud a zo troet gant an istor a c'hallont ivez betek porzh kozh Gouhin-Segal, e-harz an tornaodoù-se. Ar porzhig-se, gwaskedet mat en un ouf, a zo unan eus ar re goshañ bet terket biskoazh en hor bro, pa sav d'ar V^{vet} kantved hag ar pezh a zo heverk ennañ eo e vez staget c'hoazh ar bagoù ouzh kefioù gwez uhel-uhel sanket don en traezh, gwrizioù hag all. An teknik-se e veze graet stank-ha-stank gantañ gwechall-gozh.

Chomomp en tremened, ma fell deoc'h, met tostaomp d'hon amzer-ni evit mont betek ar bloavezhioù 1940, rak Plouha a zo anavezet mat e anv gant an istorourien a bled gant an Eil Brezel Bed. Emaomp e 1943, hag ar brezel a zo en e washañ en Europa. Dalc'het eo Bro-C'hall gant al lu alaman abaoe drouziwezh 1940, hag ar Re Gevredet a gas alies skouadrennoù nijerezed a-us d'ar vro. Pal an tagadennoù dre nij-se a zo bombezañ ar porzhioù-houarn, distrujañ ar pontoù, freuzañ ar porzhvaoù, kas da netra an aveadurioù ha dismantrañ an uzinoù evit gwanaat al lu alaman ha lakaat an dizurzh ennañ en amboaz prientiñ an dilestradeg da zont. Ur skouer hepken : d'ar 16 a viz Gwengolo 1943 e voe beuzet kêr Naoned dindan un deuri dir ha tan. An arme dalc'h a zo war evezh he c'hanoliervezh enepnij avat, hag alies e vez diskaret kirri-nij an Amerikaned, ar Ganadianed pe ar Saozon a-us da Vro-C'hall da-geñver o zagadennoù. An nijerien a chom bev goude bezañ bet diskaret a vez savetaet o buhez alies gant paotred ar strouezh, ha kuzhet ganto. Hogen ar Re Gevredet e oa a bouez-bras evito e teuje an nijerien-se en-dro da Vro-Saoz rak stummadur un nijer-brezel a bade pell hag a gouste kêr. Setu perak ez eas an *Air Force Escape and Evasion Society* e darempred gant ar Rezistañs. En diskaramzer 1943 e voe savet ur rouedad badezet *Rouedad Shelburn*, a oa he fal sikour an nijerien da zistreiñ da Vro-Saoz.

Penaos ez ae en-dro ? Da gentañ e veze bodet an nijerien e Pariz. Pa veze ur pemp pe c'hwec'h bennak anezho e vezent kaset, gant an tren – ha dindan guzh, anat eo – betek Sant-Brieg pe Wengamp, hag alese betek Plouha, ar primañ ar gwellañ. Erruet eno e veze roet bod ha boued

dezho e ti Rezistanted eus ar c'horn-bro. Un eston eo soñjal er galonegezh, en dalc'h hag en evezhiegezh o deus ranket an dud-se da gaout, rak sikour an nijerien a oa risklus-meurbet, ker risklus ma c'helle kas an dud d'ar marv. E Plouha e veze gortozet un nozvezh diloar, hag er brasañ teñvalijenn e veze ambrouget an nijerien betek un draezhenn anvet *ouf Cochat*, ha badezet gant an anv-kuzh *traezhenn Bonaparte*. Bez' e veze eno ur vagig ouzh o gortoz. A-roeñv-kaer ez ae ar vagig-se, ur wech ambarket warni an nijerien, war gaout un herrvag eus ar morlu saoz a oa o c'hortoz pelloc'h en donvor, lazhet hec'h holl danieloù warni. En holl d'an holl ez eus bet kaset en-dro da Vro-Saoz 142 nijer, ha tra souezhus pa soñjer pegen evezhiet e oa an aodoù d'ar c'houlz-se gant ar soudarded alaman, n'eus bet harzet hini ebet eus an nijerien, nag hini ebet eus ar Rezistanted. Bev mat eo e Plouha koun ar *Rouedad Shelburn*, hag ur blakenn eñvor a zo bet lakaet, e 1985, a-us d'an draezhenn Bonaparte.

Pontrev

Pontrev a zo ur gêr vihan ha didrouz gwaskedet sioul war ribloù an Trev, etre Kemper-Gwezhenneg diouzh un tu ha Pleuzal diouzh an tu all. Evel paot a gêrioù all e Breizh e voe diazezet e penn uhelañ un aber hir-hir a saver gantañ dre nouspet kildroennoù glas : un ugent kilometr bennak a zo etre ar gêr ha Lezardrev, e-lec'h ma tinaou an Trev e Mor Breizh. A-hend-all emañ Pontrev keit-ha-keit, war-bouez nebeut, diouzh Gwengamp ha diouzh ar mor. Ret eo sevel pell en istor evit kavout roudoù kentañ ar gêr : e-lec'h m'emañ bremañ Pontrev ez eus bet, e-pad pell amzer, da vare ar Romaned, ur roudour a-us d'an Trev, war an hent roman kozh-kozh a gase eus bae Sant-Brieg, er gevred, d'ar C'hozh-Yeoded, er c'hornôg. Goude ar roudour e voe savet ur pont, hag ar gêr a voe anvet diwar ar pont-se, evel m'eo c'hoarvezet alies en istor. Kantvedoù-pad e voe ar pont-se an hini nemetañ war an Trev etre Gwengamp hag ar mor, ha, war ar memes tro, al liamm nemetañ etre Bro-Dreger war ar ribl kleiz ha Bro-Oueloù war ar ribl dehoù. Ul lec'h-tremen eta, hag ul lec'h lañsus, a-bell-gozh, d'an eskemmoù ha d'ar c'henwerzh, seul vui ma c'hall ar bagoù – ha bagoù bras a-walc'h zoken – sevel gant an Trev betek ar gêr pa vez leun-barr an aber gant al lanv.

Kêr Bontrev e kaver ar c'hoshañ meneg anezhi en dielloù en ur skrid eus ar bloaz 1317, ha meneget e vez er skrid-se ez eo oberiant ar porzh. E gwirionez e vleunias da vat an obererezh ekonomikel e kêr ha war-dro ar porzh etre ar XV^{vet} hag an XIX^{vet} kantved, rak Pontrev a voe er prantad istorel-se porzh kenwerzh marc'hadourien Wengamp : dre Bontrev eo e tremene ar marc'hadourezhioù a veze prenet ha gwerzhet ganto : al lienoù, an edeier, ar gwin, ar prenn, al loened... Neuze ne veze ket ur ral gwelet bagoù bras er porzh : gouletennoù war o c'himiad, prest da glipenn larg-kaer war-gaout an Douar-Nevez, pe listri o tont eus broioù an hanternoz : gouzout a reer, da skouer, ez eus bet bagoù danat o taremprediñ ingal ar porzh.

Gant digoradur ul linenn hent-houarn etre Gwengamp ha Pempoull war zibenn an XIX^{vet} kantved e voe roet lañs d'ar greanterezh e korn-bro Pontrev : e 1886 e tiazezas ar vreudeur Huet, mibien un noter eus Kintin, ur gartoñserezh war ribl an Trev. Berzh a reas diouzhtu, ha kent na voe pell e oa tri-ugent den o labourat en uzin nevez-se. Etre an daou vrezel e vo betek daou c'hant labourer enni. Ar vreudeur Huet e produe o embregerezh paper ha kartoñs evit an ti-moullañ Oberthür, e Roazhon, hag ivez evit ti Bolllore, e Kemper. Betek 1975 ez eo ganto e veze oberiet an tikedoù mont-e-barzh evit an RATP, e Pariz. Adal ar bloavezhioù 1960 avat ez eas an embregerezh tamm-ha-tamm war he c'hemend-all, abalamour, dreist-holl, da gevezerezh ar broioù estren, ha ret e voe serriñ ar stal e 1973. Pa davas trouz ar mekanikoù er gartoñserezh e vanas kousket ar gêr vihan war ar memes tro. Darempredet e vez c'hoazh ar porzh,

ken un tammig bihan avat, gant listri traezh ha gant bagoù-bale an douristed. E gwirionez n'eus mui bremañ nemet an hañvourien a gement hag a zegas buhez e kêr : a-bell amzer he deus bet Pontrev al label a “gêr vihan neuzeit-kaer”. Gwir eo ez eo brav-tre ar c'hreiz-kêr, gant e diez kozh o frammoù koad ; ha ribloù an Trev gant o aridennad poullou-kannañ a zo un dudi d'al lagad. Ar porzh ivez, er maez eus a gêr, war-bouez-traoñ, un tamm bihan, a zo danvez ur sell ennañ.

Anavezout a ran unan amañ, e porzh al Lege, hag a zo e vrasañ plijadur, en hañv, mont dre vor betek di : hedañ a ra neuze tornaodoù uhel ha troc'h-didroc'h Bro-Oueloù betek Enez-Vriad ha sevel gant aber kildroennek an Trev. Pa deu en-dro, goude un toullad devezhioù, e vez en e lagad ur bervig a levenez a laka pep disklêriadur da vezañ dreistezhomm : dremm un den en deus sanailhet, en e galon hag en e spered, e bourvezañs eürusted evit ur pennad mat a amzer !

Galvedigezh

Ur paotrig nav pe zek vloaz eo. Krog e zorn dehoù e hini e dad. Bragoù berr, hag en e benn, dindan ur pennad blev foutouilhek, daoulagad bliv, sell lemm ur bugel na ra ket an digoradur spered diouer dezhañ. Deuet eo, gant e dad hag e vamm, da arvestiñ roudoù arkeologel ur c’henkiz galian-ha-roman bet nevez furchet, amañ, nepell diouzh porzh al Lege, hag endra ma ’z a etre ar fozelloù hag an tammoù mogerennoù kozh, e ro skouarn da selaou displegadennoù an heñcher, un hendraour yaouank anezhañ, pitilh gant e vicher :

« Goude drouziwezh ar Veneded e 52 kent HS e chomas ar Romaned d’ober o mistri en Arvorig e-pad tri pe bevar c’hant vloaz. Amañ avat ne voe ket romanekaet ken don ar vro hag e lec’h all, ha n’hon eus ket bet dre amañ kêrioù ken bras ha *Vorgium* pe *Fanum Martis*. Bez’ e oa, koulskoude, un hent roman kozh hag a dreuze ar vro, o kas eus Saozon, tost ac’hann, d’ar C’hozh-Yeoded, en tu all da Lannuon. Ar c’henkiz bet furchet ganeomp amañ a oa *Portus Aurelius* e anv, ha treuzkaset eo bet an anv-se betek ennomp, pa vez graet bremañ *Porzh Horel* eus ar c’harter-mañ. E Bro-Oueloù a-bezh ez eo ar c’henkiz-mañ an hini brasañ bet kavet biskoazh ganeomp : roudoù eus ar Romaned a gaver e lec’hioù all e Bro-Oueloù, e

Treveneg, Binig, Porzhig, Pleuloc'h, met dre faot bezañ furchet eno ne oarer ket resis pe annezlec'hioù bihan pe diazezadurioù brasoc'h eo e oant. A-hend-all e kaver, war enez Lavre, e-tal Briad, ur savadur bihanoc'h eget amañ, hag a zo bet furchet pell zo gant an hendraourien... »

Ar paotrig a selaou bepred, aketus an tamm anezhañ.

« Ha bremañ, Itronezed hag Aotrouien, e c'houlennin diganeoc'h lakaat ho faltazi da labourat un tammig bihan : klaskit, mar gallit, empentiñ peseurt stumm en devoa ar c'henkiz-mañ, na weler mui bremañ dioutañ nemet an arvogerioù kozh ha distumm. Annez un den pinvidik an hini e oa, ur perc'henn douar anezhañ, bet savet gant mein, ha goloet gant teol. Ur pondalez gant kolonnennoù a rae e dalbenn. An ti e oa ennañ ur gegin vras, salioù da vevañ, ha kambroù, pemp pe c'hwec'h anezho. Bez' e oa, evel-just, evel e pep kenkiz roman bras, ur gibellidi. Tommet e veze an dour hag an ti gant un tommerezh dre zindan. Kinklet e oa ar c'henkiz-mañ gant mozaikoù ha freskennoù : kavet hon eus tammoù mogerioù kaeraet gant ul lezennad livioù : ruz, limestra, ha glas... »

« Lakait ho faltazi da labourat » en deus lavaret an heñcher. Gwell a-se : ma 'z eus un dra na ra ket diouer d'ar bugel, ar faltazi an hini eo, just a-walc'h, hag an ijin : gwelet a ra dirazañ bremañ an ti-annex, hogen ivez, dispartiet dioutañ gant ur sklotur, ar savadurioù servij : ar c'hardioù, ar c'hrevier, lojeiz ar sklaved...

« Kenkizoù disteroc'h a oa, a gendalc'h an heñcher, hag ivez dre holl war ar maez lochennoù al labourerien-

douar vihan. Ar re-se ne chom koulz lavaret roud ebet anezho... »

Ar paotrig ne selaou ket ken, ha komzoù an hendraour yaouank a ya kuit, pell, gwall bell, war divaskell skañv an avel. An heñcher, dre e gomzoù, en deus enaouet faltazi bervidant ar bugel. Emañ c'hoazh e *Portus Aurelius*, evel-just, hogen pell-pell an amzer gozh. Ouzhpenn-se ned eo mui ur paotrig dek vloaz, ha n'emañ mui e dad en e gichen. Ur Roman eo deuet da vezañ. Unan bras, kadarn, kalonek, pinvidik. Ur brezelour houarnwisket o vragal otus, dispont ha taer, ur jav feuls. Un taol kentr a ro d'e varc'h, ha dao d'an emgann, ha gwa d'an enebourien bodet pelloc'hig, en ardraoñ : bruzunet e vo o eskern ha goude, me a...

— Alan, Alan, a lavar an tad, en ur hejañ brec'h e vab. Echu eo ar weladenn, rambreer ac'hanout ! N'ec'h eus ket selaouet kalz an heñcher, 'm eus aon...

— Geus Tadig, selaouet em eus. Tad ?

— Ya, Alan...

— Pa vin bras e vin hendraour...

Horolaj Rostrenn

D'ar c'houlz-se – un tregont vloaz bennak a zo – e tremenen alies dre Greiz-Breizh. Ur mignon mat am boa, hag a oa oc'h ober e zemeurañs e Rostrenn, ha seul daol ma 'z aen eus Sant-Brieg da Loktudi, e raen un ehan eno, ha kemend-all war hent an distro. Kemeret hor boa ar stumm da evañ ur banne kafe en ostaleri a zo war ar blasenn, damdost da iliz-chabistr Itron-Varia, a anavezit, marteze, ha pa veze brav an amzer ez e oa war leurenn diavaez an davarn e chomemp da varvailhat. Bez' e oa ur stal traoù kozh, en tu all d'ar blasenn, tre el laez, e rez-an-douar un ti karget a vloavezhioù, hag un deiz m'hor boa un tammig muioc'h a amzer e treuzjomp ar blasenn war hor goar hag e vountjomp an nor. Evel-se eo e ris anaoudegezh gant Vefa.

Souezhet e voen da gentañ gant an traoù strobis ha bern-war-vern a spurmantis en damdeñvalijenn, ha darbet e voe din kilañ rak ar stalabarn bras a oa er pezh ledan ha don edon o paouez mont-tre ennañ. E gwirionez ne ouien ket re vat pe edon en ur stal pe e-barzh un ti prevez hag a vije bet aloubet a van da van, a-hed ar bloavezhioù, gant ur stlabez tremen rouestlet, evel ma c'hoarvez a-wechoù e ti an dud kozh, pa ya o

fenn e bizibul ha pa ne vez mui den d'ober war o zro. Diwezhatoc'h hepken e komprenis : ar pezh edon ennañ a oa war un dro sal da vevañ, kegin, saloñs ha stal traoù kozh, ha Vefa, mestrez nemeti an ti, ne lakae diforc'h ebet etre he zraezoù hag hec'h arrebeuri dezhi – ar re a rae ganto war ar pemdez – hag ar re a genwerzhe ganto. Gant se e tremene kalz amzer o trabasat dre an ti, hag o tougen eus an eil pezh d'egile – un drekstal hag ur c'hav a oa – an arrebeuri preñvedet, ar c'hleuzeurioù darniet, ar binvioù torret, al listri-taol faoutet, al levrioù kozh-Noe, e berr gomzoù an traezoù a bep seurt, a bep ment hag a bep oad e oa kouchet he zi ganto. Evel-just ne oa fin ebet d'ar firboucherezh-se, hag he zrevell a heulie, gwech mad ar c'henwerzh, gwechoù all avat, hag aliesoc'h, al loariadennoù a save dezhi, da skouer pa deue en he fenn ar stultenn da welet ur ganastell gozh en he drekstal kentoc'h eget er stal vras, pe da lemel diwar ar rakstal ur voestad rikoù livañ evit he “renkañ” er c'hav. N'it ket da grediñ avat, diwar gement-se, e oa lous an ti, pell ac'hano ! Vefa a oa ur gwir “Vari frot-difrot”, ha bec'h a lakae evit derc'hel he stal naet ha kempenn ; kefridi a veze ordin warni o tiuloc'hiñ, o tigevnidañ, o skubañ, ur bilhenn en un dorn, ar barr-pluñv en dorn all ! Ha ne welis an deiz-se, nag ar gwechoù da-heul kennebeut, poultrenenn ebet o koroll war bannoù an heol en em sile dre ar rakstal. A-hend-all gouzout a rae-hi, ent-resis, penaos e oa renket he stalikerezh, ha souezhet e vije bet o klevet unan bennak o lavaret e oa an traoù a-bempoù ganti en he zi. Renket e oa pep tra hervez un urzh na oa nemeti o c'houzout diouti, ha mat pell zo !

E kreizig-kreiz an “urzh”-se (a raen-me, etre va roched

ha va bruched “distalac’h” anezhi) e trone kaerañ pezh he stal : un horolaj kozh-kozh, en he boest koad kraoñ gell-melen ha flour, kaeraet gant tachoù kouevr lufrus. Er voest-se, ur c’haer a vomeder alaouret a rae e vonedone pennek gant un trouz ingal. E gwirionez, ne oa ket ret bezañ nag un hendraour arroutet mat war e vicher, nag ur mailh war an horolajerezh evit merzout diouzh ar c’hentañ sell e oa an horolaj ur pezh kaer-kaer. Pa c’houlennis ouzh Vefa avat pegement e werzhe anezhi e respontas din krak-ha-berr : « An horolaj-mañ, den yaouank, n’eo ket da werzhañ. Savet e oa bet e 1866 gant un horolajer eus Gourin, ha profet da’m zud-kozh da-geñver o eured. Ret eo din, evel-just, sevel ar pouezioù ingal, abrediñ anezhi gwech ha gwech all, pe he dilerc’hañ. N’eus forzh ! Ar momeder brañsell-divrañsell-se en deus mentet an eurioù e ti va zud-kozh da gentañ, hag a-c’houdevezh e ti va zud. Muzuliet en deus, gant digasted, levenez ha doan. Me ! En em zizober diouzh va horolaj ? Biken ! Ha gouezit mat kement-se, den yaouank : traoù zo n’eus priz ebet dezho ! ». Un tav a voe, hag e-pad ur reuziad ne glevjomp mui, en ti, nemet ar momeder alaouret en e voest. An “den yaouank” en devoa klevet, ha klevet mat ar gentel !

Tasmantoù Mai Gozh

Tud zo o devez aon rak an teuzioù-noz. Mai Gozh avat, evel an holl dud erru pell mat war an oad, en em blij en o ser. Klask a ra zoken ar stummoù dispis ha tasmantheñvel a zamweler e korn ar straedoù, war-dro serr-noz, en diskaramzer hag er goañv, hag a zegas koun dezhi eus tud bet anavezet gwechall : a-gentizh ma kosha e wel evel-se taolennoù he bloavezhioù kentañ o yaouankaat en-dro. Setu perak ez a da vale e kêr bemdez, pa gouezh rouz-an-noz war ruioù Sant-Brieg. Bourrañ a ra-hi bezañ er-maez d'an eur ma teu an oabl da deñvalaat, pa weler an tridi oc'h aloubiñ an toennoù hag ar gwez a-vandennadoù trouzus. Neuze e vez enaouet ar c'hleuzeurioù-straed, evel kement a berlezenn noz, ha poullouù sklêrijenn ar stalioù war ar pavez lufre a zo evel kement a bedadenn da vont larkoc'h : a stal da stal. A skeud da skeud. A dasmant da dasmant. Kalz plijusoc'h e vez c'hoazh, e feur he meno, pa gouezh war ar ruioù ur glav tanav, hanter vrumenn, hanter lugachenn. Mont a ra Mai neuze d'ober ur bale dre gêr, ha kerzhout a ra, paket mat en he mantell, a-zoug-he-c'hamm, dre ar ruioù mil anavezet.

Sellit ouzh an dreusadenn vihan-se o vale war he nañv-kaer, un disglavier en he dorn dehoù, hag ur gabasenn

ganti en he dorn kleiz. Emañ o paouez dont er-maez eus he ranndi bihan, ha diskenn a ra bremañ gant straed Sant Gouenoù. Gouzout a ra mat-tre, en a-raok, da belec'h ez aio ha dre belec'h e tremeno, rak he buhez penn-da-benn a zo dastumet war ar pemp kant metrad karrez a ya d'ober ar c'hreiz-kêr : e penn straed Sant Jili, setu tolzenn deñval an iliz-veur, gant he daou dour postek. Eno e oa bet badezet, ha, diwezhatoc'h eo er sakrestiri he devoa desket ar c'hatekiz. Dre eñvor, hervez ar c'hiz kozh. Desket he devoa zoken ur sklabez latin, ha bommoù frazennoù gallek ha latin mesk-ha-mesk a zo chomet bev-mat en he spered. Setu, bep tro ma tremen hebiou d'ar savadur sakr, e lavar outi hec'h-unan : « Doue a zo diveizus e hentoù ha disonteadus e zivizoù. Amen hag *ora pro nobis in secula seculorum* ». O vezañ treuzet plasenn ar prefeti, setu dirazi bremañ straed ar Fardell, gant he gra ken serzh d'he 85 bloaz. Hent ar skol e oa gwechall, hag en ur vont e salud bremañ c'hoazh ar goñversanted a wechall-gozh : ar c'here bihan, a gustume berrsoliañ ar botoù-lêr, en e goazez etre daou benn an deiz e toull ar prenestr bolzek ; pelloc'h e oa ur c'hemener, a gleved o vousekanañ kerkent hag an devezhioù kaer pa c'halle digeriñ dor ha prenestr ; uheloc'h, e korn un hent-dall, un ostaleri. « Arabat chom a-sav e-tal an davarn vorn-se, » a lavare he zad dezhi alies ; e penn uhelañ ar straed e oa stal-labour ur gweraer a farde gwer-livet evit an ilizoù hag ar chapelioù. An atalier-se a blijed dezhi ken-ha-ken, abalamour ma oa kaeraet ar rakstal anezhañ gant tammoù gwerelloù lies-livek a skede en heol. O gwelet a ra c'hoazh, daoust d'an deñvalijenn ha d'ar glav, e-giz pa vije bepred heol he yaouankiz o tegas sked ha luf enno...

Chomet eo Mai a-sav, berranalet, e lein ar c'hra. Eüruzamant e vo pouez-traoñ gant ar straed bremañ. Kent mont pelloc'h e taol ur sell war doennoù ar gêr gozh, en ardraoñ : spurmantiñ a ra zoken, e korn straed ar Chabistr, talbenn he boulonjerezh... Daou-ugent vloaz o werzhañ bara ha gwastilli, Sul-gouel-bemdez, adal ar beure betek an noz. Klevet a ra c'hoazh an trouz sklintin a rae ar c'hloc'hig, a-us d'an nor, bep tro ma teue unan-bennak tre, bep tro ma yae unan bennak er-maez. He gwaz, a-dreñv, war-dro ar forn... Ar vugale, bihan da gentañ, pep hini o vont d'ar skol goude, hag o kemer o nij, pep hini d'e dro... Pegen buan he deus troet rod an amzer ! Bloavezhioù ha bloavezhioù c'hoazh nijet kuit, evel ul luc'hedenn ! Levenez ha poan, eürusted ha doan, dispis bremañ, evel beuzet en ul leñjenn, ur vrumenn a velkoni... En ur dremen hebiou d'ar stal-levrioù e teu ur soñj droch dezhi : « Marteze n'eo bet kement-mañ nemet un hunvre. E c'hellfe bezañ e vefen c'hoazh o hunvreal. Emaon o vont da zihuniñ, trumm »

Kent distreiñ d'ar gêr e ra un ehan, c'hoazh, e korn straed Sant Gwilherm. Emañ he zad en e sav, dirazi, stipet ha lipet, reut an tamm anezhañ en e lifre archer, ul lifre eus ar bloavezhioù 1940. « Me eo, Tadig ! Ne 'm eus ket daleet re ».

Seizh eur eo, deuet eo an noz da vat, hag an dud er straed a ra un distro, souezhet o welet an tammig hini gozh-se plantet e-kreiz ar straed-kerzhed, o komz outi hec'h-unan, a vouezh uhel, e kelc'h sklêrijenn ur c'hleuzeur-straed. Nann, Mai Gozh n'he deus ket aon rak an tasmantoù. Bevañ a ra en o ser...

Teir silabenn

Ken spontet e vez-hi, a-wechoù, pa zigor dirazi islonk an endervezh goullo, ma tichañs dezhi sevel prim goude lein en ur bus bennak, an hini kentañ deuet, n'eus forzh pehini, gant ma kaso anezhi pell diouti hec'h-unan, a gred dezhi. Mont a ra betek penn al linenn, he fenn harp ouzh ar werenn – betek bourk Pledran, hini Ploufragan pe Langaeg – hag eno e c'hortoz eur an distro. D'ar peurliesañ avat ez eo bale eo a ra, hec'h-unan-penn. Plijout a ra dezhi neuze diskenn betek ar porzh. Un eur bale, a bep seurt soñjezonoù ganti war he spered, mann ebet gwelloc'h d'un ene hag a glask habaskaat. Dibabet he deus, gant ar brasañ aked, an hent plijusañ, gant kas ouzh ar straedoù darempredet ha trouzus, hag ar gwel eus kenkiz bras Roc'h-an-Nec'h, e penn ar vali hir, a skañva he doan bep tro. Ur frealzidigezh. Ya ! An hini gentañ war an hent. Klask a ra mont evel-se, abaoe tri miz, a frealz munut da frealz munut, e-giz pa vije o vale, kamm-digamm, war un hent digompez. Dre ma kerzh, pep kammed a zo un trec'h, pep alanad un aspedenn vut. Direspont ivez, siwazh.

Tremenet eo hebiou d'ar c'henkiz bras, ha dinaou a vo diwar vremañ gant an hent, dre zindan ar gwez uhel.

Gouzout a ra ent resis pelec'h e chomo a-sav evit arvestiñ ouzh ar porzh : en ur pleg eus an hent ez eus ur skarr e tolzenn fetis ar gwez-sapr, hag ac'halese e weler al lenn-borzh kenwerzh, en ardraoñ. Hiziv ez eo al lestr-karg alaman eo a zo ouzh ar c'hae. Sellout a ra outañ a-bell. Bihan eo, ha dezhañ ur c'houc'h ruz ha melen. « Ur miz a zo tremenet, neuze... » a lavar outi hec'h-unan. Ha gwir eo e teu al lestr-se ingal, bep miz, eus Hamburg, da ziskargañ el Lege e sammad prenn. Ne chomo-hi ket pell war kaeoù ar porzh-kenwerzh avat, ha buan e treuzo an dour dre ar pont-tro. Ur sell prim a zehoù, amzer dezhi da spurmantiñ buan, en ur dremen, tor krec'hioù Saozon, gant o bodennoù spern, drez, kelenn ha kelvez. Emañ-hi bremañ er porzh bageal. Dirazi, stummoù mistr ar bagoù dre lien, bourzhell ouzh bourzhell. Avel a zo, hiziv. C'hwezhañ a ra a-fourradoù taer ha yen, hag an driñsoù a sko ouzh ar gwernioù dir, gant ur son sklintin. An avel a ra vat dezhi. Galv klemmus ar skrewed ivez. Pep tra amañ a zo disheñvel diouzh kement a c'haller gwelet ha klevet er c'hreiz-kêr, ha bep tro m'en em gav evel hiziv e biojoù ar porzh hag ar mor, e sant ur meni frealz o sevel enni.

Kaset he deus tammoùigoù bara ganti en he sac'h-kein. Evit an houldi an hini eo. Hag evit an alarc'h ivez. Soñj he deus na pegen souezhet e oa bet, tri bloaz zo, o welet an alarc'h digavandenn-se oc'h ober e annez uheloc'hig, en ur pleg eus ar stêr, rak krediñ a rae dezhi betek neuze ez ae al laboused-se atav daou-ha-daou. Warlene e oa deuet gant he gwaz da sellet ouzh ar porzh, e miz Genver, pa oa bet skornet an dour, ha mousc'hoarzhet o devoa, o-daou, o welet al labous gwenn-kann-se, ken meurdezus

a-hend-all pa vez o neuial war an dour, o kerzhet war ar c'hler, amparfal ha moñsek, e-giz p'en divije dilezet pep dinder...

An houldi, peurzebret ganto an tammoùigoù bara he devoa stlapet dezho, a zo aet kuit. An alarc'h n'eus roud ebet anezhañ hiziv, evit doare. Chomet eo moarvat en e gorn boas, damdost d'ar pont maen, e krec'h, skoachet en ur bod korz-mor. Emañ-hi bepred en he c'hoazez war ar skaon vihan, he daouarn juntet war he barlenn. En tu all d'al lennborzh, dirazi, ur vorvran, en he sav war un aspled maen a-us d'un durumellad lec'hid, ha dispak he divaskell du, a sec'h he fluñv. « Erru eo poent distreiñ d'ar gêr, » a lavar outi hec'h-unan en ur sevel.

Hag en ur dreiñ kein ouzh an dour e tistag ur wech c'hoazh, ur wech ouzhpenn, en un huanadenn skuizh, an teir silabenn villiget : « In-tañ-vez... » kent mont larkoc'h, kamm-digamm, hec'h-unan-penn, war hent digompez ar vuhez.

Mai Gozh, e skeud Tour Saozon, e porzh al Lege

Ar moraer a erru evit ar wech kentañ, dre vor, e-tal porzh al Lege, a vez sachet e evezh, a-vabourzh, gant un dosenn goadet-stank, diazezet start war ur sichennad reier du darlipet gant an tonnoù. Ur stumm dibar a zo d'an dosenn wezennek-se : endra m'eo serzhik ha sonn he zoroù ouzh tu ar mor, an tu all, hini ar sav-heol, a ginnig d'al lagad un dinaou dister. Eno ez a ar gwez war zistankaat, hag an diribin skañv a dro tamm-ha-tamm d'ur bradenn hag a ziskenn sioulik betek mont da dapout, pelloc'h er su, groa Ilfinieg, gant he lec'hidegoù broennek, e lost ar bae. War gribenn an dosenn, un tour kozh-kozh, peuzrivinet, faoutet e daou damm, ha rannet krec'h-traoù he mogerioù tev : ar savadur milourel-se, bet o tifenn hag o wareziñ ar porzh a-werso, a vez graet anezhañ gant an holl *Tour Saozon*. Savet e oa bet, en XIII^{vet} kantved, el lec'h strategel-se, evit evezhiañ genoù ar stêr Goued, rak amañ, evel e meur a lec'h all e Breizh, e sank al lanv da vetek kalon ar vro, dre un aber gildroennek. Annezet eo al lec'h abaoe pell amzer, ha bez' ez eus bet o vevañ, tro-ha-tro, war an dosenn-se, tud ar ragistor, Galianed, Romaned, Vikinged, tre betek brezelourien houarnwisket ar Grennamzer, anezho tud

taer ha dispont, a ouzoc'h a-walc'h. Lakaet e voe diskar an tour-se war urzh Richelieu, er bloavezh 1598. Pa lavaran diskar, n'eo ket ar wirionez : an hanter eus an tour a zo c'hoazh en e sav abaoe keid-all, hag ar vartoloded a gemer merk diwarnañ pa fell dezho spisaat savlec'h o bag.

E lez ar c'hoadad fav ha derv hon eus graet anv anezhañ uheloc'h emañ bodet koshañ tiez Saozon. Bihan int, ha dister : pesketaerien baour a veve enno gwechall. Pell emaint a vezañ displijus avat pa vousec'hoarzh o zalbennoù uvel, er su, ouzh bannoù laouen an heol mintin. E-barzh unan eus an tiez-se emañ Mai Gozh o chom, hec'h-unan-penn, hep kar na par war he zro. N'eus en he zi, a-hend-all, na skramm ebet, na pellgomzer, ha bevañ a ra evel-se, digavandenn hag er brasañ sioulañs. Mai a zo bet diblaen ha skosellek he buhez. Pa deurvez komz eus an amzer dremenet, ar pezh ne c'hoarvez ket alies n'eus forzh penaos, e lavar hepken : « A bep seurt soubenn am eus bet em buhez, Herve, ha trenk ha c'hwerv, sur eo ha n'eo ket marteze ». Hogen abaoe m'eo deuet en-dro da vevañ en ti a oa bet hini he zud-kozh, an ti e oa-hi bet ganet ha maget ennañ, he deus kavet ur meni kempouez, ha ne vev mui nemet en amzer-vremañ, hep na savfe mui keuz ganti eus an amzer-dremenet. Aon rak an amzer da zont – diaezamantoù ar gozhni ha poanioù ar marv – ne ziskouez ket kaout kennebeut. « Dre be vurzhud Mai ? » « Savetaet on bet gant ar c'hoad, » he deus lavaret din meur a wech, pa c'houlennen ganti eus pelec'h e teue he sederded. Ha gwir eo e tremen hec'h amzer, etre daou benn an deiz, o kantren dre ar gwenodennoù troidellus a grap ouzh tor ar menez. Ne ra tra nemet mirout digor he femp skiant hag arvestiñ pizh ouzh kened ar bed evel

ma vez kinniget dezhi en he c'hoad druz ha don, a-us d'ar mor. Ma vije bet arzoùez an tamm anezhi he dije livet taolennoù pe savet barzhonegoù, ha ma kredje e Doue e vije bet gouestlet hec'h amzer d'ar bedenn. Hogen n'eo na livourez, na barzhez, na leanez. Bastañ a ra dezhi an nebeud he deus avat, ha liv ar raden a bep tu d'an estreved, sarac'h an avel er gwez uhel, nijadeg ar skrewed, stumm ar c'houmoul, frond an douar goude ar barrad-glav, kement-se holl, ha kant traig munut c'hoazh, a zo trawalc'h evit magañ he spered hag he c'halon.

Kaoz a zo bet etrezomp alies eus an digenvez. Ha sed he deus respontet din : « Bevañ a ran en digenvez, gwir eo. Ne lavarfen ket avat ez on digavandenn... Dougen a ran em askre hag e don-donañ ac'hanon an holl re am eus anavezet em buhez. Komz a ran outo bemdez, hag e respontont din. Tañva a ran douster o bezañs, ha n'eus ket c'hwekoc'h kavandenn ».

Ne c'houlan ket gwelloc'h eget krediñ anezhi...

Waterloo

Tour-tan al Lege, bet savet etre 1855 ha 1857, dezhañ un uhelder a 14 metr, n'eo netra, e gwirionez, pe nebeut a dra, e-skoaz an tourioù-tan uhel ha balc'h a gaver e Penn-ar-Bed, anezho gedourien sonn, dispont ha mut, diazezet start war ur garreg digevannezus bennak, pell-pell diouzh an douar-bras, hag o talañ pennek ouzh ur mor dirollet, ha ma rankfer lakaat anezhañ keñver-ha-keñver gant e amezeg tostañ, pintet uhel war lein tornaodoù serzh Kab-Frehel, en tu all d'ar bae, e vefe peadra da vezhekaat anezhañ. Evel m'emañ avat e plij din, uvel an tamm anezhañ, e penn ur sav-mein dister, o henchañ ar bagoù e genoù ar ganol a gas da borzh al Lege, ur porzh-mor diaes a-walc'h an darempred anezhañ, a-hervez. Bez' ez eus, sko outañ, un ti izel, bet lakaet sevel war un dro gant an tour-tan, gant melestradur an tourioù-tan hag ar balizennoù.

Anavezet mat em eus, gwechall, an den a veve en ti-se. Tri-ugent vloaz e oa d'ar c'houlz-se, ha bet e oa evezhier tour-tan en e yaouankiz. Tremenet en doa goañvezhioù rust-meurbet e-barzh an "ifern", da lavaret eo e kement tour-tan a zo e mor an Hirwazh : *ar Wrac'h Vras*, *ar Vein zu*, *Kereon* pe *ar Men*. Deuet an oad dezhañ da vevañ

digant e dammig leve, hag eñ yaouank c'hoazh, e oa bet kinniget dezhañ lojañ e ti bihan an tour-tan, el Lege. Asantet en devoa, rak al lojeiz-se a oa diouzh e zoare e kement feson a oa : bevañ aze a oa un doare evitañ da chom en un endro boas, hag a-barzh nemeur, hon den a reas e doull war ar porzh ha tro-war-dro. Anavezet mat e oa, ha deuet dreist gant an holl peurvuiañ, rak, ouzhpenn ma oa un dremm vat a zen, habask hag hegarat e oa ivez. An den-se e oa Fañch e anv bihan, hogen e-pad pell amzer ne 'm eus anavezet nemet e lesanv : an dud diwar-dro a rae peuzholl *Waterloo* anezhañ.

Ar Fañch-se a oa un den tavedek war ar pemdez. Din da c'houzout ne oa nemet un dra hag a c'helle distagellañ e deod, hag an “dra”-se a oa, it da c'houzout perak, buhez Napoleon Gozh, ha dreist-holl emgann Waterloo. Bez' ez eus tud hag a vourr c'hoari melldroad, lod emañ o albac'henn gant al louzawouriezh pe gant ar c'hoari echedoù ; darn emañ o boemenn gant an arzoù pe me 'oar-me gant petra c'hoazh. Ma ! Da bep hini e vlaz : logod d'ar c'hazh, eskern d'ar chas ! Fañch ne blede da vat nemet gant studi emgann Waterloo. « Betek re, » a lavare an dud. Rak pa deue a-benn da lakaat ar gaoz war ar c'hraf-se (ha gwall abil e oa d'en ober) ne veze mui prenn ebet d'e latenn, ha ne veze mui ken kaoz gantañ nemet eus Waterloo. Waterloo amañ, Waterloo ahont... Kement ha ken bihan ma kave d'an dud a-wechoù e oa arabadus hag e lakae anezho da goll o amzer o kontañ kaozioù didalvez.

Ret e oa mont-tre en e di bihan evit gouzout betek pelec'h ez ae e albac'henn : ar sal da vevañ ne oa mui

enni pezh arrebeuri ebet. War al leur, ur mell pladenn darbrenn. War ar bladenn-se en devoa adsavet Fañch emgann Waterloo, ha soñj am eus c'hoazh pegen sebezet e voen an dro gentañ din da welet e “oberenn” : hañval ganin edon a-greiz-holl e kreizig-kreiz an druilh hag an drailh, d'an 18 a viz Even 1815 ! An dachenn a oa bet adsavet gentañ, gant he c'hrec'hioù, he zraoñiennoù, hec'h hentoù, he farkeier, he zorkadoù gwez, tre betek ar bodennoù glasvez, ar poullou-dour hag ar fank ! Livet en doa Fañch e-unan ar soudarded plom ivez, goude bezañ furchet el levrioù, evel-just, ha lipet ha kempenn e oa kement soudard a oa, bet livet dre ar munud, betek en traoùigoù disterañ, eus al lèrennoù-elgezh tre bete nozelennoù ar gweltreoù ! Ar moged a save diouzh ar c'hanolioù a yae bodennoùigoù kotoñs gwenn d'ober anezhañ. Ne vanke netra ! Eurvezhioù dudius am eus tremenet gant Fañch, o c'hoari gant e soudarded plom, ha me bugel bihan c'hoazh d'ar c'houlz-se.

Evitañ avat ne oa ket ur c'hoari. Deuet e oa emgann Waterloo da vezañ ar gwirvoud, hag ar bed tro-dro dezhañ a droas tamm-ha-tamm d'un hunvre dispis. « Ar paourkaezh Fañch, rambreal a ra muioc'h-mui, » a lavare an dud. Bloavezhioù a dremenas. En diwezh, ar “paourkaezh Fañch” a oa ken troet gant e soudarded plom ma ne blede mui na gant lein na gant koan... Hag un devezh, va zad a lavaras din e oa bet kaset *Waterloo* da di an diskianted. Marvet eo eno bloaz goude, ha n'ouzon ket petra eo deuet e soudarded plom da vezañ...

Miz Here 1826 : Turner, al livour saoz, en Naoned

Bez' ez eus bet, e Bro-Saoz, en XIX^{vet} kantved, daou livour anavezet mat o anv gant an holl ha brudet-kenañ evit o labour : Constable (1776-1837) ha Turner (1775-1851) kontet, o-daou, da vezañ diaraogourien luskad an impresionouriezh en o bro. Anavezet mat int en abeg d'o gweledvaoù peurgetket. An daou zen, a-hend-all, eo bet disheñvel-krenn o buhez : Constable n'en deus ket fiñvet kalz, ha chomet eo da vevañ ha da labourat en e Suffolk genidik, en deus bet livet ken brav ha ken soutil an oabloù anezhañ. Turner avat a zo bet ur gwir reder-e-doull, ha beajet en deus bet kalz : redet en deus Europa eus ur penn d'egile, eus Bro-Skos betek an Itali, eus an Izel-Broioù betek Aostria, o klask, bep tro, neveziñ e awen dindan neñvoù estren. Beajiñ, war a lavarer, a franka an anaoudegezh, hag ar bale-bro a zigor ar spered hag a sedera ar galon !

Emaomp e 1826. Joseph Mallord William Turner a zo o ren e 51 bloaz, ha lakaet en deus en e benn, un tachad zo, da welet al Liger. N'eo ket hepken ur froudenn hag a zo tremenet dre e spered : Turner e plij ar stêrioù bras dezhañ, abalamour d'o gweledvaoù meurdezus ; livet

en deus bet ar *River Thames*, en e Vro-Saoz c’henidik, ha plantet en deus e varc’h-livañ, en hevelep doare, meur a wech, war ribloù ar *Rhein*. Awenet eo gant ar pellweladurioù divent a gaver war-dro ar stêrioù bras, lec’h ma c’hall e varregezh da grouiñ en em zispakañ en he gwir wellañ. E miz Gwengolo e tilestr e Dieppe, hag e-lec’h mont war-eeun betek al Liger dre ar berrañ, e ra un distro hir dre Vreizh : goude bezañ treuzet an Normandi en ur rederig, setu hon arzour e Sant-Maloù, e Dinan, e Montroulez. Kaset en deus gantañ, evel boaz, karnedoù bihan evit e zamdresadennoù, ha brastresañ a ra enno, prim-ha-prim, kement a zo danvez ur sell ennañ, war e veno. Erruet e Montroulez e tigor ur c’harned nevez, hag e skriv, war golo eouliet ar c’harned-se (bet miret gant ar mirdioù saoz) : *Morlaise to Nantes* (sic). D’ar 24 a viz Gwengolo emañ e Brest. Ne chom ket pell er gêr-se avat, ha diouzhtu e kemer penn an hent a gas d’an Naoned, dre Gemper, an Oriant, ar Roc’h-Bernez. D’an deiz diwezhañ a viz Gwengolo, emañ en Naoned. Tremen a raio pevar devezh eno.

D’ar c’houlz-se ez eus 80 000 den o vevañ en Naoned. Ur gêr oberiant-meurbet eo, leun a virvill, ur porzh bras, gant mesk ha keflusk ar c’haeoù, fourgas ar chanterioù bagoù, terkoù ar c’henwerzh, ur c’has-digas hep paouez nag ehan gant an dud er straedoù, war ar plasennoù hag ar pontoù, ha red-dired ar bagoù war an dour. Disheñvel eo ar gêr diouzh an hini a anavezomp bremañ, rak n’eo ket bet “terket” c’hoazh, ha lesanvet eo gant an dud *Venezia ar C’hornôg*, abalamour da hollvezañs an dour. Hag adkavout a ra Turner en Naoned, evit gwir, aergelc’h Venezia, en deus bet tro da weladenniñ un

toullad bloavezhioù kent. An dour, ar stêr, al Liger : sed a fell d'hon arzour tresañ ha livañ. Daoust ma ne chomo ket pell en Naoned e kemer e amzer, hag ar wech-mañ, e-lec'h leuniañ pajennoù e garnedoù bihan, e labour gant follennoù bras, ha tresañ a ra, war ar paper glas – un nevezenti eo, d'ar c'houlz-se, ar seurt paper-se – kement a sko un taol en e galon pe en e spered, kement tra, kement munud a vez sachet e evezh gantañ. E ken berr amzer ne c'hall tresañ evel-just nemet brasskeudennoù. Ne vern ! Kas a raio ar follennoù paper-se gantañ da Londrez, hag o adkemer a raio diwezhatoc'h – bloavezhioù goude a-wechoù – evit reiñ dezho o stumm peurgloz.

Livet en deus ar pontoù – pont Aiguillon, pont Pirmil – ar c'hae Duguay-Trouin, chanterioù ar Salorges, ar vali Sant-Per, ar c'hastell, hag al Liger en argrec'h d'an Naoned. Ar bismigerien ar muiañ troidellus a gavo abeg en e labour marteze hag a lavaro deoc'h n'en deus ket atav doujet ar pezh a wele, ha gwir eo en deus, amañ ahont, dilec'hiet an iliz-veur pe ar c'hastell evit reiñ da daolenn-mañ-taolenn ur c'hempouez na gave ket dirak e zaoulagad. Hogen, ha pa vije bet livet gantañ an traoù evel m'o gwele, ne vije ket bet kaeroc'h e daolennoù. Ha daoust hag eñ n'eo ket labour un arzour, just a-walc'h, gervel d'ar bezoud an traoù n'eus ket anezho ? Pa sellan ouzh e daolennoù e teu soñj din en-dro eus komzoù e vignon Constable, pa skrive e oa hañval gantañ *e live Turner gant aezhennoù livek ha steuzius...*

Bered

Hentañ ar beredoù, ouzhpenn ma 'z eo kentelius-meurbet, a zo ivez habaskaus-kenañ : e pelec'h e c'hell yann Kêriad kavout kenkoulz peoc'h ha ken bras sioulañs ? Ouzhpenn-se, gwelet buhezioù krennet evel-se etre daou zeiziad, hag an traoù sonnet da viken er greunvaen pe er maen-marbr, a ra vad d'hor speredoù hedro, hag a ro harp deomp, a-wechoù, er gwashañ reuzioù.

Kustum on da vale kêr goude merenn, hag e-touesk ar baleadennoù a ran ingal e Sant-Brieg, hep mall na pal, hag hep nep mestr nemet va faltazi, ez eus unan hag am c'has betek bered Sant-Mikael, a-us da draoñienn wezennnek ar Gouedig. Peurvuiañ ne ran nemet hedañ ar voger diavaez, saludiñ delwenn Anatol ar Braz, en e sav dindan ur bodad gwez-tilh, stouet e benn a-us da Varc'harid Fulup, ar gonterez kozh eus Pluzuned, ha tremen hebiou d'ar gael houarn, hep mont dreist an treuzoù avat. Gwech ha gwech all, koulskoude, pa 'm bez amzer, ha pa vezan broudet gant ar c'hoant tañva an didrouz, ez an tre.

Chourikal a ra mein munut ar grouan gwenn dindan va zreid, endra ma 'z an, divall, hag hep pal resis ebet, etre an alezioù. Ur wech erruet e-kreiz ar vered, setu dirazon, bodet

en-dro d'ar c'halvar, ar beziou koshañ. Rod ar pevar amzer a zo bet o treiñ warno avat, hag an darn vrasañ anezho a zo bet ankounac'haet ha dilezet pell zo : ar glaveier yen en diskaramzer, ar barradoù grizilh, ar rev, ar skorn hag ar skouladoù erc'h er goañv, o deus krignet ar mein-bez ha diverket tamm-ha-tamm, gant pasianted hag aheurtegezh, anvioù ha deiziadoù a-ziwarno. War lod anezho koulskoude e c'haller c'hoazh lenn an enskrivadurioù. Piv avat en deus soñj c'hoazh eus Anna Kere (1803-1856), pe eus Mathurin Le Saulnier (1895-1936), Doue d'o fardono ? An daou-se ez eus ur gael houarn en-dro d'o bez. Merglet eo an houarn avat, hag ar podoù war eilpenn e kichen bez ar Mathurin-se, enno bleunioù plastik aet disliv abaoe pell, a laka tristoc'h c'hoazh an arvest.

Estreget bediz dianav a gaver er vered-se avat : un toulladig tud anavezet pe anavezetoc'h a repoz enni ivez, ha bep tro ma tremenan hebiou da garrezad ar soudarded “marv evit ar vro” e ran un tammig arsav dirak bez Lucien Camus, tad ar skrivagner brudet. Gloazet e oa bet e deroù-tre Brezel 14, faoutet e glopenn gant ur sklisen obuz, ha goude bezañ bet oberataet e oa bet kaset d'an adreñv, betek Sant-Brieg, lec'h ma oa bet digoret ur c'hlañvdi brezel. Eno eo e varvas prestik goude, d'an 11 a viz Here 1914. Ne oa nemet nav bloaz warn-ugent. Pelloc'h, e skeud un alezad gwez-tilh, setu bez ar skrivagner Roger Nimier, bet marc'h-h-blein luskad lennegel an Houzarded, goude an Eil Brezel Bed. Falc'het e voe en ur gwallzarvoud oto, hag eñ yaouank c'hoazh. Ha peogwir emañ ar gaoz ganeomp war ar skrivagnerien, deomp da saludiñ Louis Guilloux, ur Sant-Briegad anezhañ, hag a daolennas ken brav buhez an dud vunut en e romantoù.

Ar re o deus stourmet evit ar brezhoneg a gaver ivez ur roud bennak eus o buhez er vered : setu, harp ouzh ar voger su, ur c'haer a savadurig e maen-marbr, ur bodad roz-gwaremm a bep tu dezhañ. Bez ar gontez Vefa Sant-Pêr (1872-1967) an hini eo, gwelloc'h anavezet dindan hec'h anv-pluenn *Brug ar Menez Du*. Ganti an hini eo e oa bet diazezet, en ur maner, kreizenn sevenadurel Menez Kamm, e Speied. Pelloc'hik, damdost d'ar gael, setu un anv all hag a zo anavezet mat gant ar vrezhonegerien : Frañsez Vallée (1860-1949) an hini eo, anavezet dindan an anv Abherve, ha bet lesanvet *Tad ar yezh*. War ar bezse eo e kaver, engravet er marbr, bezskrivadur brezhonek nemetañ ar vered. E adskrivañ a ran amañ, evel m'em eus notennet anezhañ an deiz-se : *Bredeur evidoun-me pedit, ha pedit ivez evit Hor Bro, ma vezo digabestr, hep ken mestr na roue nemet Doue*.

Goude kimiadiñ diouzh Abherve e choman c'hoazh ur pennadig amzer o c'hwilostat etre ar bezioù. Lod anezho a zo gwall bombadus, ma rankan anzav, e-giz m'o divije bet c'hoant an dud da embann o finvidigezh hag o renk tre betek treuzoù ar bed all, digoun eus kelennadurezh hor breur ar Marv. War unan eus ar bezioù a-lorc'h-se, ur voualc'h a c'hwitell, laouen. Diouzh e vantell du-pod hag e bigos melen ez anavezan un tad. Van a ran da dostaat, met, spontet ganin, e nij kuit a vommoù nerzhus, a-us d'ar bodad gwez-pin, en tu all d'ar voger, war-gaout gwez an draoñienn. Eno, e gwasked ar c'hoad, e c'hello dic'hargadenniñ kement ha ma karo, hep bezañ direnket. A-raok mont kuit e taolan ur sell diwezhañ war un douraer plastik gwenn, e kichen ar gael, sko ouzh ar voger. A-us dezhañ, ur c'hog a goll, berad-ha-berad,

goustad, ha skuilhañ a ra an dour dreist an दौरаer. Er
poullig a zo en em stummet tro-dro d'an दौरаer, adsked
kann ur goumoulennig...

Diwezhañ tra a glevan en ur vont kuit a zo gwigou-
radenn an nor houarn, em c'hein. Poent eo mont da
adkavout ar re vev !

Ur gavadenn arkeologel e Karaez

Neb a ya da vale war ribloù aber Montroulez a c'hall gwelout, e Plouezoc'h, un dek kilometr bennak diouzh Montroulez, ur gaer a grugell vein diazezet war lein ur beg-douar o valirañ uhel war ar mor : karn Barnenez an hini eo, anezhañ koshañ monumant kañv bet savet biskoazh el ledenez arvorigat. Anaout a reer e Breizh kalz karnioù all evel re Landeda, Gwitalmeze, Karnag, Disignag, e-kichen Sant-Nazer, met ne oant ket ken meurdeus hag hini Barnenez. Ar c'harn-se, dezhañ 87 metr a hirder, ha 27 metr a ledander, a zo ennañ banelloù hag a gas d'un dousenn kambroù kañv.

Gouzout a reer bremañ e voe savet ar pikol karn-se etre 5000 ha 4600 kent J-K, da lavaret eo da vare oadvezh ar maen levnet. D'ar c'houlz-se eo ec'h en em lakaas an dud da c'hounit plantennoù ha da zoñvaat loened. A-nebeudoù e teuas ar meuriadoù da vezañ divonedus. Ur gemmadenn bouezus-kenañ an hini e voe, rak gant ar mod-bevañ nevez-se e krogas an dud da sevel lochennoù kelc'hiet gant difennoù, da ober priaoù evit mirout hag aozañ ar boued, ha da implijout binvioù e maen levnet, evel, da skouer, ar bouc'hili produet a-vilionoù

gant staliou-labour Plusulian, alese an anv bet roet d'ar prantad ragistorel-se gant an henoniourien.

Ar c'harnioù a gaver bremañ e Breizh a zo bet furchet ha studiet a-bell-kent gant tud ouiziek, arbennigourien war an henoniezh anezho. Floriant Cousseau, doktor war an arkeologiezh, a zo unan eus an arbennigourien-se, ha gouestlet en deus e dezenn skol-veur da studi karn Barnenez, just a-walc'h : n'eus ket mailhoc'h evitañ war istor ar savadur-se. P'edo war ar studi en doa bet tro da redek Breizh eus eil penn ar vro d'egile evit kaout ur sell hollekoc'h war aspadennoù ar prantad-se. Studiet pizh en doa ivez a bep seurt kartennoù ha luc'hskeudennoù diwar-nij, e klask roudoù arkeologel na vijent ket bet studiet c'hoazh. A-bell-gozh e oa bet sachet e evezh gant ul lec'h anvet *Tosenn Goassec'h*, un takad difurch e su da Garaez. Damgrediñ a rae e c'hellje bezañ, dindan an dosenn-se, ur savadur kañv, hogen n'er gouie ket a dra-sur. Anez furchal al lec'hienn avat, pe sonteal anezhi, d'an nebeutañ, e ouie e chomje en entremar. Hogen ne vez ket digoret ur chanter furchal a-aes-vat : ret eo kaout un aotre melestradurel diagent, ha sevel teuliadoù evit an arc'hantaouiñ foran. Un hir a hent !

Deuet eo a-benn, a-barzh ar fin, da zigeriñ ar chanter, hag ar sontadurioù kentañ, kaset da benn e fin miz Gouere 2019, a zo bet ken kalonekaus ken ez eus bet divizet ur gwir brogramm furchal war al lec'hienn. Ha Floriant Cousseau hag e skipailh studierien – Bretoned ha Suised – n'int ket bet dipitet : kavet o deus ur c'harn bras-meurbet, pa 'z eo mentek a-damdost evel hini Barnenez : 80 metr hirder ha 25 metr ledander ! Ur gavadenn a bouez-bras,

e gwirionez, hag a gadarna kement a oar ar skiantourien diwar-benn ar sevenadur en deus gwelet ar savadurioù-se o tiwanañ. Selaouomp Florient Cousseau : « Daou vil vloaz a-raok piramidennoù Egipt, e oa bet savet, e Breizh, savadurioù meurdeus gant mein. Savadurioù kañv a seblantont bezañ dreist pep tra. Goleiñ a reont bezioù strolladoù-tud, familhoù pe veuriadoù. An diaes ma oa ar sevel anezho a ziskouez splann o devoa an dud d'ar c'houlz-se anaoudegezhioù ha gouiziegezh teknikel dreist. Ret e oa ivez d'ar c'hevredigezhioù-se bezañ kemplezh ha lieselfennek. Anez ankounac'haat, evel-just, un aotrouniezh politikel ha speredel kreñv-meurbet ».

Kenderc'hel a raio al labourioù war al lec'hienn, rak traoù a chom c'hoazh da ziskoachañ e Tosenn Goassec'h, hag e lec'h all ivez, 'm eus aon !

Yves Corlay, un arzour eus an XVIII^{vet} kantved e Bro-Dreger hag e Bro-Oueloù

E-barzh iliz-veur Sant-Brieg, en ur c'haer a chapel gostez bolzet uhel ha sklêrijennet puilh gant ur prenestr gotek, e splann ur stern-aoter bras e koad kizellet ha livet, dediet d'ar Werc'hez, hag o tiskouez an arc'hael Gabriel o tont da lavarout dezhi e vo mamm da Jezuz. Ar patromoù bras kizellet a weler a bep tu d'ar stern-aoter-se, hag o tiskouez tudennoù eus an Testamant Kozh, a zo evel pa vent bev. Savet e voe ar stern-aoter-se e 1743 evit un urzh leanezed a oa anvet, d'ar c'houlz-se, *Seurezed ar Groaz*. Kuzhet e voe e-pad an Dispac'h, (en ur bern plouz, war a lavarer) ha gant se ne voe ket mazaouet pa lakaas an dispac'herien o c'hrabanoù war an iliz-veur, evit ober anezhi un etrepaouez evit pep seurt dafar.

An hini a savas an oberenn gaer-se a zo anavezet mat e anv hag e vuhez. Yves Corlay eo e veze graet anezhañ, ha ganet e voe, d'ar 17 a viz Even 1700, e Landreger, en un tiegezhiad arzourien diazezet a-bell-gozh e Bro-Dreger. E dad, hag e dad-kozh, araozañ, a oa bet kizellerien war o c'hont, hag e penn un atalier amunuzerezh, kizellerezh ha

delwennerezh, e Landreger hag e Lannuon. An tad e kaver roudoù eus e labour e paot a ilizoù : Porzhig, Kemperven, Planiel, Landerne, Treduder, Runan, Bulad-Pestivien... Ar mabig a voe lakaet war ar vicher a-yaouank-flamm, ha reiñ a reas a-vihanik, war a lavarer, merkoù anat eus e zonezonoù. Abred e voe desket dezhañ labourat gant ar gale, ar gizell hag ar verlop, ha pa voe echu e zek vloaz gantañ e ouie rabotat, turgnañ ha raskañ kenkoulz hag ar varrekañ micherourien. Anat e voe dezhañ ha d'e dad e tremenje e vuhez en e sav ouzh an eskemmez, e frond ar brenn-heskenn hag an diskolpadoù.

Labourat a reas e vuhez-pad, evit an Iliz dreist-holl, diwar urzhiad ar parrezioù pe ar c'humuniezhioù relijiel, war-bouez div pe deir gwech, ha gall' a reer adsevel red e vuhez hag adkavout al lec'hioù m'en em gavas enno, war un dro gant roll e labourioù pennañ. Deomp dezhi, neuze, mard oc'h prest da veajiñ, eveltañ, a iliz da iliz, e Bro-Dreger hag e Bro-Oueloù, ha pelloc'h zoken, dre hentoù enk ha stroñsus an XVIII^{vet} kantved. Dav e vo deoc'h avat kaout alan hir ha jaritelloù boazet !

E 1717, hag eñ yaouank c'hoazh, emañ o skoazellañ e dad war-dro aoter-veur iliz Planiel. Bloaz war-lerc'h emañ e Treduder, hag e 1721 ez adkavomp anezhañ e iliz Runan, ma sav daou stern-aoter evit ar chapelioù kostez. Gouzout a reer ivez ez eas betek Sant-Servez ha Brest, ha roudoù hon eus eus e chomadenn er gêr diwezhañ-se e 1724. An istorourion o deus pledet gant istor e vuhez a gav dezho ec'h en em stummas eno, en ur labourat gant ur mestr, dezhañ da varrekaat e-pad ur prantad.

Goude e eured e reas e zeumeurañs e Kastellaodren, ha labourat a reas kalz evit iliz-parrez ar gêr-se : sevel a reas eno ur stern-aoter meur, ha kizellañ ivez patromoù sent ha sentezed. Peuzgoude setu hon arzour kantreat e Sant-Brieg, o labourat war-dro ur gador-brezeg evit iliz Sant-Mikael. Ac’hano da Vonkontour n’eo ket gwall hir an hent, hag eno e lakaio e zonezonoù a zelwenner da dalvezout evit an iliz-parrez. Tremen a ra ar bloavezhioù, gouestlet d’an arz, ha mont a ra al labour war-raok, evel teurel dour dre ur sil : kizellerezh amañ, delwennerezh ahont. E 1744 emañ e Gwengamp : ar pennoù-kêr o deus galvet anezhañ war-dro ar blomenn, war ar blasenn vras. Ret eo reneveziñ ar c’haer a feuntenn-se, ha Corlay a labouro war ar chanter reneveziñ, a-gevred gant ur poder-staen anvet Le Nains. Adkavout a refomp anezhañ, diwezhatoc’h, pell a-walc’h diouzh e Vro-Dreger c’henidik, e Lambal, pe c’hoazh e Lanfeun... E chanter diwezhañ a voe e Loudieg, ha mervel a reas e Kastellaodren d’ar 24 a viz Meurzh 1776. Edo d’an ampoent o ren e c’hwezek vloaz ha tri-ugent.

Neb a zo dedennet gant an arz relijiel a c’hallo, gant frouezh, mont da welet an ilizoù a zo bet anv anezho en damsell prim emaomp o paouez ober : kavet e vez enno, alies en ur chapel gostez, pe ivez en-dro d’an aoter-veur, roud un arzour dibar, dorn-dis hag ampart, hag a zo bet merket don deoliezh ar Gristenien vreizhek gantañ.

Moulet e Breizh
Labour kaset war-raok penn-da-benn
e brezhoneg



Peurvoullet e ti Ouestelio (Brest)

Disklêriet hervez lezenn
Trede trimiziad 2020